

MIZ MARI
AR
PARROUZIYOU



AL. AUFFRET
Person Pleuveur



MOULEREZ E. THOMAS — GWENGAMP

—
1933

44378

H. Auffret, impr.

MIZ MARI
AR
PARROUZIYOU



18
237
624
AUF

NIHIL OBSTAT
Brioci die 7^a Octobris 1933.
Y. BROCHEN
Censor ex officio

AL. AUFFRET
Person Pleuveur



MOULEREZ E. THOMAS — GWENGAMP


1933

DISKLËRIADUR

Evit senti ouz gourc'hemennou an Tad Santel ar Pab Urban VIII, e tisklêrian he deus an Iliz Santel, ha hi hepken, karg ha galloud da verka petra eo eur burzud. Dre ze, evit ar pezh a zell ouz ar skoueriou pe burzudou displeget aman, ne gomzer nemet evel ma ra an dud etreze, hep kaout an disteran sonj da brezek en hano hon Mamm Zantel an Iliz.



EUR GER ARAOK



Meur a wech eo digouezet d'in klevet beleien hon farrouziou Breiz o klemm abalamour ne gaver ket nemeur a levriou brezonek da lenn d'ar bobl gant Miz Mari. Setu perak, daoust d'an nebeut a anaoudegez am eus eus yez hon zadou koz, am eus laket en em fenn ober eul levr neve en enor d'ar Werc'hez evit displega he vertuiou, he madelez hag he galloud dispar. War an dro, am eus digare da ziskouez eun tamm anaoudegez vat d'an Hini a zo bet evidon, a viskoaz, ar Vamm ar wellan.

Al levrig-man a vo, a gredan, aezet da lenn, ha peb hini a gavo ennan peadra da virout ha da greski e zevosion e kenver Rouanez an nenv.

Ra blijo gant Mari skuilh warnan he bennoz.

An eil a viz gouere 1933,
de ouel an Itron Varia Wir Zikour

Evit digeri Miz Mari



- 1) EUS A BELEC'H E TEU AN DEVOSION DA VIZ MARI ?
- 2) PENOS MIROUT ERVAT AN DEVOSION-MAN ?

I

Setu aman petra a c'hoarvezas en kêr Rom war fin an driouec'hvet kantved, eun devez ben-nak eus Miz Mae. Eur bugel diwar ar mêz a dastumas endro d'ezan bugale all eus e oad hag a zigasas aneze ouz troad eur skeudenn dimeuz ar Werc'hez, evel ma 'z eus meur a hini en Rom, eur c'hreuzeur o têvi dirazi de ha noz. Eno, ar vugaligou, gant o mouez skeltr, a ganas holl asamblez « Litaniou Mamm Doue ».

An de warlerc'h, ar memez bugale, ha kalz a reou-all da heul aneze, a retornas adarre dirak ar skeudenn vinniget. Hepdale, ar mammou a ziredas d'o zro : tamm ha tamm, eun niver bras a dud a gustumas dont evelse bep noz, da bedi ar Werc'hez.

Eneou kristen, glac'haret o welet an dizurziou a ren bep bloa, wardro an neve-amzer, etouez ar yaouankiz, a gavas gantê penôs e vije eun dra vat ha plijus da Zoue mirout ar gustumans zantel-man, evel digoll eus ar pec'hejou hag an droug graet, diouz an eil tu hag egile, gant ar

pennou-skany. Epad ma rede ar yaouankiz da heul an ebatou hag ar plijadurezou difennet, ar gristenien en em dastume dirak skeudenn ar Werc'hez dinamm evit pedi, kana meulodiou Doue hag e Vamm, ha terri e goler.

Evel-se, eo bet digoret pedennou ar miz maë! Savet evel eul lilienn dispar, war douar an Itali, e kreiz ar gêr zantel a Rom, dindan lagad Hon Tad santel ar Pab, an devosion gaër-man a deuas prim da veza brudet en hon bro Franz hag en pevar horn ar bed kristen.

Diwanet evel ar c'hreunenn dister a gomz Jezuz dionti en e Aviel, an devosion neve a greskas hag en em astennas war ar bed holl o tougen bleun ha frouez eus ar c'haeran.

A dra sur, miz Maë, miz ar bleuniou, a dle beza miz ar Werc'hez, miz hon Mamm eus an nenv, miz an Hini a zo hanvet gant ar Skritur-Sakr, « Lilienn ar mêziou, bleunienn an traouien-nou, rozenn liorzou Jeriko ».

Miz Mae a zo eur miz risklus evit an eneou dibenn touellet gant an ebatou a gaver stankoc'h er'bed, e koulz an neve-amzer ; met abaoe m'eo bet gwestlet d'ar Werc'hez, ar miz-man a zo deut da veza, evit ar gwir gristenien, eun amzer a furnez hag a zantelez.

Bugale ar vamm an dousan hag ar gwellan, saludomp eta, gant joa ha fiars, ar miz binniget a digoromp hirie dirak trôn hon Rouanez, pa digas d'imp levenez, grasou, frealzidigez, aberz ar Werc'hez. En gwirione, hed-da-hed ar bloa, n'eus ket eur miz kaeroc'h, santeloc'h evit heman.

II

Hen gouzout a ret, Mari eo bepred digor he skouarn evit chilaou hon fedenn ha rei d'imp hon mennad, ha koulskoude, epad ar miz-man, eo frankoc'h c'hoaz he c'halon. Grasou dispar he deus miret evidomp ; prest eo da skuilh aneze war bep hini ac'hanomp mar gouezomp an tu da blijout d'ezi.

Evit gwir, de he gouel, eur vamm eus an douar n'hell nac'h netra ouz he bugale holl dastumet endro d'ezi evit lavaret d'ezi o doujans hag o c'harante. Petra eta ne dleomp ket ni beza en gortoz da gaout a-berz Mari, hon Mamm garet, ac'h omp en sonj da enori epad eur gouel hag a bado tregont devez? Epad an deiou-man, ar grasou a ziskenno puilh eus ar Baradoz, rak tostoc'h e vefomp d'an Otrou Doue dre ar bedenn, ha Rouanez ar Baradoz a gemero muioc'h a breder gant he bugale an douar.

Bezomp leun a fiars : dre m'eo Mamm Doue, Mari he deus eur galloud dispar ; dre m'eo hon Mamm ive, Mari he deus evidomp eur garante dispar. Digoromp 'ta frank hon genou evit meuli ar Werc'hez ; digoromp frank hon c'halon evit he c'harout ; ha Mari a gargo ac'hanomp a c'hra-sou : « *Dilata os tuum et implebo illud* ».

Setu aman petra a vije mat d'imp ober evit santelaat ar miz-man :

1) Deomp bep noz d'an Iliz, da gemer lod ebarz ar pedennou ha lidou graet aman en enor d'ar Werc'hez. Ar pedennou, ar c'henteliou mat,

ar c'hantikou, ar bokedou hag ar goloiou das-tumet endro d'ar Werc'hez, a vo eun dudi d'hon daoulagad, d'hon diouskouarn, d'hon spered ha d'hon c'halon. Aman, e-tal skeudenn Mari, hon ene a gavo gwelloc'h an tu da zével betek trôn ar Werc'hez er baradoz, evit lavaret d'ezi hon c'harante, displega hon ezommou ha tenna war-nomp he bennoz.

2) Ebarz ar gêr, er plas enor, greomp eun trôn gant bokedou en enor da Vari, ha daoulinomp, beure ha noz, da lavaret hon fedennou. Gwech ha gwech, troomp hon daoulagad war-zu skeudenn Mari, evit kinnig d'ezi hon labour hag hon foaniou.

3) Epad miz Mae, tostaomp, da nebeutan, eur wech, ouz an Dôl zantel : n'eus ket eun dra hag a ra muioc'h a blijadur d'ar Werc'hez evit n'eo gwelet ac'hanomp o vont da gomunia, o rei lo-jeiz d'he Mab en hon c'halon.

Ober kement-se a zo plijout meurbet d'ar Werc'hez ha meritout beza diwallet ganti ha, war an dro, gonit an induljansou kaer staget gant an Iliz ouz pedennou Miz Mae.

SKOUER

Epad ma prezege eur retred d'ar Mammou kristen, en kêr Nancy, eur beleg a zigouezas d'ezan lavaret eo arabat, war digare ebet, koll fiens diwarbenn silvidigez eun den, rak, emezan, an dra an disteran dirak daoulagad an dud a ve alies talvoudek bras dirak an Aotrou Doue.

A-boan ma oa diskennet eus ar gador, eun itron en kanvou a zeuas d'hen kaout hag a lavaras d'ezan : « Aotrou, lavaret ec'h eus, breman souden, eo arabat koll fiens en madelez Doue. Kement-se a zo gwir mat, rak setu aman petra a zo c'hoarvezet ganin. Beza 'm oa eur pried, mat, kalonek, karantezus, met allaz, hep relijion. Koueza a reas klanv : kaer am eus bet alia, pedi, gouela, netra ne servije ; ma den n'houlle ket klevet komz eus resev e sakramanchou. Epad miz mae, arôk e varo, am oa kempennet eun trôn d'ar Werc'hez en em zi, gant bokedou hag a veze chenchet gwech ha gwech all. Pep sul, ma fried a yee d'ober eur valeadenn war ar meaz hag a zigase d'in eun dornad bleuniou a laken kerkent dirak skeudenn ar Werc'hez. Evit petra e kemere ar boan-se? Evit enori ar Werc'hez, pe evit ober plijadur d'in? N'oufen ket lavaret. Bepred eo, ne vankas sul ebet da zigas e zornad bleuniou ha me, diouz ma zu, ne baouezen ket da bedi evitan.

En deiou kentan a viz mezeven, e varvas en eun tôle, hep beza gwelet ar beleg. Pebez kalonad evidon! Deiou warlerc'h e obidou, e tigouezas d'in tremen dre gêr Lyon hag e teuas en em sonj mont da gaout Person santel Ars. A-boan ma voen aet en e di, ar beleg santel a lavaras d'in : « Paour kêz itron, gwall c'hlarret oc'h! Met hag ankouaet ec'h eus ar bokedou a deue du-ze, bep sul, epad miz mae? » O klevet kement-se, e chomis mantret, rak n'am oa kontet an dra-ze da zen. « Ac'hanta, eme ar Person santel, abalamour d'ho pedennou, Doue

en deus bet truez ouz an hini en deus enoret e Vamm : en eur ar maro, ho pried en deus goulennet pardon ; e ene a zo breman e kreiz ar Purkator ; dre hon fedennoù hag hon oberou mat, e tennfomp anezan ac'hane ».

Kement-man a zo eun testeni eus galloud ha madelez ar Werc'hez hag a dle dougen ac'hannomp da dremen santelamant Miz ar Werc'hez. An disteran tra a refomp eviti a blijo meurbet da Vari, dreist-holl ma ve graet gant kalon vat ha fian.



DEVEZ KENTAN

Penôs tremen Santelamant Miz Mae

- I. Karout gwelloc'h ar Werc'hez.
- II. Pedi anezi gant muioc'h a zevosion.

I.

Karomp Mari ! eme zant Bernard ; karomp anezi gant hon holl galon, gant hon holl nerz ! » Setu aze an urz roet d'imp gant Doue e-unan ! Dre Vari en deus digaset evidomp, war an douar, e Vav Unik ; dre Vari e resevomp c'hoaz hirie e holl c'hrasou. Kement tra vat a zeu d'imp eus an Nenv a dremen dre zaouarn ar Werc'hez, « Omnia per Mariam nos habere voluit ».

Karomp Mari ! Ar Sent, kement hini a zo aneze, dre o skridou, o c'homzou hag o buhe, a lavar d'imp ar memez tra : arabat eo d'imp tremen hep karout ar Werc'hez !

Piou eo an den a vije barrek da zisplega d'imp ar pez o deus lavaret ha graet ar Sent evit enori ha serviji ar Werc'hez ? Doktored an Iliz a ro testeni, an eil warlerc'h egile, penôs karout en gwirione Mamm Doue eo kerzet ebarz hent ar zilvidigez hag ar zantelez. « Mar 'm eus an eur-vad da garout ar Werc'hez a greiz ma c'halon, eme eur sant, ec'h on sur d'arruout er pal : ar Baradoz a vo d'in da viken ! »

Kristenien, diskennit, me ho ped, en goueled ho kalon ; klaskit ervat da c'houzout hag-en e karet, e gwirione, ho Mamm eus an Nenv, evel ma tle beza

karet. Ma deufe hirie Mari dirazoc'h, da c'houlenn diganec'h, evel gwechall Hon Salver digant an abostol Sant Per : « Ha te a gar ac'hanon ? » daoust hag-en e kredjec'h respont gant healed : « Ya, ma Mamm, gouzout a ret e karan ac'hanoc'h a greiz kalon ?... » Daoust ha, kentoc'h, n'eo ket stag ho kalon ouz krouadurien an douar ? Daoust hag-en n'eo ket dêvet ho kalon gant karanteziou direiz ? Epad ar miz-man, deuit d'ar skol gant ar Werc'hez. O klevet, bep noz, displega vertuiou Mari, he santelez, he madelez, e teskfet anavezout ha karout ho Mamm. Eur bugel eo e blijadur chom e kichen e vamm, sellet outi, chilaou he c'homzou, klevet komz diouti. An hini a ankouafe e vamm hag a bellafe diouti a vefe eur bugel digalon ha dinatur. Ar c'hristen a vefe yen e galon e kenver e Vamm eus an Nenv a deufe da veza gwasoc'h c'hoaz ! « Penôs, eme Sant Yann Berchmans, e c'hallfen tremen hep karout Mari, pegwir eo ma Mamm ? Piou a c'hellfe tremen hep karout ac'hanoc'h, o Mari, C'houi hag a zo skedusoc'h evit an heol, c'houekoc'h evit ar mel ? Evidon, n'am o paouez ebet ken am o kavet an tu da ziskouez d'ec'h eur garante dispar ».

II

An den devot, sant Bernard, c'hoant gantan da lakaat e venec'h d'en em erbedi ouz ar Werc'hez gant fiars, a lavare d'eze : « Ma bugale, deuit, hep doan, davet ar Werc'hez ; pedit anezi gant kalon ; hep tro, e kavfet anezi prest da rei d'ec'h ho mennad. Biskoaz ne voe klevet lavaret penôs Mari he dije graet skouarn vouzar ouz an hini en deus pedit anezi gant fizians ».

Suarez, brudet dre holl en abeg d'al levriou kaer en deus skrivet evit displega gwirioneziou hon Fe, a veze bepred, war e daol labour, dirak e zaoulagad,

skeudenn ar Werc'hez, ha pa digoueze d'ezan chom bouc'h, kerkent e troe e zaoulagad hag e galon warzu Mari ha, hepdale, ar sk'erijenn a d'arze en e spered.

Hon Mamm santel an Iliz a laka war muzellou ar Werc'hez ar c'homzou-man : « Evurus an hini a chilaou ma mouez, hag a chom bemde dihun war dreujou ma dor. An neb en deus kavet ac'hanon, ar gwir vuhe eo en deus kavet ». Kement-se a zo gwir meurbet, rak etre daouarn ar Werc'hez en em gav tenzoriou an Nenv, ha netra vat ne deu eus ar Baradoz hep tremen dre zorn Mari. E peb amzer, ar Werc'hez a gemer plijadur o chilaou pedennou he bugale hag o skuilh warneze he bennoz ; koulskoude, epad ar miz-man, gwestlet da enori anezi, Mari eo c'hoaz muioc'h tener he c'halon ha brasoc'h he madelez.

Deomp eta da c'houlenn diganti an holl c'hrasou hon eus ezomm. Pedomp ar Werc'hez evidomp, evit hon zud, evit hon Tad Santel ar Pab, evit ezommou an Iliz, evit hon Franz, evit ar bec'herien gêz, evit an Anaon paour. Betek-hen, mar eo bet klouar pe yen ho pedennou, da vihanan breman, pedit gant muioc'h a feiz, a fizians hag a galon. Na skwizit ket o pedit ar Werc'hez ha bet sur e chilaouo ho pedenn. « Kentoc'h e vije gwelet an nenv hag an douar o koueza en o foul, eme Loeiz a Vleiz, evit ne vije klevet embanni eo manet ar Werc'hez bouzar ouz an neb en deus pedit anezi a greiz kalon ».

SKOUER

Epad seziz Sebastopol, eun ofiser eus hon Bro a oa bet gloazet ha digaset d'an ospital dalc'het gant leanezed. D'al leanez karget d'ober war e dro, ar c'hlanvoud a lavaras kement-man :

« N'omp ket eus ar memez relijion. Protestant oun, ha protestant e vin betek ma maro. Ha gant-se, ger

ebet diwarbenn ar relijion! » Al leanez ne respontas netra. Da gentan, a talc'has da bedi, o vont hag o tont gant he labour, evel m'he devoa ar gustumans ; met o teurel plê e rae ar c'hlanvour fent gant he fedennou hag e rae goab outi, e paouezas da bedi dirakan. Koulskoude, ne vanke tro ebet da veza hegarat ha madelezus en e genver. Eun devez bennak, an ofiser, evel pa vije deut keun d'ezan, a lavaras d'al leanez : « Perak ne ret ken ho pedennou? Breman souden, am eus gwelet ac'hanoc'h o sellet ouzin gant eur sell a drue, Petra 'zo kiriek da ze? — Otrou, eme al leanez, lavaret a rin d'ec'h ar wirione. Epad ma sellen ouzoc'h, ma spered ha ma c'halon a oa troet warzu an nenv da bedi evidoc'h. Goulenn a raen digant ar Werc'hez Vari, repu ar bec'herien, kaout true ouz hoc'h ene. Klasket am eus teneraat kalon an Otrou Doue, ouz en em erbedi ouz e Vamm. — Koll ho poan a ret, paour kêz plac'h! Lavaret am eus d'ec'h ez oun protestant hag e varvin protestant. — Ya, eme al leanez, protestant 'oc'h, hen gouzout a ran ; ha c'houi, siouaz, etrezoc'h, protestanted, ne bleget ket da bedi ar Werc'hez. Met en despet da ze, Mari he devo true ouzoc'h, rak ho Mamm eo! — Ac'hanta, eme ar c'hlanvour teneraet, dalc'hit da bedi ar Werc'hez evidon : ho pedennou a ra kalz a vad d'in ».

Adalek an de-se, e voe chenchet kalon an ofiser : ne oa ken ar memez hini. Prestik goude, ar beleg a deuas da zeski d'ezan e gatekiz, da govesaat anezan ha da lakaat anezan e peuc'h gant Doue.

Nebeut deiou goude, ar maro a deue d'e gerc'hat, hag epad ma rente sioul e ene d'e Grouer, al leanezed daoulinet endro d'e wele a bede evitan Doue hag ar Werc'hez.

Pegen galloudus eo ar bedenn! Pegen truezus eo Mari e kenver an hini a laka enni e fizians! Bezomp eta aketus da bedi Mari en hon holl ezommou a gorf hag a ene.

EIL DEVEZ

Krouidigez dinamm ar Werc'hez

I. Kaerat enor evit ar Werc'hez !

II. Brasat levenez evit ar gristenien !

Etouez an holl grouadurien krouet gant Doue, n'eus ket unan hag a vije par d'ar Werc'hez Vari!

Abaoe penn kentan ar bed, eul lezenn bounner a bouez war an dud, lezenn ar pec'hed kentan. Adam hag Eva, touellet gant an Drouk-Spered, e c'hoarvezas gantê dizenti ouz o C'hrouer ha tanva ar frouez difennet. Kerkent, e voent kastizet, hag abaoe, — ha betek fin ar bed, — kement bugel a deu war an douar a zigas gantan mastar pec'hed hon zad kentan. Ha pep hini ac'hanomp a c'hell lavaret gant ar Roue santel David : « Konsevet oun bet e kreiz ar fallagriez hag e kreiz ar pec'hed ez oun bet ganet! »

Etouez bugale an dud, n'eus nemet unan hepken hag a vije kredet lavaret diouti : « Tota pulchra es et macula non est in te » : C'houi a zo glan penn-dabenn ha ne gaver ket ennoc'h an disteran kailhar. Ar c'hrouadur-se eo ar Werc'hez Vari!

Hon Tad Santel ar Pab Pi IX en deus diskleriet dirak ar bed-holl, evel eun artikl eus hon feiz kristen, penôs Mari, dre eur c'hras dispar, roet d'ezhi ha d'ezhi hepken, adalek ar penn kristan eus he buhe, dre veritou Hon Salver Jezuz-Krist, a zo bet diwallet diouz mastar ar pec'hed kentan.

Perak zo bet roet da Vari eur c'hras ken kaer ? Abalamour m'eo bet dibabet a-viskoaz, etouez an holl grouadurien, evit beza Mamm da Vab Doue graet den. Mab Doue, peurvadelez ha santelez holl, evel e Dad, a oa arabat d'ezan stoka ouz ar fank, en em veska gant ar pec'hed, na plega, e stumm ebet, dindan an Drouk-Spered, e enebour milliget ; ha setu perak Mari, galvet a beb eternite da veza skabell Mab Doue o tiskenn diouz an nenv er bed-man ; dibabet da veza Arbel sakr an Eil Ferson eus an Dreinded graet den, a oa dleet d'ezi, adalek ar penn kentan eus he buhe ha da viken, beza gwerc'h, pur ha glan a gorf, a spered hag a galon.

Bet 'zo war an douar sent ha sentezed fur meur-bet ; bez ez eus er baradoz aele kaeroc'h an eil evit egile ; met par da Vari ne vo kavet biken, nag en nenv na war an douar. Uheloc'h eviti en hent ar santelez n'eus nemet Doue hepken.

Eun devez bennak, ar Roue Sant Loeiz a c'houlennas digant e vignon Joinville petra a zonje en e galon diwarbenn Doue. « Doue, eme Joinville, a zo tra ken mat, ken gwelloc'h na hall bezan ».

Ac'hanta, mar c'houlennet diganin petra eo ar Werc'hez, me a responto d'ec'h, d'am zro : « Mari a zo eur c'hrouadur ken santel ha ken gwerc'h, ma n'eus ket eun all evelti ».

Setu perak an Arc'hael Gabriel, de an Annonciation, a zaoulin dirazi gant doujans hag a zalud anezi gant ar c'homzou-man : « Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Otrou Doue a zo ganec'h ; binniget oc'h dreist d'an holl gwraeg ».

Hag an Iliz a lavar d'ezi en he c'hantikou : « Evel ma ve gwelet ar bod lili o sevel e benn etouez ar brankou spenn, evel-se, Gwerc'hez vinniget, ez oc'h savet uhel a-us d'an holl verc'hed all ».

Kaeran labour en deus graet an Otrou Doue etouez an dud eo ene dinamm ar Werc'hez Vari. Pebez enor eviti!

II

Hag ive pebez levenez evidomp, he bugale !

Rak mar en deus graet Doue eur burzud ken bras, eo abalamour d'imp, abalamour d'hon silvidigez.

Gwelet hon eus anezi leun a zantelez, savet uheloc'h evit an holl grouadurien, dibabet a-viskoaz etouez an holl, gant an Dreinded santel, evit beza Mamm didach Salver ar bed ; choazet dreist peb unan evit beza Rouanez an nenv hag an douar. Sant Yann en deus he gwelet, e kreiz evurusted ha gloar ar Baradoz, en doare eur Brinsez dispar, gant an heol endro d'ezi evel eur vantel skedus ; gant daouzek steredenn endro d'he fenn, evel eur gurunenn perlez ; gant al loar dindan he zreid, evel eur skabell lugernus...

Ha piou eo eta an Itron gaer-ze hep he far ? Mamm Doue, gwir eo ! Met ive hon Mamm ! A dra sur, n'omp nemet pec'herien kêz ; met Mari, daoust da ze, ne sell ket ac'hanomp evel estranjourien : daoust pegen dister, pegen kabluze e c'hallfemp beza, Mari ne dizansav ket he bugale ; evel ar Vamm an teneran, n'he deus evit an hini diwezan eus he bugale nemet true, madelez ha karante. Mar eo Mamm an holl santelez, beza eo ive, war an dro, repu ar bec'herien gêz. Piou bennak a c'halv anezi d'hen sikour, n'eus forz pegen don eo aet en fank ar pec'hed, n'eus forz pegen reuzeudik e c'hallfe beza e stad, dreist-holl mar ped anezi dindan he hano a Werc'hez Dinamm, a zo sur da veza chilaouet ha sikouret ganti.

Mari konsevet hep pec'hed a zo bet pedet gant eneou glac'haret, hag o deus kavet konfort ha freal-

zidigez ; gant kalonou poaniet, hag o deus kavet nerz ha skoazell ; gant sperejou trubuilhet, hag o deus kavet peuc'h ha sklerijenn.

Siouaz d'imp, n'omp ket bet, evel Mari, diwallet diouz ar pec'hed kentan. Mar geo bet gwalc'het hon ene gant dour santel ar Vadeziant, n'eo ket bet mouget ennan, daoust da se, avel an drouk-youlou, tân an techou fall ha gwrizioù ar c'hoantegeziou direiz. Keit ma chomo ganimp eur c'houezadenn buhe, ar bed-man a vo bepred evidomp eun dachenn a vrezel, eun draounien a boan hag a zaërou. Ne gollomp ket fizians evit kement-se ! Dalc'homp da stourm gant nerz-kalon, dindan lagad hon Mamm santel, laket gant Doue en hon c'hichen evit hon nerza hag hon sikour, ha lavaromp d'ezi bemde : « O Mari konsevet hep pec'hed, pedit evidomp ! »

SKOUER

Kement-man a zo bet c'hoarvezet en Lourd, er bloa triouec'h gant eiz ha hanter-kant, ar bemped warnugent a viz meurz, de ouel an Annonasion, de ouel Itron-Varia ar C'hélou-Mad.

Bernadeta, savet abretoc'h en de-se, a zirede da Vassabiel gant hast, o sonjal e welje, en de-se, eur burzud bras bennak. Pan arruas ouz treid ar roc'hell, e welas dirazi eur skeudenn gaër, skedusoc'h evit an heol, ha kerkent e stouas d'an daoulin. Epad ma oa ar plac'hig gant he fedenn, e teuas en he spered eur c'hoant bras da c'houlenn digant an Itron piou a oa.

Ha setu hi da lavaret : « O Itron, bet ar vadelez da lavaret d'in ho hano »... Met houman a reas eur mouse'hoarz hag a chomas mut.

Eur pennadig goude, ar plac'hig a reas ar memez goulenn : an Itron a blegas he fenn, met ne respontas ger.

Eun deirvet gwech, Bernadeta a c'houlennas : « O Itron, me ho ped, lavaret d'in piou oc'h ! » Neuze an Itron a groazias he daouarn, war he c'halon, a zavas he zellou war-zu an nenv, hag o tigeri he daou dorn etrezek ar plac'hig, e lavaras gant humilite : « Me eo ar Gonsepsion Dinamm ! » Ha kerkent e tec'has kuit.

Nebeut a bloaveziou goude, eur bugel nao bloa a c'houlenne digant Bernadeta : « Neuze eta eo gwir-mat ec'h eus gwelet ar Werc'hez Vari ? »

— Ya, gwir mat ; evel ma welan ac'hanoc'h !

— Ha kaër e oa ? eme ar bugel...

— Ken kaër, eme Bernadeta, ken ne c'hoantaan nemet eun dra, mervel hepdale evit gwelet anezi adarre ».



TREDE DEVEZ

Hano Santel Mari

I. Hano leun a c'halloud.

II. Hano leun a zouzder.

I

Pep hini ac'hanomp en deus e hano roet d'ezan gant e dud war ar fons-badeziant.

Ar Werc'hez he deus bet ive eun hano, eun hano dispar.

Etouez ar grouadurien dibabet gant Doue evit eur c'hefridi ispisial, ez eus hiniennou hag o deus bet o hano diouz ar baradoz. Evelse eo bet kont gant sant Yann-Vadezour. Da Zakari, an Ael a lavaras : « D'az mab e roi an hano a Yann! » Hano ar Werc'hez a deu ive rag-eeun diouz an Nenv. A-viskoaz e oa bet choazet gant Tri Ferson an Dreinded santel : ha pa deuas eviti ar c'houlz da ziskenn er bed-man, an hano binniget-se a voe disklêriet gant Doue e-unan da Joakim ha da Santez Anna. Kerkent ha ma oa ganet, e voe roet d'ezi he hano : « Et nomen Virginis Maria » ; ha hano ar Werc'hez eo Mari! Goude hano Doue ; goude hano santel Jezuz, n'eus ket unan par da hano Mari.

Eus an hano-man e c'hallomp lavaret ar pezh a lavare sant Paol eus hano santel Jezuz : Hano Mari a zo leun a c'halloud ebarz an nenv, war an douar hag ive en ifern....

Hano Mari a ra levenez ar Baradoz : an Tad ne ve kammet evurusoc'h evit pa glev hano e Verc'h muian karet ; Doue ar Mab a drid e galon pa ve lavaret dirazan hano e Vamm dener ; Doue ar Spered-Santel n'eus ket eun dra hag a rafe d'ezan muioc'h a blijadur evit klevet meuli hani e Bried meurbet santel.

Pegen dudius eo an diskan a ve lavaret hag adlavaret, noz-de, er Baradoz, en enor da Vari! Ar Sent hag ar Sentezed n'o deus nemet eur vouez evit meuli Mamm Doue, o Itron, hag e keit-se, an Aêlê a son dudius gant o zelennou aour, en enor d'o Rouanez...

Daoulinet dirak o Mestrez, ar Sperejou evurus ne c'hortozont nemet eur ger eus he ferz evit ober raktal he bolonte.

War an douar n'eus ket, etouez an holl hanoiou, unan ken brudet evel hini ar Werc'hez. Anavezet eo gant ann holl. Ar bugel a zesk anezan war barlenn e vamm ; ar paour o klask e vara ; ar c'hlanvour kêz e kreiz e boan ; ar soudard war an dachenn a vrezel ; ar martolod e kreiz an danger ; ar pec'her kollet gantan ar peuc'h ; an holl, bras ha bihan, paour ha pinvidik, a c'halv Mari d'o sikour. Ha perak se? Gouveout a reont zo stag ouz hano Mari eur galloud dispar ; ha setu perak e c'halvont ar Werc'hez gant fizians ha karante. « Hano Mari a zo ken galloudus, eme Sant Anselm, ken e tigoue ganimp awechou primoc'h sikour goude beza pedet ar Werc'hez evit goude beza galvet hano Jezuz...

E tu-hont da ze, Mari a zo trec'h d'an diaoul ha d'an ifern.... Bruzudet he deus e benn d'an aerouant milliget hag abaoe, an drouk-sperejou a gren diraki hag a spont dirak he skeudenn hag he hano. Eur gomz, eur sin a-berz ar Werc'hez a zo awalc'h evit argas Satan hag ober d'ezan tec'hout gant spont : krena a ra diraki evel dirak eun arme renket war an dachenn a vrezel. Gant sikour Mari, an Iliz a zo deut, bep tro, a-benn eus he enebourien hag eus

mevelien an diaoul ; gant he skoazell he deus tre-c'het ar falz-kredennou hag ar skoueriou fall hadet etouez an dud gant heretiked divergont ; gant he harp burzudus, ar c'hristen a gav an tu da bellaat dioutan an tentasion ha d'en em denn diouz skilfou an drouk-spered.

II

Kalon ar bugel a drid en e greiz pa glev hano e vamm. Mari eo hano hon Mamm dimeuz eus an nenv, ha goude hano santel Jezuz, n'eus ket unan par da hini ar Werc'hez.

Setu perak e kanomp ebarz ar c'hantik :

« *Hano Jezuz eo ar c'haëran*
Hag hoc'h hini eo an dousan,
Mari,
Hag hoc'h hini eo an dousan ».

Sellit aman eur bugel bihan oc'h ober e gammejou kentan. Kerkent ha ma sant e nerz o vont da van-kout d'ezan ; adalek ma wel eun danjer pe eur riskl bennag ; kement gwech ma tigoue d'ezan kaout eur spont, tapout eur lamm pe beza gloazet, kerkent e c'halv e vamm : e kichen e vamm, n'en deus ken aon rak netra. Epad ar brezel bras diwezan, nag a wech, goude an emgann, ar paour kêz soudarded tizet hag astennet war an dachenn, beuzet en o gwad, a veze klevet, gant eur vouez klemmus, o e'hvel o mamm, evel pa n'o dije ken fizians nemet en hini he devoa ganet, maget ha savet aneze!

Evel ar bugel anwazet, evel ar soudard kêz gouliet gant an dir, galvomp hon Mamm eus an nenv, e kreiz hon foan, en eur an danjer, ha bep tro en em gavfomp pareet.

Hano Mari a zo, evit he bugale eur c'han, eur bedenn, eun tenzor.... « Hano Mari, eme Sant Anton a Badou, a zo eur c'han dudius d'ar skouarn, ar mel ar c'houekan d'ar geno, al levenez an dousan d'ar galon ».

Ebarz ar Skritur-Sakr, ar Spered-Santel a lavar d'ar Werc'hez : « Ho hano a zo henvel ouz eun eoul karget a c'houez vat. « Nomen tuum oleum effusum ». An eoul a zo ennan douster ha nerz ; terri a ra ar boan ; parean a ra ar gouliou, Hano Mari a deu ive, war e lerc'h, peuc'h ha konfort, pasianted e kreiz ar boan, grasou, bennoz ha sikour, c'houez vat ar vertuiou kristen, pare evit gouliou an ene. Nag a c'hrasou a zo deut hag a deu d'imp bemde eus hano ar Werc'hez vinniget ! Piou eo an hini a c'hallfe konta an holl burzudou c'hoarvezet gant tud a bep stad, sent ha pec'herien ive, goude beza galvet Mari d'o zikour ? Bep bloa, e welomp du-man ha duhont, bugale, yaouankiz, klanvourien, mammou glac'haret, peorien, tud ezommek pe ankeniet, o kemer an hent evit mont da bardona d'eun Iliz pe d'eur chapel savet en enor da Vamm Doue. Petra a gas aneze pell diouz ar gêr ? O fizians en galloud hag en madelez ar Werc'hez ! Sellit oute : eur chapel a zo gantê etre o daouarn. Chilaout o fedenn : hano Mari a return bepred war o muzellou ; ne skui-zont ket o lavaret hag o adlavaret an hano binniget eman ennan o holl fizians.

Eveltê, o vont gant an hent, epad hon labour, e kreiz hon foaniou, pa deu d'imp eur spont, eun dentasion pe eur riskl bennak, heuilhomp an ali roet d'imp gant Sant Bernard : « Respice stellam, voca Mariam » ; sellomp ouz ar steredenn vor ; galvomp

Mari. O heuilh anezi, ne gollfomp ket kon hent ; o pedi anezi, ne gouezfomp ket en dizesper ; o fiziout enni, e kerzfomp hep skuizder, gant nerz-kallon, betek ar pâ.

SKOUER

Ebarz buhe an Tadou Santel eus amzeriou kentan/an Iliz, e lennomp an istor-man. Eur manac'h koz, devot d'ar Werc'hez, aet da veva pell diouz an drouz, e kreiz eur c'hoad dôn, en devoa savet eun evnig : dre forz klevet e vestr o lavaret hag o adlavaret hano Mari, al lapous en devoa tapet deski ar memez diskan.

Eun devez bennak, o kaout digor dor e gaoued, an evn a c'hoantaas tec'hout ha tanva evurusted al liberte. Allaz! ne ouie ket petra a oa o c'hedal anezan. Epad ma tarnije, dizoursi, dindan an oabl glas, eur sparfel, o rodeal a-uz d'ezan, en em dôlas a dennaskel war ar paourig bihan evit hen mouga. O santout skilfou e enebour o treuzi e gig, an evn spountet a loskaas, evel eur griadenn, an hano a oa ken kustum da lavaret warlerc'h ar manac'h, hano Mari. Raktal, ar sparfel, evel pa vije deut e ivinou da veza notet, a ziskrogas, hag al lapousig dishual a retornas d'e beniti o kana a-bouez penn : « Ave Maria! » Hano santel Mamm Doue en devoa diwallet anezan diouz ar maro.

Pe eo kement-man eur gontadenn, pe n'eo ket, n'eus forz ; eun dra a zo gwir, an neb a laka e fizians er Werc'hez a zo sur da veza difennet ganti.

Lavaromp eta alies, ha gant devosion, hano Mari ; mammou kristen, deskit anezan abred d'ho pugali-gou ; galvit anezan e kreiz an danjer, pa en em gavfet dirak an dentasion. Ha gras d'ec'h da lavaret anezan gant fizians pa deuo ar maro da sklasa ho muzellou!

PEVARE DEVEZ

Mari Mamm da Zoue

I. Pegen uhel eo karg ar Werc'hez.

II. Pegen izelek eo he c'halon.

I

Seiz kant vloa bennak arôk donedigez Hon Salver er bed-man, ar profed Isai, sklerijennet gant ar Spere-Santel, a skrive ar c'homzou-man : « Eur Werc'hez a gonsevo hag a c'hano eur Mab, ha heman a vo hanvet Emmanuel, da lavaret eo, Doue ganimp! »

De an Annoniasion, en kêrig Nazareth, e teuas da veza gwir promese Isai.

Mari, achu ganti he femzek vloa, ha dimezet da zant Jozef, a oa deut da chom da Nazareth hag a dremene he amzer o terc'hel he zi, o neza, o pedi.

Eun devez ma oa Mari gant he fedenn, eur sklerijenn gaër a darzas endro d'ezi hag eun Aël gwenn evel an erc'h, skedus evel an heol, a deuas da zaoulina dirazi : « Me ho salud, emezan ; c'houi a zoleun a c'hras ; an Otrou Doue a zo ganec'h ; binniget oc'h dreist an holl gwraze ».

O welet hag o klevet kement-man, ar Werc'hez a vanas nec'het bras. Met an Ael a gomzas adarre : « N'ho pezet aon ebet, emezan, rak plijout a ret meurbed da Zoue. Setu ma konsevfet hag e c'hanfet eur Mab hag a rofet d'ezan an hano a Jezuz. Heman a vo brudet bras hag a vo graet dioutan Mab an

Holl-C'halloudeg. Doue a roio d'ezan trôn David, e Dad. Ren a reio da viken war diegez Jakob hag e rouantelez n'he devo ket a fin ».

Ar Werc'hez Vari ne ouie ket petra d'ober. Koulskoude, pa zisklerias d'ezi e vije Mamm da Zoue, hep koll he gwerc'hted, Mari a respountas : « Me a zo servijerez an Otrou Doue ; ra vo graët diouzin herve e volonte ».

Kerkent, eme an Aviel, an Arc'haël Gabriel a yeas kuit evit rei plas d'ar Spered-Santel, ha Mari a deuas da veza mamm ; an Eil Ferson eus an Dreinded Santel a ziskennas eus an Nenv hag ar Spered-Santel a grouas evit Mab Doue eur c'horf hag eun ene henvel ouz hon re.

Evelse, dre eur burzud dispar, Mari a zo deut da veza Mamm da Zoue.

Pebez enor eviti!

Beza mamm d'eur roue, beza mamm d'hon Tad santel ar Pab a zo eur garg enorus meurbet ; met petra na dleomp ket ni sonjal eus an hini a zo bet choazet a-viskoaz evit beza Mamm Salver ar bed ?

Adalek breman, Mari, war an dro gant an Tad Eternal, a hell lavaret d'an Eil Ferson eus an Dreinded : « Filius meus es tu » : « C'houi eo ma Mab, hirie am eus ganet ac'hanoc'h ». Roet he deus, e gwirione, ar pep gwellañ eus he c'horf hag eus he gwad evit ober Korf ha Gwad Mab Doue inkarnet. Jezuz a zo bugel d'ezi, evel ma 'z omp ni bugale d'hon mammou. Ha dre eno, Mari a zo dreist d'an holl mammou eus an douar, dreist d'an holl grouadurien eus ar bed. Evit sevel betek d'ezi, eo ret d'imp mont uheloc'h evit ar brasa Profeted, uheloc'h evit ar Batriarched koz, uheloc'h evit an holl Sent ha Sentezed ; kalz uheloc'h evit an Aele hag an holl Sperejou evurus. Dre m'eo Mamm d'an Eil Ferson eus an Dreinded, Mari a zo eus kerentiach Doue e-unan.

Dindan he zreid, eo manet ar peurrest eus ar grouadurien hag a-us d'ezi ne gavomp ken nemet Doue, an Dreinded Santel, an Tad, ar Mab, ar Spered-Glan. Kaerat burzud a zo bet graet gant Doue, a-viskoaz, eo rei da Vari ar galloud dispar da veza Mamm da Jezuz ! « Doue, eme Sant Bonaventur, en dije gallet ober ar bed brasoc'h evit nan eo, ober an nenvou uheloc'h evit nan int, met daoust d'e c'halloud dreistmuzul, ne oa ket evit rei da Vari eun enor brasoc'h evit an hini da veza Mamm d'hon Salver ! »

II

« Tra souezus, eme Sant Bernard, seul uheloc'h eo savet ar Werc'hez dirak Doue, ha seul izeloc'h en em lak he-unan, en he spered hag en he c'halon ».

Doue a ra kement a stad outi evel pa vije Mari par d'ezan, var ar memez renk gantan. Plega ra betek goulenn diganti he asant arôk peurober mister an Inkarnasion. N'eo ket, a dra sur, dre en dije ezomm eus mennoz pe sikour e grouadur evit ober ar pez a fell d'ezan, peogwir eo an Holl-C'halloudeg ; met dre eno, Doue a ziskouez d'imp an doujans en deus evit ar Werc'hez.

An Arc'hêl, digaset eus an nenv a-berz an Dreinded Santel, a ziskenn betek ti Mari en Nazareth, a stou d'an daoulin dirazi hag a ro d'ezi dre e gomzou eur veulodi dispar. An nenv hag an douar a chom mut o c'hortoz gant evez respount ar Werc'hez, rak ne vo graët netra ken he devo lavaret Mari ar « Fiat » a dle sovetaat ar bed.

Dirak kement-man, Mari a van nec'het bras. D'an holl meulodiou ne gavo nemet eur ger da respount, hag ar ger-ze a ziskulio d'imp goueled he c'halon : « Komz a ret d'in, emezi, da veza Mamm da Zoue, met me n'on nemet eur vatez, an hini diwezan etouez

an holl gwraze. « Ecce ancilla Domini » ; Me a zo servijerez an Otrou, ha netra ken!

Respount dispar! Ar gomz-se deut war ho muzellou, o Mari, eo an hini a lakao da ziskenn eus an nenv war an douar Salver ar bed, Mab Doue, an Eil Person eus an Dreinded en em c'hraet den. N'oc'h ket e sonj da denna lorc'h eus ar garg dispar fiziet ennoc'h gant Doue. Pell ac'hanê! Galvet da c'hene! an Hini a vo, dreist-holl, dous hag izel a galon ; e fell d'ec'h ive beza, dreist pep tra, izelek ha disterdirak an dud ha dirak Doue. Ha prestik goude ma vobet graët ar burzud, e kanfet er Magnificat : « Ahalamour m'en deus teurvezet an Otrou Doue diskenn e zellou betek izelled e servijerez, setu ma vin galvet evurus gant an holl boblou ».

Trelatet gant an ourgouilh hag ar c'hoant direiz da veza henvel ouz Doue, hon Mamm gentan Eva he devoa kollet ar bed-man, Dre ar vertu a izelegez ar Werc'hez he deus sovetaet ac'hanomp, rak dre ar vertu-ze eo deut da veza Mamm da Zoue : « Humilitate concepit ».

Heuilhomp e peb mare skouer hon Mamm eus an nenv ; mar fell d'imp plijout da Zoue klaskomp, arôk pep tra, bezan izel a spered hag a galon. Jezuz e-unan a lavar d'imp en e Aviel : « An neb en em izela a vo uhelaet ». N'ankouaomp ket eo an izelegez mammenn an holl c'hrasou. « Doue, a lavar d'imp d'e dro ar Spered-Santel, a dalc'h penn d'an dud lorc'hus hag e c'hrasou a vir evit ar re a zo izelek ».

SKOUER

Ar Sent o deus bet peb hini aneze eur stumm d'ezan e-unan da zerviji an Otrou Doue war an douar. Setu perak e welomp aneze o vont d'ar baradoz, darn, dre hent ar binijenn, darn-all dre

hent an doujans ; heman a zo brudet dre e oberou ; henhont, dre e brezegennou ; met ar peurvuian int bet holl devot d'ar Werc'hez.

Person santel Ars en deus bet, hed e vuhe, eun devosion dener evit Mamm Doue.

Kentan donezon a reas d'ezan e vamm a voe eur skeudenn vihan, e koad, eus ar Werc'hez. Netra ne reas biskoaz muioc'h a blijadur d'ar bugel. « Ar skeudennig-se, emezan, a blije d'in dreist pep tra : ne oan ket evit kuitaat anezi, nag en de, nag en noz : n'am ije ket gallet kousket e peuc'h ma n'am ije ket bet anezi etre ma daouarn pa 'c'h aen da gousket : epad an de, e vije ganin en em godel, hag epad an noz, 'n em c'hichen, ebarz ma gwele, Mari a zo ma c'hentan ha ma brasan karante : desket am eus karout anezi, pell arôk hec'h anavezout ».

Deut da veza person, an Otrou Vianney a lake e holl aked da lida goueliou ar Werc'hez ha da brezeg he vertuziou. Eur blijadur a oa klevet anezan o tisplega galloud ha madelez Rouanez an nenv. Kenta chapel a reas sevel a gonsakras d'ar Werc'hez.

Mari, eus he zu, ne zilezas ket he servijer. Meur a wech, e kreiz e labour hag ar brezel a rae d'ezan, noz de, an drouk-spered, e teurvezas en em ziskouez d'ar beleg santel evit hen difenn hag hen kenerza. Mar g'eo bet ken talvoudus e oberou ha ken santel e vuhe, n'eo nemet gant sikour ar Werc'hez a bede kalonek bemde...



PEMPET DEVEZ

Mari hon Mamm

I. Mari a zo hon gwir Vamm

II. Bezan eo ar Vamm ar gwellan.

I

Beza mamm a zo eun dra ken enorus, ken en deus c'hoantaet Doue e vije Mari Mamm e diou fêson, Mamm diou wech : da gentan, Mamm da Jezuz ; ha, war an dro, Mamm da bep hini ac'hanomp. Mar ne vije ar Werc'hez nemet Mamm da Zoue, ne gred-femp ket tostaat outi : kavout a rafe d'imp eo bet savet re uhel a-us d'an holl grouadurien evit prizout chilaou ouz hon fedennou ha diskenn he zellou betek bugale an dud ; met deut eo da veza, war an dro, hon Mamm, a setu perak e kredomp mont d'he c'ha-vout gant fizians ha karante.

Pegoulz eta eo deut Mari da veza hon Mamm ? D'an de ma teuas an Arc'haël Gabriel, a-berz Doue, da zaludi ar Werc'hez e Nazareth ha da zisplega d'ezi e oa bet choazet a-viskoaz da veza Mamm Salver ar bed ! Mamm da Zoue ha Mamm d'an dud eo bet graet war an dro... Rak en eur gemer, e korf pur ar Werc'hez Vari, eur c'horf hag eun ene henvel ouz hon re, Mab Doue a zo deut da veza den evel pep hini ac'hanomp ; breur da bep hini ac'hanomp ; hag an Hini a ra diouti e Vamm a zo hon Mamm-ni ive. Dre mac'h omp breudeur da Jezuz, e tleomp kaout ar memez Mamm gantan. Dre ze, pa respountas

« fiat » d'an Arc'haël, n'eo ket Mab Doue hepken, met pep hini ac'hanomp a deuas da veza kerkent bugel d'ar Werc'hez, hag adalek neuze, eme Sant Bernard, Mari a dougas ac'hanomp en he c'halon, evel ma toug eur vamm he bugale.

Koulskoude, betegout na chomje e spered an dud eun douetans bennak diwar-benn an dra-man, Jezuz e unan en deus bet c'hoantaet hen embann, e par ar maro, sklêr ha reiz, dirak ar bed.

De Gwener ar Groaz, Mab Doue, e pign etre an nenv hag an douar, achu gantan labour hon silvi-digez, a oa o c'hortoz renti e ene d'e Dad. O tigeri, evit ar wech diwezan, e zaoulagad hanter-serret ha tenvalet gant ar maro, e welas ouz troad e Groaz Sant Yann, e ziskibl muian-karet, hag ar Werc'hez, e vamm dener, beuzet en eur mor a zaërou. En eur sellet outê, Jezuz a lavaras d'e Vamm : « Setu aze ho mab », ha d'an Abostol : « Setu aze ho Mamm ».

Arôk kimiadi diouz ar bed-man, Hon Salver a felle d'ezan rei d'imp eun testeni dispar eus e garante ha kloza e destamant, en eur lakaat war hon hano kaë-ran ha diwezan tenzor a vane c'hoaz gantan, e Vamm santel.

N'eo ket Yann hepken, met ni holl gwitibunan a zeu da veza, adalek neuze, gwir vugale d'ar Werc'hez hag adalek neuze ive, Mari he deus e kenver pep hini ac'hanomp an holl garante he deus bet evit he Mab divin.

II

Goude beza bet evit Jezuz ar Vamm an deneran. Mari a zo ive en hon c'henver ar Vamm ar muian karantezus.

Kaëran tenzor en deus bet eur bugel digant Doue eo e vamm ; ne gav ket e c'hallfe beza ebarz ar bed holl eur c'hrouadur ken mat, ken dous ha ken tener hag e vamm.

Mar eo gwir kement-man, evit ar pezh a zell ouz hon Mamm eus an douar, petra da sonjal neuze diwarbenn ar Werc'hez Vari, hon Mamm eus an nenv ?

Evit kompren gwelloc'h ar garante dispar he deus evidomp, klaskomp gouzout pegement hon eus koustet d'ezi. Pelec'h eman ar bugel hag en dije koustet kemend-all d'e Vamm ? Diouti e vije gallet lavarout evel diouz Hon Salver : « In finem dilexit eos » ; ne oa ket, daoust d'he c'harante, evit mont pelloc'h ma 'z eo aet.

Sellit anezi war Vene Kalvar, en he sav ouz troad ar Groaz, o unani he daerou hag he glac'har gant poaniou ha gwad he Mab muiant-karet. « Kement o deus gouzanvet an holl verzerien, eme Sant Anselm, a zo nebeut a dra e kenver ar c'hleze a anken en deus treuzet ene ar Werc'hez Vari war ar C'halvar ». Chilaouit anezi o hirvoudi gant ar Profed : « O c'houi holl hag a dremen dre an hent, sellit hag-en zo eur verzerenti par d'am hini ! »

Mar d'eo digouezet gant Mari loskaat Jezuz etre daouarn e vourrevien hag unani he merzerenti gant hini hon Salver, n'eo nemet dre garante evit hon ineou, ha dre eno, he c'harante a zo bet trec'h d'ar pec'hed ha d'ar maro. Kement he deus karet ac'hannomp ken he deus roet evidomp buhe he Mab a gare kalz muioc'h eviti he unan. Pegen ker en deus koustet d'ezi beza hon Mamm !

Piou eo ar c'hristen a c'hallfe biken ankouaat an dra-man ? Ebarz ar bed, e seller evel an diwezhan eus an dud ar bugel a digoue d'ezan ankouaat ha dilezel an hini he deus douget, maget ha savet anezan. An

neb na gar ket e vamm n'eo ken eur bugel e hano ! Ha kemend-all a zo gwir eus eur c'hristen ha n'en deus ket a garante evit ar Werc'hez e Vamm.

Alies hoc'h eus klevet konta n'eo ket barrek an den da ziskleria an deneridigez he deus, evit he bugel, ar vamm e goueled he c'halon. « Met piou neuze, eme Sant Bernard, a deuo a-benn da zisplega dirazomp karante Mari evit he bugale ? Ar garante-ze, emezan, a zo ken hir, ken e pado pelloc'h evit an holl gantvejou ; — ken ledan, ken e tiz betek ar penn pellan eus ar bed ; — ken uhel, ken e sav betek an nenv ; — ken dôn, ken e tiskenn betek dor an ifern ».

Tertullian a skrive : « N'eus tad ebet seurt gant Doue », « nemo tam Pater ». Kerkoulz all, n'eus bet biskoaz ha ne vo biken eur vamm seurt gant ar Werc'hez ; kalon par d'he c'halon.

Pa ganomp an « Ave Maris Stella », e kasomp d'ezi ar bedenn-man : « Monstra te esse Matrem » ; diskouezet ez oc'h hon Mamm. Mari, marvat, n'he deus ezomm ebet ma vije digaset sonj d'ezi eus he deveriou ; met awechou e c'hallfe respount d'imp, evel ma reas, eun de bennag, d'eur pôtr yaouank : « Monstra te esse filium » : Ha te, diskouez d'in ez out ma mab ». Rak digouezout a ra d'imp, alies mar-teze, ankouaat ar pezh a dleomp d'hon Mamm eus an nenv.

Mari a zo Mamm da Zoue ; stouomp d'an daoulin dirazi gant doujans ; Mari a zo hon Mamm ive ; en em daolomp etre he diouvrec'h gant fizians ha karante !

SKOUER

D'an oad a zaouzek vloa, Santez Thereza e tigouezas d'ezi koll he mamm. Mantret he c'halon, ar paour kêz bugel en em daolas d'an daoulin dirak aoter ar

Werc'hez hag he daoulagad leun a zaerou, a reas da Vari ar bedenn-man : « O Gwerc'hez vinniget, Rouanez ar baradoz, setu m'eo lammet diganin ma mamm gêz. Arôk kuitaat an douar, ar vamm vat-se he deus desket d'in ez oc'h trugarezus e kenver an holl, dreist pep tra e kenver ar vugale emzivad. Breman e choman ma-unan-penn ebarz ar bed ha n'am eus ken den da garout ac'hanon. Teurvezit eta, me ho ped, derc'hel en em c'hichen plas an hini am eus kollet hirie. Bezit hiviziken ma Mamm ha diwallit ac'hanon a bep droug. D'am zro, me a bromet d'ec'h beza, hed ma buhe, eur bugel sentus ha karantezus en ho kenver ».

Herve kont, ar bedenn-man a voe digemeret mat gant ar Werc'hez. Santez Thereza he deus bet digant Doue grasou dispar ; renet he deus eur vuhe santel meurbet ; dre he dousder, he laouenedigez, he spered lemm hag he skiant, e c'honzas da Zoue eleiz a galonou. Hirie eo brudet dre-holl evel unan eus ar brasan sentezed.

E skol Santez Thereza, deskomp beza hed hon buhe gwir vugale d'ar Werc'hez.



C'HOUEC'HVET DEVEZ

Mari hon Advokadez

- I. Epad hon buhe.
- II. En eur hon maro.

I

Ebarz ar bed-man, eo diaes awechou d'ar beorien gêz tostaat ouz eun den pinvidik bras, evit goulenn digantan an aluzen. An dud vras ne glaskont ket fret gant an dud paour : pep hini war an douar a zalc'h e renk, herve e stad. Setu perak, pa fell d'imp kaout eur sikour bennak digant eun den galloudus, elec'h mont d'hen kaout, ni hon unan, o sonjal ne vo ket marteze digemeret mat hon c'homzou, e pedomp unan eus e wellan amezeien, pe unan eus e gerent da zisplega dirazan hon mennad. Kement-se a c'hoarvez bemde etouez an dud : ar re vihan, evit beza gwelloc'h ha primoc'h chilaouet, a gav ar stumm d'en em erbedi ouz ar re vras o lakaat ar re-all da gomz evitê. Mar kavomp mat goulenn sikour digant an dud, evit ar pezh a sell ouz madou ar bed-man, bezomp aketus, dreist-holl, da glask skoazell evit ar pezh a sell ouz hon silvidigez.

N'eo ket an difennourien a vanko d'imp. Ar Sent, hen gouzout a reomp, eo o micher pedi evidomp an Holl-Challoudeg, perc'hen an holl vadou.

Koulskoude, a-us d'ar Sent, ha kalz uhelloc'h evitê, hon eus, eme an Abostol Sant Paol, eun Advokad he-

lavar a dremen e amzer noz de o tifenn ac'hanomp, hag a ve, pep tro, chilaouet ouz e vouez, abalamour d'e c'halloud ha d'e santelez, Mab Doue e-unan, hon Salver Jezuz-Krist.

En e gichen, e penn uhelan ar baradoz, hon eus, war an dro, eun Advokadez dispar, e Vamm hag hon hini, ar Werc'hez glorius Vari. Ar garg-se a zo bet fiziet enni pan'eo bet roet d'imp evit Mamm.

Micher ha dêver eur vamm eo diwall he bugale. Herve komzou Sant Jermen, ar Werc'hez n'eo ket evit harz da zifenn ac'hanomp ouz dorn justis an Otrou Doue. Epad ma ve Jezuz, hed an amzer, o skoazia ac'hanomp dirak e Dad, Mari, diouz he zu, ne baouez ket eur begad da gomz diouzimp d'he Mab, ha ken e vo achu gant ar bed-man, ne skuizo ket o chom dirak trôn an Otrou Doue da bedi evit he bugale, mat ha fall, evit an dud fur hag evit ar bec'herien.

Advokadez leun a vadelez, Mari ne ve kammet skuiz gant he labour hag he fedenn. Advokadez truezus, n'he deus biskoaz dilezet eun den reuzeudik na, zoken, ar brasan torfetour ; advokadez meurbet galloudus, ne c'houito biken da sovetaat kement hini en deus laket e fizians enni.

Hanvet eo gant an Iliz Gwerc'hez leun a drue, mammenn hon levenez ; pare ar re glanv ; repu ar bec'herien ; konfort an dud ankeniet ; sikour ar gristenien, hag evit gwir, Mari a zo ganti louzou mat da barea an holl glenvejou, gouliou ar c'horf, gouliou ar galon ha gouliou an ene.

Seul-wasoc'h en em gav eur bugel e kreiz an dristidigez, ar boan hag an dienez, seul-kaeroc'h eodouget e vamm da stanka he daërou ha da gas d'ezan sikour, skoazell ha frealzidigez.

Hano Mari a sinifi Mamm a Drue, Mamm a drugare,

An drugare, pe ar vizerikord, eo ar vertu a doug ac'hanomp da gaout true ouz hon nesan ha d'hen sikour en e holl ezommou. Ar Werc'hez a c'hallfe lavaret gant an den santel Job : « Abaoe ma 'c'h on ganet, an drugare, deut ganin war an douar, n'he deus graet nemet kreski bep ma kresken ; diboaniet am eus ar paour hag ar bugel emzivad ; konfortet am eus kalon an intanvez ; roet am eus ar gweled d'an den dall, ar bale d'an den mac'hagnet ; bet oun eur vamm evit an holl dud ezommek.

Muioc'h a brez a laka Mari da chilaou ac'hanomp evit na lakomp ni d'he fed. « Kement a hast he deus, eme Sant Bonavantur, d'ober vad d'imp, ken e ve poaniet ha glac'haret pa ankouaomp en em erbedi outi ».

Deomp gant fizians etrezek trôn an Drugare, hag hon devo sikour ha pardon !

II

Mari a ziwall ac'hanomp hed-da-hed hon buhe ; hon diwall a ra gwelloc'h c'hoaz e pred hon maro.

Epad ma chomomp war an douar hon eus daou advokad d'he difenn, Jezuz hag e Vamm ; met eur wech deut evidomp an eur da guitaat ar bed-man, Jezuz a baouez da veza hon difenner evit dont da veza hon Barner, rak Hen a zo bet karget gant e Dad da varn ar re veo hag ar re varo.

N'hon eus ken nemet eun advokadez ; ne van ken ganimp nemet ar Werc'hez Vari evit hon miret a vont da goll.

O ! na pegen spouronnus eo evit eur paour kêz den dare da vervel, bet marteze eur pec'her kaledet, sonjal e vo ret d'ezan, hepdale, renti kont eus e wall vuhe ! Gwelet a ra aze, digor dirak e zaoulagad, levr

e gonsians karget a dorfejou ; e kichen, eur Barner didrue ha gwirion ha ña glev ken nemet mouez e justis ; en tu-all, an drouk-spered, hast gantan da damall d'ar pec'her e holl faziou kuzet ha anavezet.

Digare a zo da grenn, a dra sur ; ha koulskoude, bugel ar Werc'hez a vije arabat d'ezan koll fizians. An Hini en deus galvet, ken alies en e vuhe, dindan he hano a Vamm ; an Hini en deus pedet bemde evel Repu ar pec'herien, Mari, e Rouanez, a zo aze e-tal e wele ; evel eur vamm e kichen kavel he bugel, evit beza e Advokadez dirak Barner leal an eneu hag hen difenn eneb d'an tamaller fallakr ha divergont.

« Epad o buhe, eme ar Werc'hez da Santez Jertrud, en em gargan da rei d'am servijerien an holl grasou o deus ezomm ; e pred ar maro, e teuan me ma-unan en o c'hichen, evit o difenn dirak lez-varn ma Mab, ha gant eur sell hepken e argasan diwar o zro an drouk-sperejou ».

Pegen evurus eta an hini a zo diwallet er stumm-se gant ar Werc'hez, war e dremenvan ! Mari, herve ma lavar ar Sent, eo ar skeul vuzudus a gas an eneu eus ar bed-man d'ar baradoz ; — ar pont ac'h eomp drezan, dispount, eus an douar da rouantelez an nenvou. Hi eo dor ar baradoz ; etre he daouarn eman alc'houe palez an evurusted peurbadus : en despet d'an ifern, he gwir servijerien n'efont biken da goll.

SKOUER

En kêr Bariz, e oa bet laket er prizon eun torfetour barnet da veza dibennet. Arôk ma voe kaset d'ar maro, e voe galvet war e dro eur beleg brudet dre e zantelez, e hano an Tad Bernard.... Heman, kaër en doe prezeg ha pedi, ne voe ket evit dont a-benn eus ar pec'her. O welet e kolle e amzer hag e boan, an Tad, a-benn ar fin, a lavaras d'ezan : « Ma

den mat, pegwir n'houlet ket plega, ne van ken nemet eun dra d'ober. Kaer am eus esaat ober d'ec'h displega war ma lerc'h an « Ave Maria », na pa vije ken, e chomet mut evel eul loen. Ac'hanta, pa ne lavaret ket ho pedenn, bezit da vihanan ar vadelez da lonka anezi ». Ha setu ar beleg da gemer eun tamm paper moulet warnan komzou ar bedenn a anavezomp holl dre envor ha da dostaat anezi ouz genou ar prizonier. Heman, sammet gant pouez e chadenou, a oa diaes d'ezan en em zifenn. A-benn ar fin, e asantas senti ha adlavaret, warlerc'h an Tad, komzou santel an « Ave Maria », o sonjal e vije loskaet e peuc'h goude se.

Ar beleg a rannas ar c'homzou kentan, hag egile da respount ger evit ger. Ne oa ket peurachu gantê ar bedenn, ma 'n em lakas an torfetour da zifronkal evel eur bugel. Kovesaat a reas e wall vuhe gant eur mor a zaërou en e zaoulagad, ha mervel a reas evel eur c'hristen mat.

Setu aze eur gwall den bet sovetaet, kazi evel en despet d'ezan, dre c'halloud ha madelez ar Werc'hez.

Kustumomp lavaret, gant fizians ha devosion, an « Ave Maria », evit gallout fiziout war sikour ar Werc'hez en hon holl ezommou ha, dreist-holl, e par ar maro.



SEIZVET DEVEZ

Kalon dous a Vari

I. Kalon dispar.

II. Kalon din da veza karet.

I

A-viskoaz ha dre-oll, abaoe eo ar bed bed, ar galon a zo bet prizet evel al lodenn ar c'haeran, evel an tenzor ar muiian talvoudus a gaver e kreiz an den. Pa fell d'imp gouzout pegement e talvez unan bennak, e klaskomp, arôk pep tra, diskenn betek e goueled e galon. Dre e galon, evit gwir, e c'houveer petore danve a zo oc'h ober eun den.

Ma fell d'imp eta anavezout gwelloc'h ar Wer-c'hez, greomp eur sell war he c'halon. Na pebez tra burzudus a gavfomp dirak hon daoulagad!

Ar galon-se a zo labour Doue e-unan, ha Doue, pa 'n em garg d'ober eun dra, n'her gra ket war hanter.

Ar galon-se a zo bet kizellet gant an Holl-C'haloudeg evel ma ve flouret eur berlezenn gant eur micherour.

Ar galon-se a zo bet a-viskoaz skedus evel an oabl, glan evel ar goulm, gwenn-kann evel an erc'h....

Doue en deus hadet enni holl vertuziou ar sent hag an Aele, an holl santelez, an holl c'hrasou, donezonou ar Spered-Santel, kement madelez a c'hall beza laket en eur c'hrouadur ; en doare ma n'eus bet biskoaz ha ne vo kavet biken eun tenzor par d'ez.

Ar galon-se a zo bet choazet gant Doue evit beza palez e Vab graet den ; ac'hane en deus tennet Jezuz e gorf sakr ; enni en deus graet e ziskuiz, evel en eur c'havel ; warni eo bet luskellet ar Mabig Jezuz ; enni n'eus ket eul lec'h ha na vije bet entanant gant gwir garante Doue.

Epad e vuhe penn-da-benn, adalek an de m'eo bet konsevet betek an de ma pignas d'ar baradoz, n'eus bet disparti ebet, koulz lavaret, etre Jezuz hag e Vamm ; hag etreze n'eus bet nemet teneredigez ha karante start ha gwirion.

Biskoaz n'eus bet, ha biken ne vo gwelet, diou galon o korda ken mat ! Gwelloc'h evit Sant Paol, Mari he dije gallet lavarout : « N'eo ken me a zo beo, met Jezuz, kentoc'h, a zo beo ennon ». Ha mar eo aet Sant Kryzostom betek prezeg e oa kalon an Abostol bras war ment hini Jezuz, Mari eo muioc'h dleet d'ez i embann, dirak ar bed holl, eo henvel he c'halon ouz kalon he mab Doue.

N'eus bet den o karout Doue evel Mari, ha kenkoulz all, n'eus den o karout ac'hanomp evelti. Dre he c'harante evit Doue, he deus trec'het war an holl sent hag an holl Aele war an dro ; dre he zeneridigez en hon c'henver, eo trec'h d'an holl mammo.

Kalon eur vamm a zo eun dra ken kaer, ken dous, ken mat, ken ne gaver netra teneroc'h war an douar. Micher eur vamm eo hada madelez endro d'ez i. He fijadur eo rei evit he bugale he danve, he amzer, he foan, he daerou, he yec'hed, betek he buhe, mar he ret. Ne souzo dirak netra evit danzen evurusted d'he c'hrouadur.

Dirak eur garante ken tener, an Tad Lacordaire a lavaras, eun devez bennak, e kador Iliz-Veur an Itron Varia, e Paris : « Arabat eo renti d'eun den ar pez n'eo dleet nemet da Zoue hepken ; met mar bije ret d'in adori eul lodenn bennak eus eun den,

gwelloc'h e vije ganin daoulina dirak e galon evit dirak e spered ».

Ac'hanta, mar n'eo ket an den evit displega ar garante kuzet e kalon eur vamm, piou a vo barrek da ziskleria teneridigez ar Werc'hez e kenver he bugale?...

He c'harante evidomp a zo aet betek ar penn pelan, Goude Doue, hon tad, n'eus ket unan o karout ac'hanomp evelti...

« Mar fell d'ec'h, eme Sant Yann, gouzout betek pelec'h eo aet evidoc'h karante an Otrou Doue, sonjit ervad en deus roet d'ec'h e Vab Unik ».

Mari n'he deus ket graet nebeutoc'h...

Dre garante evidomp, he deus roet gwelloc'h evit he buhe, gwelloc'h evit he c'halon : kinniget he deus evit dasprena hon eneou he Mab muian-karet, hon Salver Jezuz-Krist stag ouz ar Groaz war Vene Kalvar.

Goude kement-man, piou eo an hini a gredfe dis-fiziout diouz karante ar Werc'hez evitan?

II

Mari a zo evidomp ar Vamm ar wellan ; bezomp en he c'henver bugale karantezus. Beza 'zo, etouez ar gristenien, tud ha na anavezont ar Werc'hez nemet pa o deus ezomm diouti. Kaeroc'h evit se hon eus d'ober.

Peogwir n'he deus ket marc'hataet evit diskouez d'imp he c'harante, diwallomp ervat da varc'hata evit diskouez d'ezi hon anaoudegez vat.

Ar pezh a fell d'ezi, arôk pep tra, eo ma vefe rentet d'ezi karante evit karante!

Pep den a zo douget, dre natur, da garout kement a zo kaer, mat ha galloudus. Ac'hanta, n'eus bet bis-koaz eur c'hrouadur ken santel, ken madelezus ha

ken galloudus ha Rouanez an nenv hag an douar. Setu perak e tleomp karout anezi a greiz kalon!

An hini n'en deus ket desket abred karout ar Werc'hez, lakaat enni e fizians, en em erbedi outi e kreiz e boaniou, a vanko d'ezan bepred eun dra bennak evit beza evurus war an douar.

Sellit aze ar bugel!

El vrasan plijadur eo beza war varlenn e vamm ; ne ve kammed skwiz en he c'hichen ; da hep mare, e sell outi gant eur mousc'hoarz ; konta a ra d'ezi kement tra a dremen dre e spered ; kerkent ha ma tigoue d'ezan kaout eur spont pe eur boan bennak, dioustu en em daol etre he divrec'h ; ha pa ne ve ket gantan e vamm, ar sonj anezi a chom en e spered en pep lec'h hag en peb amzer. El vamm a zo evitan e holl binvidigez : kavout a ra d'ezan n'eo ket evit beva hep-i.

Evel ar bugel-man, kustumomp beva en kompagnunez hon Mamm vat ; bevomp bepred dindan he lagad ; bezomp sonj outi hed-da-hed an de, diouz ar beure pa dihunomp, d'an noz pan eomp da gousket ; e kreiz ar boan, an dentasion hag ar riskl, deumomp da glask repu ha konfort war boull he c'halon ; lavaromp d'ezi alies er bedenn verr bennak, evel ar re-man : « Kalon dous a Vari, bezit ma silvidigez ; — Santez Mari, pedit evidon ; — Ma Mamm vat, diwallit ac'hanomp ; diskouezet ez oc'h ma Mamm ! »

El tu hont da ze, eur bugel mat ne gred ket ober d'e Vamm an disteran poan : bepred e ve o klask ober plijadur d'ezi.

Ni ive, greomp plijadur d'ar Werc'hez hag, evit-se, greomp en pep tra bolonte an Otrou Doue. Taolomp evez, dreist-holl, da bellaat diouz ar pec'hed ; diwallomp ervat na deufemp, dre hon sonjou, hon c'homzou pe hon oberou da c'hlac'hari kalon hon Mamm vat.

En eur ger, ma fell d'imp beza gwir vugale Mari, bezomp gwir servijerien an Otrou Doue. Er stummeze, e vevfomp aman e kreiz ar peuc'h hag ar joa ; ha goude beza karet Mari war an douar, e karfomp anezi da viken er Baradoz.

SKOUER

Sant Stanislas Kostka, adalek ma oa bugel, a oa bet devot bras d'ar Werc'hez ; met eur wech digemeret e ti an Tadou Jesuisted, evit ober e studi da veza beleg, e garante e kenver ar Werc'hez a deuas da veza teneroc'h c'hoaz. Epad ma veze o tivizout gant e genvreudeur, e kave bepred an tu da lavaret eur gomz bennak en enor da Vari.

Eun devez, eur mignon a c'houlennas digantan ha karout a rae Mamm Doue. War an taol, e vanas mantret ; met prestik goude e tifronkas hag e lavaras :

« Penôs ne garfen ket anezi, pegwir eo ma Mamm ? »

Skoet gant eur c'hlenved diremed ha dare da vervel, Stanislas na rae van ebet ouz ar pezh a dremene endro d'ezan. O welet anezan ken sioul ha ken joaus, e Superior a c'houlennas digantan : « N'ec'h eus ket a geun eta da guitaat an douar ? » — « Da betra am ije keun ? emezan. Laouen bras ez on da vervel, evit mont da welet, er baradoz, ma Mamm vat am eus kement karet er bed-man. »

— Mat sur, eme ar Superior, met lavaret d'in breman petra a zo d'ober evit beza devot da Vari ? »

— An disteran tra ma karfet, eme ar Sant, gant ma vefet aketus d'hen ober bemde ».

Hag en eur bokad da skeudenn ar Werc'hez, e roas e huanad diwezan.

EIZVET DEVEZ

Santelez ar Werc'hez

- I. Enni en em gav an holl vertuziou.
- II. E skol Mari e tesker hent ar santelez.

I

Galvet a beb amzer da veza Mamm d'hon Salver, Mari a oa dleet d'ezi beza santel meurbet.

An Tadou Santel, c'hoant gantê da rei da c'houlzout pegen kaer e oa he ene ha pegen dinamm he buhe, a lavar e oa hrouet Mari ouz Baradoz an douar. Goude beza krouet hon Tad kentan, eme ar Skritur-Sakr, Doue hen lakas e kreiz eul liorz du-dius, elec'h ne wele Adam endro d'ezan nemet gwe a bep seurt gant bleuniou ar c'haeran ha frouez ar gwellan.

Mari a zo bet hanvet ive « hortus conclusus » liorz kloc an Otrou Doue. Hag evit gwir, he c'halon a zo henvel ouz eul liorz karget a vleuniou a bep liou-gante eur c'houez dispar. Tostaomp hep doan da zellet ouz ar bokedou-ze ken koant : ar pezh a zo da Vari a zo ive d'he bugel, hag eur blijadur a vo eviti lezel ac'hanomp da zibab ar bleun a blij d'imp ar muian. Na pegement e plij d'imp, pa ve deut an neve-amzer, redek ar prajeier, goloet a c'hlazur hag a vleuniou marellet, ha chilaou richan al lapoused er c'hoajou ha hiboud an dour e dôn an draonien ! Kaerat treou en deus graet an Otrou Doue er bed-man evit laouenaat daoulagad ha kalon an den ! Kalz



kaeroc'h c'hoaz, n'eo ket gwir, al labour burzudus graet gantan en ene ar Sent ha, dreist-holl, en ene ar Werc'hez, e Vamm.

Bet 'so dindan al lezenn goz, kenkoulz ha dindan al lezenn neve, en peb amzer hag en pep bro, Sent a beb oad hag a bep stad. Darn a zo bet stag ouz Doue dre ar feiz ; darn-all, dre an doujans ; heman en deus heuilhet hent ar binijenn ; hen-hont, hent ar basianted ; unan a zo bet brudet abalamour d'e izelegez ; eun all, abalamour d'e vadelez. Kalz a zo hag o deus dastumet, hed o buhe, madou e-leiz evit ar baradoz ; met n'eus ket unan ha na vije ket bet trec'het gant Mari, Enni e kavomp, war an dro, feiz ar Batriarched, sklerijenn ar Brofeted, karante an Ebestel, glanded ar Gwerc'hez, nerz ar Verzerien, an izelegez ar vrasan, ar vadelez ar muian dreist-muzul, ar furnez gwirion. Bet eo bugel, plac'h yaouank ha pried, mamm hag intanvez. Tremenet eo dre al levenez, al labour hag ar boan ; bevet he deus en pep stad ha dre holl ha bepred eo bet skouer ha mellezour an holl vertuziou. Savet he deus bemde uheloc'h e skeul ar santelez, evel ma ve gwelet an heol o vont gant e hent er beure ; evel ma ve gwelet ar bleun o vouta dindan tomder an de ; ha diouti, evel diouz he Mab Jezuz, e vije gallet lavarout penôs e kreske bepred en oad hag en furnez dirak Doue ha dirak an dud.

En eur ger, gant Mari eman an holl binvidigez, an holl santelez a oufe beza gant eur c'hrouadur. Ken diaes e vije d'an den niveri he vertuziou evel dont a-benn da gonta an holl stered a ve gwelet en noz o lintra e bolz an nenv.

N'eo ket hep digare eo hanvet ar Werc'hez, gant eun Doktor eus an Iliz, « Baradoz an Otrou Doue ». An hano-ze a zo dleet d'ezi, peogwir enni 'zo kalz

muioc'h a zantelez hag a veritou evit ebarz an holl Sent hag an holl Aelê war an dro.

Na vezomp ket souezet eta o welet an Ael Gabriel o taoulina dirazi hag o lavarout d'ezi, gant doujans : « Me ho salud, leun a c'hras ; binniget oc'h dreist d'an holl gwraze! »

Na vezomp ket souezet, kennebeut all, o klevet an holl Aele, dastumet war dreujou ar baradoz, o kana dirazi : « Piu eo houman a zav eus an douar, splann evel al loar, skedus evel an heol, kaer evel ar goulou-de leun a sklerijenn? »

Mari a c'hallfe respount d'eze : « Me am eus sanket dôn ma gwrizioù e kreiz ar bobl enoret gant Doue, e kreiz lodenn hag herez Doue, hag etouez ar Sent emañ o chom. Savet oun uhel evel ar gwe sedra war menez Liban, pe evel ar siprez war menez Sion. Astennet am eus ma skourrou evel ar wezenn balmez en Kadez hag evel gwe roz Jeriko. Kresket oun evel ar wezenn olivez e kreiz ar parkeier ; evel ar blatanenn savet e kichen an dour. Evel ar sinamom, ar balzam hag ar myrrh, am eus roet c'houez-vat ».

Ha ni, d'hon zro, lavaromp d'ezi : « C'houi, o Mari, eo gloar Jeruzalem, c'houi eo levenez Israêl, c'houi eo enor hon ligne ».

II

Meuli ar Werc'hez a zo eun dra vat.

Koulskoude, eme Sant Aogustin, ar gwella stumm d'enori ar Sent eo heuilh o vertuziou. Mar fell d'imp eta beza gwir vugale da Vari, klaskomp, arôk pep tra, kerzet war he roudou.

Peurvuian, ebarz ar bed, ar vugale a zo henvel-heo ouz o zad hag o mamm. Alies, zoken, pa we-

lomp eur bugel evit ar wech kentan, n'hon deve ket ezomm da c'houlen digantan piou eo e dad hag e vamm : awalc'h eo d'imp teurel pled d'e zellou, d'e zremm, d'e stumm da gerzet ha da gaozeal, evit gouzout dioustu eo mab da hen-a-hen, memez tra evel pa vije skrivet e hano war e dal.

Evelse, bugale Mari a dle beza henvel ouz o Mamm. Ar Werc'hez a lavar d'imp, evel Jezuz : « Me a zo evidoc'h eur skouer ; graet ar pezh am eus graet me ma-unan. » Lavaret 'ra d'imp, gant Sant Paol : « Heuilhit ma roudou, evel am eus heuilhet roudou Jezuz-Krist. »

« An hini na gerz ket war roudou Hon Salver, eme Sant Aogustin, a laer e hano a gristen ». Ken-kouls-all, an neb na glask ket beza henvel, en e vuhe, ouz ar Werc'hez e Vamm, n'eo ket din da veza hanvet bugel ha servijer Mari.

N'ec'h eus ket taolet pled, gant an neve-amzer, d'al labour a ra ar gwenan pa o gwelet o redek ar mêziou ? Mont a reont eus an eil tu d'egile, evit klask ar bleun ar c'haeran. N'eo ket awalc'h d'eze c'houesa ar bokedou, mont a reont betek ar galon evit suna peadra d'ober mel. Evelse, e tleomp ni ober. Dibabomp etouez vertuziou ar Werc'hez ar re hon eus ar muian ezomm aneze ; sellomp penôs he deus en em gemeret evit mirout aneze, ha labouromp ganti hag evelti da heuilh hent ar furnez.

Greomp c'hoaz, ma karet, evel al liver, c'hoant gantan ober eun daolenn. Da gentan, e chomo eur pennad mat a amzer da sellet piz ouz ar skouer a zo dirak e zaoulagad : neuze hepken, pa en devo studiet anezan dre ar munud, e krogo da astenn al liou war al lien, ha c'hoaz, dre ma 'z eio e zorn war arôk, e talc'ho e zellou war ar skouer, betegout na vije ket reiz ha plen e labour.

Brasan c'hoant ar Werc'hez eo gwelet he bugale o veza henvel outi. Na zistagomp ket hon daoulagad diouz skouer an holl vertuziou, ha poaniomp er bedman da gerzet, gwella ma c'hellfomp, war roudou hon Mamm eus an nenv.

Lavaromp d'ezi, gant an Iliz Santel : « Kasit ac'hanomp, Gwerc'hez dinamm, war ho lerc'h gant c'houez vat ho santelez ».

SKOUER

An hini a dlee beza diwezatoc'h misioner bras an Oseani, an Tad Evurus Per-Mari-Loeiz Chanel, ne oa, d'ar c'houlz-se, nemet eur c'hrennard. Savet gant eur vamm devot, e teskas abred enori ha karout ar Werc'hez. Ne ouie ket c'hoaz lavaret eur ger ha dija e oa desket d'ezan gant e vamm ober sin ar groaz ; dre ma kreske en oad, e teske d'ezan e bedennou. Pa voe bras awalc'h, ec'h eas d'ar zul d'an iliz, gant e gerent, hag e kemere plijadur o tesrevel er gêr al lidou en dije gwelet ober en iliz.

Perig a zave oteriou bihan hag awechou, zoken, e prezege da vugale e oad. Epad an hanv, e tigase gantan bemde eur vriad bokedou da lakaat e harz skeudenn ar Werc'hez, e taouline diraki, beure ha noz, da lavaret e bedennou.

Persons Kras, an Otrou Trompier, o welet pegen lemm ha fur a oa spered ar bugel, a gemeras anezan en e di evit rei d'ezan kenteliou war al latin. Ar skolaer yaouank en em roas a galon d'ar studi : evit diskuiza diouz e labour, e lenne Lizeriou Breuriez ar Feiz, hag an dra-ze a lakas da ziwan en e galon ar c'hoant da vont da visioner.

Da bemzek vloa, e teuas eun devez da skuiza gant al labour, ha, hep lavarout ger d'e vadoberour, e lakas en e benn return d'ar gêr.

Pa oa o vont ermêz eus porz ar presbital, e kavas war e hent eur wreg vat hag' a c'houlennas digantan :

— Da belec'h out o vont evelse, Perig?

— O vont kuit! emezan.

— Bet out, da vihanan, o c'houlenn kuzul digant ar Werc'hez?

Ar pôtr yaouank a blegas e benn hep lavaret ger.

— Kred ac'hanon, Perig, kerz d'an iliz, da gentan, da bedi ar Werc'hez.

Per-Mari a zentas. Prest goude, e teue ermêz, laouen evel an heol, hag' o terc'hel e levriou war e benn, e lavare : « Ma! emezan, chom a rin! » Ha chom a reas. Dont a reas da veza beleg, misioner, ha d'an oad a eiz vloa ha tregont, e koueze dindan tao-liou bouc'hal gouezidi enezenn Futuna, en 23 a viz ebrel 1841. Da Vari eo dleour da veza dalc'het mat gant e hent ha da veza gonezet kurunenn ar verzerenti.

Alies en de, pouezomp en hon spered an dra-man : Petra a sonjfe, petra a lavarfe, petra a rafe Mari ma vije breman en em lec'h? Ha greomp evelti.



NAVET DEVEZ

Feiz ar Werc'hez

I. Bet he deus eur feiz beo.

II. Bet he deus eur feiz grenv.

I

« Anez ar feiz, eme ar Spered-Santel, n'haller ket plijout da Zoue ». — « Ar feiz, eme hon Mamm Zantel an Iliz, eo evidomp kentan tra ret ; beza eo mendiaze ha gwrizienn hon silvidigez. »

Memez tra evel n'hall ket eun ti chom en e zav mar n'eo ket diazezet e vogerioù war mein kallet ha ma n'hall ket eur wezenn beva hep gwrizioù, evelse, eur c'hristen hep feiz a zo difennet mat outan sovetaat e ene.

Kentan tra a c'houlenn Jezuz digant kement hini a deu d'hen kaout eo kement-man : « Ha kredi a ret? Ha beza 'c'h eus feiz? » Pa gas e Ebestel da brezek an Aviel d'an holl grouadurien, Hon Salver a lavar d'eze : « It ha prezegit an Aviel d'an holl grouadurien. An neb a gredo a vo sovetaet ; an neb na gredo ket a vo daonet. »

Na petra 'ta eo ar feiz? « Ar feiz, eme ar c'hatekiz, a zo eun donêzon digant Doue hag' a ra d'imp kredi ennan hag' en holl gwirioneziou diskleriet d'imp gant an Iliz ». »

Ar feiz, laket en hon c'hreiz dre ar vadeziant, eo ar sklerijenn a ziskoue d'imp hent ar baradoz. Panevet d'ar feiz, e vijemp evel tud dall, evel bugale kol-

let gante o hent ; ne ouijemp nag eus pelec'h e teuomp, na pelec'h ez eomp, na pelec'h hon eus da vont.

Ar feiz a zo, evit pep hini ac'hanomp, ar pezh eo bet ar steredenn lugernus a ziskouezas d'ar Rouane hent Bethlehem.

Ar Werc'hez eo bet ken birvidik he feiz ken he deus gounezet beza hanvet Mamm ar wirione, « Mater agnitionis ». Kredet he deus, hep douetans ebet, komzou an Otrou Doue ; o laket he deus don en he spered hag en he c'halon. He feiz a zo bet startoc'h evit feiz ar Batriarched hag an Ebestel. Kredet he deus en komzou an Ael, ha kerkent, an Eil Ferson eus an Dreinded a zo diskennet en he c'hreiz hag ar bed-man a zo bet sovetaet.

Pa deuas Mari da welet he c'henitervez Santez Elizabeth, mamm Sant Yann-Vadezour, houman a lavaras d'ar Werc'hez : « Binniget oc'h dreist d'an holl gwraze, ha c'houi a vo evurus o veza kredet, rak kement a zo bet lavaret d'ec'h a c'hoarvezo ». « Ya, eme Sant Alfons, evurus ar Werc'hez Vari, dreist d'an holl grouadurien, rag he feiz a zo bet startoc'h evit hini an holl Sent hag an holl Aele war an dro. Gwelet he deus ar Mabig Jezuz o c'henel en eur c'hraou dister, war eun dornad plouz, e kreiz an die-nez hag ar baourente, ha koulskoude, he deus kredet, a greiz kalon, e oa ar c'hrouadur-ze, ken dinerz, Perc'hen an holl vadou. Tec'het eo bet gant spount, e kreiz an noz, dirak Herodez hag e zoudarded, ha koulskoude, e ouie ervat e oa he bugel Roue ar Rouane ha Mestr ar bed holl. Gwelet he deus anezan o pleal gant al labour en ti Nazareth, evel an hini diwezan eus an artizaned, ha koulskoude e krede, hep douetans ebet, e oa he Mab an Hini en deus krouet pep tra gant eur gomz hepken. Gwelet he deus anezan o taoulina hag o pedi, evel pep den, ha kouls-

koude e ouie e oa Jezuz an Doue holl-c'halloudek, Roue an nenv hag an douar... Gwelet he deus he Mab goapaet, chadennet, skourjezet, kurunet gant spern, barnet d'ar maro, daoubleget dindan eur groaz pounner, dilezet gant an holl, staget ouz ar groaz etre daou laer, evel eun torfetour, met, daoust da ze, n'he deus ket paouezet da gredi e savje prestik eus a varo da veo hag e teuje eun de da varn ar re veo hag ar re varo.

O Gwerc'hez santel, c'houi hag hoc'h eus muioc'h prizet grasou Doue evit madou ar bed-man, c'houi hag hoc'h eus klasket, en pep tra, sklerijenn ar Spered-Santel ha rouantelez an nenvou, c'houi hag hoc'h eus gounezet beza hanvet mamm an dud a feiz, « mater credentium », henchet ac'hanomp bepred ebarz hent ar wirione ; krenvait hon feiz dinerz ha grit ma teuo, evel hini hon zadou koz, startoc'h evit ar vein hag an dero war douar Breiz-Izel.

II

Teulomp pled d'an dra-man : Mar d'eo ret kredi evit beza salvet, ar feiz n'eo ket bet roet d'imp evit he mirout koachet ha kousket en goueled hon c'halon : eur gwir gristen ne dle ket kaout doan da zispaka e vanniel, na mez o veva herve e gredenn.

Evel ar goulou e kreiz an denvalijenn, hon feiz a dle lugerni. « Ar c'hantelour, eme Hon Salver, n'eo ket graet evit beza kuzet dindan ar boezell, met evit beza laket war greiz an daol, ma roio sklerijenn da gement hini a zo ebarz an ti ».

Kenkoulez-all, hon feiz a dle skedi endro d'imp ha rei da c'hoût d'an holl ez omp kristenien, nann hepken e diabarz, met ive e diavéz, dre hon buhe, hon c'homzou hag hon oberou.

Beva herve ar bed, beva evit hon flijadur, beva e stumm da veza meulet gant an dud n'co ket, ar peurvuian, beza gwir gristen.

« An den just, eme Sant Paol, a ren e vuhe herve e feiz ». Evelse eo bet kont gant Mari. Kristenien a zo hag a rafe kalz muioc'h ha kalz gwelloc'h evit na reont, panevet o deus doan petra vije kavet da zonzal pe da lavaret diwar o fenn : krena a reont dirak falloc'h evite.

Evel Mari, gwir servijerez an Otrou Doue, na selomp nag ouz heman, nag ouz henhont ; heuilhomp sklerijenn hon feiz ; bevomp herve lezenn Doue hag an Iliz ; na souzomp kammed dirak an dever ; na vezomp ket sklavourien ar bed hag e gizioù fall ; kredomp start penôs n'eo ket redek warlerc'h an danve, ar veulodi hag ar blijadur a ra pinvidigez hag evurusted an den er bed-man hag er bed-all, met ober bolonte an Otrou Doue en pep tra. Chilaouomp komzou hon Salver : « Eur wezenn vat a zoug frouez mat ; met eur wezenn fall a zoug frouez fall. Eur wezenn vat ne c'hell ket rei frouez fall, nag eur wezenn fall rei frouez mat. Kement gwezenn na zougo ket a frouez mat a vo troc'het ha stlapet en tan. Rak-se, diouz o frouez eo ec'h anavezfet an ze. Kement hini a lavar d'in : « Ma Doue, ma Doue, n'eo ket da rouantelez an Nenvy ; met an hini a ra bolonte ma Zad a zo en Nenvy, hennez a yelo da rouantelez an nenvou ».

Mari n'eo ket awalc'h d'ezi chilaou komzou an Otrou Doue ha kuza aneze e goueled he c'halon, diskouezet he deus nerz he feiz dre he buhe santel hag he oberou mat.

Kerzomp war he roudou ha roudou ar Sent, evit ma c'halfomp lavarout evel Sant Paol : « Stourmet am eus evit Doue ; peurc'hraet eo ganin ma reda-

denn ; dalc'het am eus d'ar feiz. N'am eus ken d'ober nemet gedal ar gurunenn a roio d'in Doue, ar barnier just ».

SKOUER

Eur plac'h yaouank bet re sod, siouaz ! evel meur a hini, gant ebatou ha plijadurezou ar bed, a gouezas klanv. Dinerzet, pell e oa, gant ar paz hag an derzien, e veze gwelet bemde o izelaat evel eur c'hleuzeur heb eoul. An holl endro d'ezi a ouie e oa graet ganti, met ar glanvourez a vire hepred ar fizians da drec'hi war ar c'hlenved. Eun devez bennak, e teuas d'ezi eur falladenn ha, pa gavas adarre he skiant, en em lakas da grena gant ar spount, hag o sellet ouz he diouvrec'h hag he daouarn treut ha dizec'het, e krogas da zifronkal ha da lavaret d'he mamm : « O mamm gêz, sellit ouz ma daouarn ! Goullo int ! Kredet am eus ; n'am eus ket mouget ma feiz ; met petra am eus me graet evit plijout da Zoue ? Netra ! C'h an da vervel ha da vont dirak ma barnier, gant daouarn goullo ! Ma feiz ne zervijo d'in da netra nemet da daoni ac'hanon ! O nag ec'h oun bet diaviz ! Nag e karjen adkregi gant ma buhe, evit ober gwelloc'h impli diuti ! Allaz ! re ziwezat ez oun breman ! »

Ar wirione a oa ganti. Ar feiz, pa ne ve ket ouz he heul eur vuhe gristen, a zo eur feiz maro. Eur feiz a sort-se n'he deus talvoudegez ebet evit ar baradoz.

Bezomp, warlerc'h Mari, gwir servijerien an Otrou Doue ; kristenien penn-da-benn, kristenien penn-kil-ha-troad !



DEKVET DEVEZ

Esperans ar Werc'hez

I. Mari a zo Mamm an esperans.

II. Mari a zo repu an hini en deus kollet fizians.

I

« An esperans, eme Sant Aogustin, a deu da heul ar feiz. » Krenvoc'h a ze eo feiz eur c'hristen, brasoc'h a ze e vo e fizians en Doue.

N'eus ket eun dra hag a rafe muioc'h a vad da galon an den evit an esperans, ar vertu-ze, an donezon-ze digant Doue hag a ra d'imp gortoz sikour digantan er bed-man, hag evurusted, diwezatoc'h, er baradoz.

Paneved d'an esperans, penôs e c'hallfemp ni de-c'hel da gerzet dindan bec'h ar groaz, ken rust evel m'eo hent ar vuhe? Hed-da-hed gant an hent-se, ne gavomp nemet enebourien, skoueriou fall, tentasion, drez ha spern, poan ha trubuilh. Dre ar vertu a esperans, e teuomp gwelloc'h da gompren eman, de ha noz, lagad an Otrou Doue o para warnomp ; ne c'hoarve ganimp poan ebet hep gouzout d'ezan ; e kaso d'imp bepred, e koulz, an holl c'hrasou hon eus ezomm, hag e talvezo d'imp pep tra evit evurusted ar baradoz. Dre an esperans, e roomp dioueskel d'hon ene da zevel eus an douar warzu an nenv ; drezi, e lakomp hon dorn e dorn an Otrou Doue evit kaout digantan sikour, evel ma ra ar bugel bihan pa dap krog e dorn e dad evit mont aezetoc'h war arôk.

Er bed-man eta, elec'h klask skoazel digant an dud ha n'int nemet krouadurien dinerz ha dister eveldomp, klaskomp kentoc'h harp digant an Otrou Doue, an Tad ar muian galloudus hag ar gwellan. An dud a zo nebeut da gonta war o c'homzou, met en Doue n'eus na fazi, na gaou na touellerez ; feal eo bep tro d'e gomz. E lagad hag e spered a zo lemmoc'h evit hon re ; gouzout a ra reisoc'h evidomp petra a zo ar gwellan d'imp, ha ne glask nemet ober d'imp ar muian a vad. Na vezomp ket nec'het eta na gant hon foaniou, na gant hon stad, na gant an amzer da zont. Klaskomp da gentan rouantelez an Otrou Doue hag ar pez a zo just, hag ar peurrest a zeuio d'imp war ar marc'had. N'ankouaomp ket eman Doue bepred o tiwall hag o tifenn e grouadurien.

Mari a oa gwriziennet dôn ha start en he c'halon ar gelennadurez-man : he fizians en madelez an Otrou Doue a zo bet dispar.

An hent dibabet eviti, dreist-holl adalek ma teuas da veza Mamm da Zalver ar bed, a zo bet penn-da-benn hent an daerou, hag he buhe, betek ar fin, evel hini he Mab, eur verzerenti poanius meurbet. Heuilhit ar Werc'hez betek kraouig Bethleem, elec'h n'he deus na tan na ti evit digemer he Mab-hag he Doue ; — sellit outi o kemer hent an harlu evit tec'hel dirak soudarded Herodez ; — deuit ganti dre hent ar C'halvar, war roudou Jezuz sammet dindan e Groaz ; — tostait outi ouz troad ar Groaz, elec'h ma ro Jezuz e wad hag e vuhe evit silvidigez ar bed ; — deuit en he c'hichen epad ma tistager korf Jezuz diouz ar c'hoad d'hen lakaat war varlenn e Vamm... Gwelet a refet an daerou en he daou-lagad ; klevet a refet he c'halon o frailha en he c'hreiz ; met war he muzellou ne dapfet ket eurglemmadenn. N'eus bet gwelet biskoaz ha ne vo gwelet biken tra ken mantrus hag he glac'har ; daoust m'eo he anken brasoc'h evit ar mor dôn, he nerz a zo

trec'h d'ar boan. Chom a reio bepred sounn en he sav e kreiz he foaniou kri ; start evel eur roc'hel o stourm ouz ar gwagennou kounnaret. Gwelloc'h evit Abraham, he deus laket he fizians en Doue, en despet da bep tra ; elec'h klemm ha hirvoudi, Mari a dav mik hag a bleg he fenn gant douster ha pasianted ; laket he deus don en he c'halon komzou he zadkoz, ar Roue santel David : « Spes mea in Deo est : Ma holl fizians a zo en Doue hag en Doue hepken ! »

II

N'eo ket bet awalc'h d'ar Werc'hez mirout ar vertu-man beo en he c'hreiz, klasket he deus a-viskoaz lakaat anezi da ziwan ha da greski e kalonou an dud. Setu perak e hanvomp Mari hon esperans, « spes nostra » : setu perak an Iliz santel a ra diouti « Mamm an Esperans. — Mater sanctæ spei ».

Abaoe an de he deus ganet, evit beza Salver ar bed, an Hini a zo perc'hen an holl vadou, ne deu ken an disteran mad eus an nenv war an douar hep tremen dre zaouarn ar Werc'hez, choazet gantan evit beza tenzorez ar baradoz, ha drezi e teu d'imp an holl c'hrasou, evel ma teu an dour ermêz eus eur stank dre an duelell.

« Doue, eme an den evurus Grignon a Vontfort, en deus dastumet an holl dour a zo ebarz ar bed evit ober ar mor : evel-se ive en deus dastumet an holl c'hrasou evel eun tenzor dispar fiziet da viken etre daouarn e Vamm, ha hi a zo karget gant Doue da hada aneze ebarz ar bed evit sikour an dud kêz d'ober o silvidigez. Setu perak, eme an Tad Santel ar Pab Leon XIII, an holl gristenien en em erbed ouz ar Werc'hez, evel m'en em denn ar vugale endro d'o mamm evit klask konfort ha skoazel.

Ar bed-man, a dra sur, n'eo evit peb hini nemet eun draounienn a zaerou : a bep tu ne gavomp nemet poan, trubuilh hag enkreuz ; an drez hag ar spern a zo stankoc'h evit ar roz, Arabat eo, koulskoude, koll kalon, na chom da glemm ha da hirvoudi war hon stad ! N'eomp ket, kennebeut all, da glask sikour e kichen krouadurien hag o deus eur bec'h ken gwaspe pe wasoc'h, marteze, da zougen ! Deomp, kentoc'h, da gaout ar Werc'hez, an Hini a zo hanvet, gant an Iliz, steredenn ar mintin, pare ar re glanv, repu ar bec'herien, frealzidigez an eneou poaniet, sikour ar gristenien... Greomp evel ar bugel bihan pa digoue gantan eur spout pe eun droug bennak ; kerkent en em daol etre diouvrec'h e vamm garet : goûzout a oar ne gavo ket gwelloc'h evit kalon e vamm da douasaat e boan ; gwelloc'h evit he daouarn da louzaoui e c'houli ha da stanka e zaerou.

Evurus an neb a laka e fizians en madelez ar Werc'hez ! Mari n'he deus graet biskoaz skouarn vouzar ouz mouez he bugel sammet gant ar boan pe gwasket gant ar groaz : n'he deus ket he far da frealzi an eneou ha da gonforti ar c'halonou glac'haret.

Evurus, dreist-holl, ar paour kêz pec'her ankeniet a deu d'en em guz dindan mantel ar Werc'hez ! N'eus fors pegen bras torfed eo e hini, ma kemer Mari evit advokadez, ne vo ket pell e ene o sevel eus fank ar pec'hed hag o adkavout hent ar baradoz. Nag a hini a zo bet pareet ganti !

Biken gwir servijer ar Werc'hez ne vo kollet !

SKOUER

Eun den yaouank, kollet gantan e furnez hag e feiz en kêr Bariz, a oa skoet gant eur barr klenved diremed. Ar maro a dostae prim hag ar c'hlanvour aheurtet n'houle ket klevet komz eus kovesaat. E

vamm, en e gichen, a ouele dourek hag a bede kalonek. Unan eus e vignoned, furoc'h evitan, a lavaras d'ezan gant douster : « Peogwir n'houlez ket resev da sakramanchou, da vihanan evit ober plijadur d'in, digemer ar skeudenn-man, livet warni poltred ar Werc'hez. Me 'zo sur e vi well diouti ». War an tu gin anezi, e oa moulet ar bedenn-man savet gant sant Ephrem : « Spes desperantium, ora pro nobis » ; Esperans an dud kollet gante pep fizians, pe-dit evidomp ! — Pa lennas ar c'homzou-man, ar c'hlanvour, beuzet gant an daerou, a lavaras : « Al-laz ! pegen bras pec'her 'c'hon bet ! Breman souden, e vo ret d'in mont dirak Doue evit renti kont d'ezan eus ma buhe diroll. O Gwerc'hez santel, c'houi ma holl esperans, bezit true ouz ma ene paour ha tennit ac'hanon eus krabanou an dizesper ! » Mari a glevas e bedenn : distrei a reas ouz Doue ; gervel a reas ar beleg ha, goude beza kovesaet e bec'hejou, e kavas ar peuc'h.... War e dremenvan, e voe klevet o lavarout : « Setu Rouanez an nenv o tont da benn hent d'in, war dreujou ar baradoz ! »

Mamm an Esperans he devoa sovetaet he bugel....

O Mari, ma Mamm, ennoc'h e lakan ma holl fizians ! Diwallit ac'hanon diouz pep droug ha, goude ar vuhe-man, digorit d'am ene dor ar baradoz ! Etre ho tiouvrec'h e trec'hin ar spount hag an dizesper....



UNNEKVVET DEVEZ

Karante ar Werc'hez

- I. Mari he deus karet Doue dreist pep tra.
- II. Mari he deus karet he nesan abalamour da Zoue.

I

« Ar feiz, an esperans hag ar garante, herve an Abostol Sant Paol, a zo evel tri men-diaze hon relijion santel, ha koulskoude, emezan, ar garante a zo trec'h d'an diou vertu all ». O zeir eo ret d'ar c'hristen o c'haout evit gonit ar baradoz ; met dreist pep tra eo ret kaout eur gwir garante.

Ebarz ar baradoz, n'eus ezomm ebet eus ar feiz, peogwir e weler eno Doue, dremm ouz dremm, evel m'eman ; n'eus ezomm ebet ive eus an esperans, peogwir ar Sent a zo evel beuzet en eur mor a evurusted ; ne vano ken ganimp nemet eun dra d'ober, karet Doue epad ar beurbadelez.

Evel m'eo an aour an hini talvoudusan etouez an holl metallou ; an heol an hini skedusan etouez an holl stered ; ar rozenn an hini gaeran etouez an holl bleuniou ; evelse ive eo ar garante an hini gaeran, an hini gentan, ar rouanez etouez an holl verziou.

Eun devez bennak, eun Doktor eus al Lezenn, o klask touellan Hon Salver, a c'houlennas digantan :

« Otrou, pehini eo brasan gourc'hemenn al Lezenn? » Ha Jezuz da lavaret d'ezan : « Karet a ri an Otrou Doue eus da holl galon ,eus da holl ene, eus da holl spered. Setu aze ar brasan hag ar c'hentan gourc'hemenn. An eil, henvel outan, eo heman : Karet a ri da nesan evelout da-unan. En daou c'hourc'hemenn-se eman kement a zo merket el Lezenn hag en skridou ar Brofeted ».

Karet Doue ha karet an nesan eo eta hon micher er bed-man.... Mari he deus graet anezi en eun doare dispar. He buhe penn-da-benn, adalek an de kentan betek he maro, a zo bet eun akt a garante peurbadus... Gwir eo bet eviti komz Sant Aogustin : « N'eus nemet eur stumm da garet Doue, hen karet hep muzul! » Gallet he dije lavarout gant Sant Fransez a Zal : « Mar ouifen e vije en em c'halon eun neudenn hepken ha na vije ket distrempet gant karante Doue, he zroc'hfen raktal ».

An hini a gar Doue a greiz kalon ,a zo prest da gemer diaezamant evit ober plijadur d'e Grouer : ne souz na dirak al labour na dirak ar boan. Chilaouit komzou entanet an Abostol Sant Paol, ken kalonek evit gounit eneo da Zoue : « Piou a deuo a-benn d'am distaga diouz karante Jezuz-Krist? Netra! Nag an drubulih, nag an anken, nag an naon, nag ar riskl, nag ar c'hleze, nag ar maro, nag ar vuhe, nag an Aeel, na krouadur ebet n'hallow biken ma disparitia diouz karante Doue ».

Doue leun a bep peurvadelez a dle beza karet dreist pep tra : d'ezan eo dleet ar renk kentan en kalon e vugale.

Evit ar pezh a zell diskouez karante da Zoue, ar Werc'hez n'he deus ket bet he far. Karet he deus Doue muioc'h evit an holl Sent hag an holl Aeel war an dro.

Adalek an de ma voe konsevet, ar garante a dazas e kalon Mari, kerkent hag ar vuhe, hag ec'h eas bepred war greski, evel an heol a ro muioc'h a skleri-jenn hag a domder bep ma sav ebarz an oabl.

D'an oad a dri bloa, e welomp anezi o kimiadi diouz he c'herent ha diouz ar bed hag o pignal gant pazennou an Templ evit en em westla da Zoue : en de-se, e reas al le d'hen serviji hed he buhe ha biskoaz promese n'eo bet gwelloc'h miret er bed-man. E kreiz he labour, he sonj a veze bepred gant Doue ; epad an de, e kerze dirak Doue ; divizout a rae gantan, o tont hag o vont gant he hent ; he holl oberou a rae nann evit plijout d'an dud, met evit ober plijadur da Zoue ; ha biskoaz an disteran tra na reas nemet dre garante evit an Otrou Doue.

Deut da veza Mamm Salver ar bed, pegen entanet ne voe ket kalon ar Werc'hez, pa douge war he barlenn ar bugel a oa, war an dro, he Mab hag he Doue! Goude beza maget ha savet ar Mabig Jezuz, Mari a gemeras lod en e labour, en e boaniou hag en e zismegansou ; heuilh a reas anezan war vene Kalvar ; chom a reas en e gichen ouz troad ar Groaz evit meska he daerou gant gwad Hon Salver, ha pa neved d'eur burzud a-berz an Otrou Doue, Mari a vije bet mantret he c'halon gant ar glac'har hag ar garante....

II

N'eo ket awalc'h karout Doue dreist pep tra : ret eo ive karout an nesan.

« Setu aman ma gourc'hemenn, eme Jezuz : en em garit etrezoc'h evel am eus ho karet.... Er stumm-man e tremenfet dirak an holl evel ma gwir diskibien : mar en em garet an eil egile ».

Dre se, an neb na gar ket e nesan n'eo ket mignon da Zoue ; an neb a lavar e kar Doue hag en deus kasoni ouz e nesan, n'eo ken nemet eur gaouiad.

Penôs e tiskouezfomp karante d'an nesan? O ti-wall d'ober d'ar reo-all an droug n'houlfemp ket a vefe graet d'imp hon unan, hag o klask ober d'hon breudeur ar vad a garfemp a vije graet d'imp-ni hon unan....

Eur gwir gristen a dle eta karout e holl vreudeur, mat ha fall, n'eus forz piou int.

Peurvuian, ober vad d'hon c'herent, d'hon mignoned, d'hon madoberourien, n'eo ket evidomp eun dra diaes ; met ret eo mont pelloc'h ebarz hent ar garante ; dleet eo d'imp karout hon enebourien evel-domp ni hon unan.

« Karit, eme Jezuz, ar re o deus ouzoc'h kasoni ; grit vad d'ar re a drouk-komz diouzoc'h, evit beza gwir vugale ho Tad eus an nenv. Mar ne garet nemet ar re a gar ac'hanoc'h, mar ne ret vad nemet d'ar re a sikour ac'hanoc'h, petore gounid a chomo ganeoc'h?... Ar baganed a ra kemend-all! Karit eta hoc'h enebourien ha pedit evit kement hini a wall-gas ac'hanoc'h. Ar muzul ho po kemeret gant ar re-all a vo kemeret ive ganec'h dirak lez-varn an Otrou Doue ».

Ar gentel-man a zo bet heuilhet a-grenn gant ar Werc'hez : ket eo bepred leun a garante hag a vadelez evit an holl....

A-boan m'eo bet saludet gant an Ael Gabriel ma welet anezi o kuitaat he zi hag o'n em lakaat en hent gant hast. Da belec'h ez a evel-se ken seder? Da renti servij d'he c'henitervez Santez Elisabeth ha da gas eur c'hras dispar d'an hini a vo diwezatoch kannad Jezuz etouez ar Judevien, Sant Yann-Vadezour.

De eured Kana, pa deuas ar gwin da vankout, ar Werc'hez, bepred truezus e kenver an dud ezommek, a gavas an tu da lakat he Mab d'ober eur burzud ha da chench an dour en gwin.

War vene Kalvar, Mari a ro d'imp eun testeni dispar eus he c'harante. Ken bras eo he zrugare en hon c'henver ken e pleg da zigemer ac'hanomp evit he bugale hag e ro aotre da Jezuz da rei e vuhe evit hon silvidigez. O sonjal en dra-se, Sant Bonaventur a lavare gant estlamm : « Ken bras eo bet karante ar Werc'hez evit an dud, ken he deus roet he Mab unik evit hon prena! »

Pelloc'h, zoken, ez eas karante Mari ; digemer a reas evit bugale, war ar memez troad hag ar re all, ar vourrevien o devoa staget he Mab ouz ar Groaz. Dirak eun torfed ken kri ha ken cuzus, pehini eo ar Vamm hag a vije bet kalonek awalc'h evit harz da c'houlenn malloz ha kastiz an Otrou Doue war an dorfetourien didrue a ziframme diganti he Mab muian karet? Koulskoude elec'h en em venji, Mari a stouas d'an daoulin ouz troad ar Groaz hag a reas ar memez pedenn gant Jezuz : « Ma Zad, pardonit d'eze rak ne ouzont ket petra reont ».

Evel Mari, hon skouer, roomp ar renk kentan da Zoue en hon c'halon hag en hon buhe, ha bezomp, war an dro, madelezes e kenver an nesan, mat e kenver ar paour, trugarezus e kenver hon enebourien.

SKOUER

Er bloavez 1793, epad an Dispac'h Bras, eun di-jentil, barnet d'ar maro, a save war ar chafod evit beza dibennet. E wreg, eur gristenez vat, a gerze war e lerc'h, beuzet en he daerou ganti, dorn ouz dorn, he bugel yaouank-flamm. Pa gouezas penn ar

merzer dindan ar gontel, ar vamm baour a gavas nerz awalc'h evit kemer etre he diouvrec'h ar bugel, hag o sevel anezan war-zu an nenv, e lavaras : « Ma Doue, me ho ped, roit d'am mab ar c'hras da bardoni da vourreo e dad, evel ma pardonas Mari da vourrevien Hon Salver. O ma mab bihan, gra d'in ar promese n'az po biken kasoni ouz an torfetour a ra diouzit hirie eur bugel emzivad ».

Ar bugel a brometas, ha pedenn ar vamm a voe chilaouet gant Doue.

Da bemp bloa warnugent ,bugel ar merzer a voe beleget hag eun devez e tigouezas d'ezan rei an aluzen hag an absolver da vuntrere e dad.

Setu aze penôs ec'h ouve en em venji ar gwir gristenien : renti a reont d'o enebourien ar vad evit an droug.

O Mari, Mamm ar gwir garante, deskit d'imp karout Doue a greiz kalon, dreist pep tra, ha grit d'imp beva er bed-man en peuc'h an eil gant egile, evel bu-gale ar memez Tad, evel gwir vreudeur!



DAOUZEKVET DEVEZ

Pedenn ar Werc'hez

I. Mari a bede hep paouez.

II. Mari a bede a greiz kalon.

I

« Ret eo pedi heb ehan », eme Hon Salver ; hag hen e-unan en deus pedet hep paouez, hag en noz hag en de, evit rei da c'houzout d'imp penôs eo ar bedenn hon dever kentan.

Pedi n'eo ket hepken eun dra vat ha santel, beza eo eun dra ret ; dilezel ar bedenn, tremen hep pedi a zo trei kein da Zoue ha kemer hent an ifern. An neb na bed ket n'eus ken ennan a vuhe gristen ; henvel eo, eme Sant Yann Krysostom, ouz eur c'horf maro. Eur c'horf maro a zo sklaset ; ne finv ket ; mut, dall ha bouzar eo war an dro ; prestik e krogo ennan ar prened ha ne vano war e lerc'h nemet eun dornad ludu. Evel-se ive an ene dibater n'eman ken ennan gras ha karante Doue ; ne glev ken mouez e Grouer ; ne wel ken dirazan sklerijenn ar wirione ; ne gerz ken war hent ar baradoz ; krignet eo gant breinadur ar pec'hed ,da c'hortoz mont da leski en tan an ifern.

Da heul he Mab Jezuz, buhe ar Werc'hez a zo bet eur bedenn beurbadus. Ar bedenn-se a zo bet boulc'het gant Mari kerkent ha m'eo bet krouet he ene ha n'eo ket klozet nemet gant he huanad diwe-

zan. Adalek ar beure betek an noz, kerkoulz e kreiz al labour evel epad an diskuiz, e talc'he kaoz gant an Otrou Doue, hag epad he c'houisk ,zoken, eme an Tadou Santel, Mari ne zistroe ket diwar ar bedenn.

Gallout a rae lavaret, evel Pried Levr ar C'hantikou : « Kousket eo ma c'horf, met ma c'halon a zo dihun ».

N'eo c'hoaz nemet eur bugel ha dija, en ti he mam Santez Anna hag en Templ Jeruzalem, e kavomp anezi o pedi, evel diwezatoc'h, pa vo plac'h yaouank, pe dimezet da Sant Jozef. Setu perak, pa deu an Ael Gabriel eus ar baradoz evit lavaret d'ezi eo galvet gant an Dreinded da veza Mamm da Salver ar bed, e welomp anezi stouet d'an daoulin o pedi. Heuilhet anezi en pep lec'h hag en peb amzer, en kraouig Bethleem, war hent an Ejipt, en kêr Nazareth, war vene Kalvar, ebarz ar Gambrlid, gant an Ebestel, pe en ti Sant Yann, goude m'eo pignet he Mab d'an nenv ; netra, nag al labour, nag ar boan, ne deu a-benn da zistrei he spered diouz Doue. Ha breman, e kichen tron an Otrou Doue, petra ra c'hoaz ar Werc'hez, nemet pedi evit he bugale, noz de ?

Evel Mari, evel ar Sent, pedomp, pedomp alies ; na skuizomp ket o pedi ! Bezomp tud a bedenn ! Ret eo pedi, eme Hon Salver. Pedi eo kentan dever an den er bed-man. Evit mont d'ar baradoz, n'eus ezomm na nerz, na spered na danve ; met ret eo beza den a bedenn. Ar bedenn eo alc'houez dor ar baradoz ; ar chadenn a zalc'h an den stag ouz Doue. Betegout koll grasou mat an Otrou Doue ha c'houita war hon evurusted en nenv, dalc'homp da bedi. Meur a sant, o veza ma kave re verr an de evit pedi, en deus kustumet rei lod eus an noz d'ar bedenn ha sevel e kreiz e gousk da zaoulina ha da lavaret pa-terou.

Ma kavomp re diaes derc'hel da bedi hed-da-hed an de, da vihanan diwallomp d'ankouaat daoulina, bep beure, evit goulenn bennoz war hon devez ; ha pedi adarre arôk mont da gousket, evit goulenn pardon eus hon fec'hejou ha trugarekaat an Otrou Doue da veza miret ac'hanomp. Bezomp aketus ive d'ober sin ar Groaz, arôk pred ha goude pred, e kreiz ar riskl hag an dentasion. Epad hon labour, e kreiz hon foan, savomp, gwech ha gwech-all, hon spered hag hon c'halon war-zu an nenv : o vont hag o tont gant an hent, lavaromp eur bedenn verr bennak evel : « Ma Doue, me ho kar a greiz ma c'halon ; — Jezuz ha Mari, ma sikourit ; — ma Doue, ho pezit true ouzin ; — Bennoz da Jezuz ; — Me ho salud, Mari... » Ha lakomp hon holl oberou, graet gant karante evit Doue, da dalvezout koulz ha pedenn dirak e zaoulagad.

Hen gwelet a ret ; pedi a zo eun dra aezet, an neb a gar. Awalc'h eo kustumi hen ober.

II

Pedi a zo komz ouz Doue ; arabat, neuze, pedi hep sonjal er pezh a lavaromp, hag ankouaat ouz piou e komzomp ebarz ar bedenn.

Pa bedomp, na reomp ket evel ar pennou-skanv ; tölomp evez ouz ar pezh a reomp ; distagomp hon spered diouz treou ar bed-man ; savomp hon c'halon war-zu Doue, evit hen meuli ha goulenn digantan e c'hrasou. Kalz a bed ha na ve ket chilaouet o fedenn, abalamour ne bedont ket evel m'eo dleet.

N'eo ket awalc'h pedi ; pedomp ervat, da lavarret eo, gant evez, fizians hag izelegez.

Na vezomp ket evel ar Judevien hag a lavare Doue dioutê : « Ar bobl-man a veul ac'hanon gant he muzellou, met he c'halon a zo pell diouzin ».

Epad ar bedenn, greomp evel eur paour o c'houlenn an aluzen. Chom a ra dirazoc'h diskabel ; astenn a ra e zorn ; klask a ra ar stumm ar gwellan da deneraat ho kalon ha da lakaat ac'hanoc'h da gaout true outan ; ha ne roio peuc'h ebet ken en devo bet e vennad.

Doue eo perc'hen an holl vadou ha n'omp dirazan nemet peorien .Mar fell d'imp beza chilaouet, tostaomp outan gant doujans ha gant feiz. An den ne ve ket pell o skuizan hag o klemm en abeg ma c'houlenner re digantan. Madelez an **Otrou Doue** a zo ken bras hag e c'halloud ; ne skuizo biken o hada grasou ebarz ar bed. N'en deus nemet eun dra da rebech d'imp : ne c'houlennomp ket trawalc'h digantan : « Goulennit ,eme Hon Salver, ebarz an Aviel, hag e vo roet d'ec'h ».

Taolit plê d'an dra-man : nebeut a zo hag a bed evel m'eo dleet ha, koulskoude, n'eus tra ebet aeze-toc'h d'ober eget pedi ervat. N'eus ezomm ebet eus levriou na deskadurez vras evit pedi. Awalc'h eo kaout eur spered evit gwelet Doue gant daoulagad ar feiz, hag eur galon evit hen karet. Hogen, pep hini ac'hanomp, daoust ha pegen dister e c'hallfe beza, kenkoulz ar bugel dinerz evel ar paour dizesk, en deus bet digant Doue eur spered hag eur galon. Digoromp eta hon spered hag hon c'halon ; serromp hon diousskouarn ouz trouz ar bed ; loskaomp pep sonj all evit sonjal hepken en Doue hag en ezommou hon ene ; rak pedenn ar muzellou, pa ne ve ket ar galon da heul, ne dalve netra dirak Doue. Met eur bedenn graet mat n'hell ket mankout da veza chilaouet.

Sellit ar Werc'hez o plêal gant he fedennou pemdezlek, graet en he zi ; o sevel he spered hag he c'halon warzu an Otrou Doue, e kreiz he labour, pe daoulinet ebarz an Templ, epad al lidou hag ar sa-

krifisou. E keit-se, eo ankouaet ganti ar bed hag an douar ; he spered a chom evel beuzet en Doue, hag eus he c'halon e sav eur c'han dousoc'h evit mouez an Aele ,eur c'houez vat henvel ouz mogedenn an ezansour o sevel warzu an nenv. Pa ziskennas eus an nenv an Arc'hêl Gabriel, evit saludi ar Werc'hez, e kavas anezi stouet d'an daoulin war have he c'hambur, o pedi Doue da gaout true ouz an dud ha da hasta digas d'eze eur Salver. En kraou Bethleem, ar bastored, diredet da saludi ar Mabig Jezuz, a gavas Mari daoulinet ouz kavel ar Bugel neve c'hanet .An Aviel a gont d'imp penôs Mari a zal'he mat en he c'halon kement tra he devoa klevet pe gwelet diwarbenn he Mab, hag ar sonj dioute a deue da veza evel magadurez he spered.... War vene Kalvar, daerou ha glac'har ar Werc'hez, gwelloc'h evit komzou, a ziskoueze al lod a gemere ebarz anken mantrus Hon Salver stag ouz ar Groaz. Ha goude ma voe pignet Jezuz er baradoz, da bep mare, spered Mari, distag diouz treou an douar, a save warzu an nenv, skanvoc'h evit an Alc'houeder, d'en em unani gant he Mab. E keit-se, Mari ne veze ket ganti kalz a gomzou : ar gwellan stumm da bedi n'eo ket derc'hel da dorna langaj, met beza unanet gant Doue ha digeri d'ezan frank dor hon c'halon. N'eo ket ar pedennou an hiran a blij ar muian da Zoue.

SKOUER

Epad ar brezel diwezan, meur a soudard en deus adkavet ar feiz e kreiz ar riskl hag ar spont. Setu aman petra a c'hoarvezas gant unan aneze. Kaset e oa bet war al linenn, e-unan, da c'hedal an enebourien, ha pa sonje an nebeutan ,eun obus a gouezas en e gichen ha kerkent en em gavas paket dindan

eur bern douar, douaret en beo, hep gallout na huchal, na finval. Mouga rae dindan ar bec'h. O sonjal e oa achu gantan, en em erbedas ouz ar Werc'hez. Gouzout a ouie-c'hoaz eur ger bennak eus an « Ave Maria », bet desket gantan gwechall ebarz ar gêr, pa oa bugel. Ar pez a ouie a lavaras eus e wellan, ha ne gollas ket e boan. Ne oa ket achu mat gantan e bedenn ma teuas eun obus all da goueza ken brao ma skubas ar plas : hag ar soudard a savas ac'hane yac'h ha pare..

O Jezuz, hon Mestr ; o Mari, hon Mamm, c'houi hag hoc'h euz kement pedet war an douar, deskit d'imp pedi ha pedi gant fizians ha karante, gant gwir izelegez.



TRIZEKVET DEVEZ

Izelegez pe humilite ar Werc'hez

- I. Mari a zo bet izel a galon.
- II. Setu perak eo bet savet dreist d'an holl grouadurien.

I

An izelegez eo rouanez ar vertuziou kristen, mamm ar furnez, gwirzienn an holl vadou. Hep-hi, n'hallfomp ket plijout da Zoue na kaout sikour digantan, rak, eme ar Spered-Santel : « Doue a ro e c'hrasou d'ar c'halonou izelek hag a ra skouarn vouzar ouz an dud lorc'hus ». Kaer ho po pleustri an ilizou, pedi Doue hag ar Sent, rei aluzen hag ober pinijennou start, ma n'oc'h ket izel a spered hag a galon, an treou-se n'o deus talvoudegez ebet evit ar baradoz.

Ha Jezuz, deut war an douar evit diskouez d'imp hent ar silvidigez, a lavare d'e ziskibien : « Deskit ganin ez on dous hag izel a galon.... E gwirione, emezan, ma ne chenchet ket ha ma ne deuet ket da veza henvel ouz bugale vihan, n'efet ket en Rouantelez an nenv. Rak-se, an neb en em lakao izel, evel ar bugel bihan-man, a vo ar brasan en Rouantelez an Nenv. An hini ac'hanoc'h en em izela ar muian, hennez eo ar brasan ».

Warlerc'h Hon Salver, an holl Sent o deus miret ar renk kentan d'ar vertu-man. Unan aneze, Sant

Aogustin, a lavare : « Ma c'houlennet diganin pehini eo an hini kentan etouez an holl vertuziou, e respontin d'ec'h : an izelegez ; — pehini eo an eil ? an izelegez ; — pehini eo an deirvet ? an izelegez. Ha kement gwech a refet d'in ar memez goulenn, e roin d'ec'h ar memez respont ».

Mari, Rouanez an holl Sent, a zo bet trec'h d'an holl dud dre he izelegez. E koulz an neve-amzer, pa deu ar bleun da zifluka dindan nerz an heol, e kaver a bep tu, er prajeier ha war ar mêziou, kuzet er c'hlazenn, eur vleuennig dister, glas evel an oabl ha ganti eur c'houez dispar ; he hano, bokedig troad-eboul, e galleg, « violette ». Ar vleuenn-man ken koant a zigas sonj d'imp eus eur vleuenn-all hep par, ar Werc'hez Vari, diwanet e liorzou an Otrou Doue. EVELTI, Mamm Doue he deus tremenet er bed-man, sioul ha kuzet, anavezet gant Doue hepken hag e Aeel. Hed-da-hed he buhe, Mari a chomas kuzet dindan mantel an izelegez. Eviti da veza merc'h da Rouanez Israël, n'eo ket ebarz eur palez, met en eun ti dister e voe ganet : nebeut a dud a deuas endro d'he c'havel hag ar c'helou ne voe ket embannet ebarz ar vro. Ar Skritur-Sakr, end-eün, gant doujans evit izelegez ar Werc'hez, a lavar d'imp nebeut a dra diwar-benn ar bugel-se dibabet, koulskoude, evit beza Mamm Salver ar bed... Kreski a reas dizeblant, hep gouzout d'an dud, ha den ne deuas en e spered klask gouzout petra a deuje da veza, diwezatoch, plac'hig Anna ha Joakim. Piou en dije sour-siet eus eur c'hrouadur ganet e ti kerent paour hag ezommek, gwall-gouezet eus o renk gwechall ? D'an oad a dri bloa, e weler anezi o kimiadi diouz ar bed, diouz he Mamm hag he zi, evit en em denna en Templ Jeruzalem ha tremen eno amzer he yaouankiz, pell diouz an drouz, dindan lagad an Otrou Doue, o pleal gant ar bedenn hag al labour. Pa deuas an Ael Gabriel da ziskleria d'ezi e oa bet choazet da

veza Mamm da Salver ar bed, Mari a chomas souezet bras ; met elec'h en em lakat da sonjal en enor dispar digouezet d'ezi a-berz Doue, e respontas gant izelegez : « Me a zo servijerez da Zoue ; ra vo graet d'in herve ho komz ». Peurvuian, e ve prez warnomp da denna lorc'h eus hon renk, eus hon danve pe eus hon stad ; elec'h Mari ne glask nemet ar renk an izelan. Setu perak, de ar Burifikasion, e welomp anezi o 'n em guza etouez ar gwraze all, evel pa vije an disteran dioute, ha goude en em denno en kêrig Nazareth, evit beva eno paour ha didrous, ankouaet gant an holl. Seul-vui eo savet gant Doue, seul-vui en em izela dirak an dud. Pa vo eun enor, pe eur veulodi, pe eur vad bennak da zigemer, hep mar ebet, Mari ne vo ket eno. Ha gant se, war vene Thabor, pa ziskouezo Jezuz d'e ziskibien eur skeud eus e c'hloar, Mari ne vo ket en e gichen. Ha de ar Bleuniou, kenkoulz-all, pa vo graet d'Hon Salver eun digemer eus ar c'haeran, Mari a chomo er gêr, betegout jacha warni an disteran lod eus an enor roet d'he Mab gant ar Judevien. Pep tro, avat, ma vo eun dra bennak da c'houzanv, war hent ar C'halvar, ouz troad ar Groaz, Mari a chomo e kichen Jezuz, evit ranna gantan an dismegans, ar vez hag an ingratiri, ha kemer perz en e verzerenti. Ar Werc'hez, elec'h ruzia da veza Mamm an hini a zo barnet evel eun torfetour, a heuilh anezan kalonek betek ar maro, ha dre eno e ro d'imp eur gaer a gentel a izelegez.

II

Hon Salver a lavar d'imp ebarz an Aviel : « An neb en em izela a vo savet ». Kement-se a zo bet gwir mat evit e Vamm. « Krouadur ebet, eme Bos-suet, n'eo bet brudet evel Mari, dre n'eus bet hini hag a vije ken izelek ha hi. »

Mari a zo bet trec'h d'an holl dre he izelegez, ha setu perak n'eus bet biskoaz den ken enoret, ha war an douar hag en nenv .

War an douar, an izelegez he deus karget anezi a c'hrasou, graet d'ezi gonit ar renk kentan etouez an holl Sent ha meritout an enor da veza Mamm da Zoue.

Sellit aze petra a zigouezas ganti de an Annonciation. « An Ael Gabriel, eme Sant Lukas, a oa bet kaset gant Doue d'eur gêr eus ar Galile, galvet Nazareth, da gaout eur Werc'hez dimezet d'eun den eus a ligne David, hanvet Jozef, hag ar werc'hez-se a oa he hano Mari. O veza deut en ti, an Ael a lavaras d'ezi : « Me ho salud, o leun a c'hras, an Otrou Doue a zo ganec'h ; benniget oc'h dreist d'an holl gwraze... »

O klevet kement-se, Mari a oa nec'het hag a glasket petra a oa ar salud-se. An Ael a lavaras d'ezi : « N'ho pet ket aon, Mari : kavet ec'h eus gras dirak Doue ; c'houi a gonsevo hag a c'hano eur mab, ha c'houi a roio d'ezan an hano a Jezuz. Bras e vo ha galvet e vo Mab an Holl-C'halloudeg, hag an Otrou Doue a roio d'ezan trôn David, hag e reno da viken war rouantelez Jakob. »

Eun all, elec'h Mari, en dije tridet he c'halon gant al lorc'h hag ar joa, o klevet seurt kelou. Met Mari, leun a izelegez, a van strafuilhet o klevet kement-man. Graet he deus al le da chom bepred gwerc'hez ; krena 'ra o sonjal e vo ret d'ezi, hep mar, terri he gwestl evit beza mamm. Pa gomprenas, avat, e c'hellje beza gwerc'hez ha mamm war an dro, neuze Mari a lavaras : « Me a zo servijerez an Otrou Doue ; ra vo graet d'in herve ho komz ». An Ael a dec'has neuze. Kerkent, Doue a reas ar pez en devoa lavaret an Ael, ha Mari a deuas war an eur da veza Mamm da Zoue.

E keit m'eman an Otrou Doue o sevel anezi er renk uhelan, Mari en em izela mui-ouz-mui hag en em sell evel an diwezan etouez e holl servijerezed. Pebez izelegez a-berz ar Werc'hez ! Ha pebez kentel evidomp-ni ken stag ouz ar brud hag ar veulodi !

Na gwir eo komz Sant Bernard : « Virginitate placuit, humilitate concepit ! » Dre he gwerc'hted he deus plijet da Zoue, met paneved d'he izelegez, Mari ne vije ket bet dibabet da veza Mamm da Salver ar bed.

Goude ar burzud-man, Mari a yeas da welet he c'henitervez Santez Elizabeth. Dal ma klevas salud Mari, pried Zakari a savas he mouez hag a lavaras : « Benniget oc'h dreist d'an holl gwraze ha benniget eo ar frouez a zouget. Hag a belec'h e teu d'in an eurvad da welet em zi Mamm ma Doue ! O ! nag evurus oc'h c'houi da veza kredet ; rak kement a zo bet lavaret d'ec'h a-berz Doue a c'hoarvezo ».

Mari, bepred izeloc'h a spered hag a galon, elec'h kaout lorc'h eus a gement-se, a gasas da Zoue an enor eus an holl dreou burzudus c'hoarvezet enni hag a reas war an eur ar c'hantik kaer, anavezet gant an holl, ar « Magnificat » : « Ma ene a veul an Otrou Doue ma Salver, abalamour en deus taolet e sellou war izelegez e servijerez. Adalek breman e vin galvet evurus gant an holl boblou, rak treou bras en deus graet ennon an Holl-C'halloudeg. Diskaret en deus an dud vras diwar o zrôn ha savet an dud distret ».

Kemeromp skouer war izelegez ar Werc'hez : evelti, meulomp ha trugarekaomp Doue e pep tra ; chomomp izel dirak an nesan.

Er bed all dreist-holl, e ve digollet ar Sent eus o foan, o labour hag o vertuziou. Setu a belec'h e teu an digemer dispar graet da Vari er baradoz. Douget

eo d'an nenv gant an Aele ; galvet eo da vont d'azeza e kichen he Mab Jezuz ; laket eo etre he daouarn tenzor an holl c'hrasou ha, war he fenn, ar gurunenn skedus a Rouanze an holl Sent hag an holl Aele ; hiziken, an holl grouadurien, ebarz an nenv ha war an douar, a dle d'ezi enor, doujans ha karante. O! nag uhel eo savet Mari ebarz an nenv! Dre ma he deus c'hoantaet beva kuzet ha tremen evit an hini disteran etouez an dud, eo savet dreist d'an holl ebarz rouantelez an nenvou.

SKOUER

Eun devez bennak, Jezuz a lavaras d'e ziskioien ar barabolenn-man, evit hiniennou o devoa re a fizians enne o-unan hag a zisprize ar re-all : Daou zen a bignas d'an Templ da bedi ; unan a oa eur Farizian ; egile eur Publikan. Ar Farizian, en e sav, a bede evelhen : « Ma Doue, me ho trugareka abalamour n'on ket evel an dud all, a zo laeron, avoutre-rien ; nag ive evel ar Publikan-se. Yun a ran diou wech ar sun ; rei a ra en aluzen an dekvet lodenn eus ma holl danve ». Ar Publikan a chome pell a-drenv ha ne grede ket sevel e zaoulagad ; met skei a rae war boull e galon, en eur lavarout : « Ma Doue, ho pet true ouzin, pec'her ma 'z on ». Me a lavar d'ec'h : heman a ziskennas d'e di pardonet ; egile, avat, ne voe ket pardonet. Rak kement hini a fell d'ezan en em sevel a vo diskaret, ha kement hini en em laka izel, a vo uhelaet ».

O Jezuz, dous hag izel a galon, o Gwerc'hez santel, gwir servijerez an Otrou Doue, roit d'imp eun tam-mik eus ho izelegez!

PEVARZEKVET DEVEZ

Glanded ar Werc'hez

- I. Mari a zo skouer ar glanded.
- II. °Mari a zo difennourez ar glanded.

I

Al lilienn wenn-kann eo ar vieuenn a zigas sonj d'imp eus glanded ha santelez ar Werc'hez. Ha Doue, ebarz ar Skritur-Sakr, a lavar ar c'homzou-man : « Evel ar bod lili emesk ar broudou spern, evelse an hini a garan ar muian a sav etouez holl verc'hed kêr Sion ».

Ar gwerc'hted, ar glanded, a zo ar re gentan, ar re gaeran eus an holl vertuziou. Ar glanded a blij da Zoue dreist pep tra, rak an hini a zo glan a gorf, a spered hag a galon a deu da veza henvel ouz eun Ael. « Tud gwerc'h, eme Sant Aogustin, c'houi eo Aele an douar. » « Tremen a ret arôk an Aele, zoken, eme Sant Yann Krysostom ; an Aele n'eo ket diaes d'eze beza glan, peogwir n'o deus korf ebet ; elec'h an den, war an douar, ret d'ezan en em zifenn ouz an drouk-spered, ar bed hag an techou fall, en deus muioc'h a c'hounid ha muioc'h a c'hloar o chom glan ha dinamm dre an nerz-kalon hag ar volonte. » Seul gwennoc'h eo eur galon, seul tostoc'h eo da Zoue, ha Jezuz er bed-man en deus kavet e vrasan plijadur o veva e kichen kalonou dinamm. Ar vn-

gale vihan, dre n'anavezont ket an droug, a oa e wellan mignoned : « Loskait ar vugale vihan da dostaat ouzin, emezan ; evit ar re a zo henvel outê eo miret rouantelez an nenvou ».

Etouez an holl diskibien, an hini a gare dreist d'ar re-all a oa an Abostol Sant Yann, abalamour ma oa glan. Sant Jozef a oa bet choazet da veza e Dad-Mager abalamour ma oa gwerc'h. Ha levr an Apokalyps a zesk d'imp penôs an dud a vo bet chomet gwerc'h er bed-man a vo laket tostoc'h da Zoue ebarz ar baradoz hag eno, gwisket e gwenn, e heuilhfont an Oan divin e kement lec'h ma 'z eio.

Kaeran tra a c'halfe c'hoarvezout gant eun den eochom glan a gorf hag a ene.

Eur vertu ken kaer a dlee, evel just, beza lod Mamm Doue ! An Tadou Santel hag an Iliz a c'halv anezi Rouanez ar gwerc'hez.

« Pa gomzer eus Mari, eme Sant Aogustin, e tleer-tevel diwar-benn ar pec'hed. » Biskoaz pec'hed, na bras na bihan, n'en deus stoket ouz ene ar Werc'hez. Penôs en dije gallet an Otrou Doue lezel dindan gallow an drouk-spered, epad eur pennadig hepken, an hini a oa bet dibabet, a beb amzer, da veza Mamm da Salver ar bed ?

Setu perak, adalek ar penn-kentan euz he buhe, dre eur burzud dispar, ar Werc'hez Vari a zo bet diwalet diouz mastar ar pec'hed orijinel, ha konsevet hep pec'hed. Deut er bed-man en eur stad a santelez, Mari, d'an oad a zri bloa, en em westlas da Zoue korf hag ene hag a zalc'has d'he le betek he huanad diwezan. Gwerc'hez epad he yaouankiz ; gwerc'hez pa gonsevas Mab Doue dre vertu ar Spered-Glan ; gwerc'hez pa c'hanas he Mab, Mari ne reas nemet sevel uheloc'h bemde e skeul ar santelez, rak beza unanet gant Doue n'hell nemet kreski ha kaeraat ar gwerc'hted.

Abalamour d'e santelez dreist-muzul, Salver ar bed n'helle kemer evit Mamm nemet eur grouadurez dinamm : dre se, ma vije bet kouezet ar Werc'hez en eur pec'hed bennak, an disteran zoken, ne vije ket bet din da veza Mamm da Zoue. Met Mari a zo chomet bepred gwenn-kann evel an erc'h ; ha setu perak e hanvomp anezi, gant an Iliz : Mari bepred Gwerc'hez ; Gwerc'hez dinamm ; Mamm pur ha dinamm ; Rouanez an Aeel hag ar Gwerc'hez.

II

Goude beza meulet hag enoret Mari abalamour d'he santelez, taolomp plê da gerzet war he roudou ha da virout hon eneoù dinamm. Heb ar vertu a c'hlanded, n'efomp ket d'ar baradoz. « Piou, eme ar roue santel David, a savo war vene an Otrou Doue, ha piou en em zalc'ho en e balez en nenv ? An hini eo neat e zaouarn ha glan e galon. »

« Evurus, eme Hon Salver, ar re a zo glan o c'hallon, rak gwelet a refont Doue. » Memez tra evel ma n'heller gwelet sklerijenn an de nemet gant daoulagad yac'h, evelse ive n'euz nemet an eneoù flamm o welet Doue, ha netra saotret ne vo digemeret er baradoz.

Ar glanded a zo eur berlezenn a dalvoudegez vras, skedusoc'h evit ar stered hag an heol : an aour en he c'hichen n'eo nemet pri, hag an arc'hant nemet fank : henvel eo ouz eur rozenn gaer meurbet, hag an tri Ferson eus an Dreinded a blij d'eze dont da rufia ar c'houez-vat a deu diouti.

Ha koulskoude, daoust pegen flour eo bleuenn ar gwerc'hted, n'eus netra teneroc'h eviti : an disteran barr-avel a zo awalc'h evit he gwenvi hag he dispenn. « Bezit eta war evez, eme an Abostol Sant

Paol, rak en eul lestr gwall vresk hag aezet da derri, e touget an tenzor kuzet en ho kalon. »

Greomp eur sell war vuhe ar Werc'hez ha gwe-lomp penôs he deus en em gemeret evit miret he spered hag he c'halon dinamm. Eviti da veza startaet er fuñez; dre c'halloud an Otrou Doue, ha diwallet, dre eur burzud iskis, diouz an droug, diouz an dentasion ha youlou direiz ar c'hig, Mari a gerze bepred gant evez bras hag izelegez, evel pa vije bet an disteran eus ar grouadurien. Henvel ouz ar goulm kuzet e dônder ar c'hoajou ha prest da gemer an tec'h adalek ma klev an disteran trouz, ar Werc'hez a daole plê da bellaat diouz kement tra en dije gallet bihanaat he santelez. E pep mare, he spered a oa evel beuzet en Doue ; en em denn a rae pell diouz tabut ar bed ; he c'halon a oa distag diouz madou ha plijadurezou an douar ; plêal a rae gant ar bedenn ; evesaat a rae war he sonjou ha war he sellou, betegout displijout da Zoue ; ha pa deuas an Ael Gabriel d'he saludi ha da lavaret d'ezi e oa choazet gant Doue evit beza Mamm da Jezuz, elec'h sonjal en enor dispar a zigoueze ganti, Mari a davas mik hag en em lakas da grena gant ar spount, betegout vije ret d'ezi koll he gwerc'hted evit dont da veza Mamm da Zoue... Ar skeud hepken eus ar pec'hed a oa trawalc'h evit he strafilha. « O Mari, Mamm leun a c'hlanded, c'houi a zo kaer meurbet hag ar pec'hed n'en deus gallet netra warnoc'h ! »

Dirak ar Werc'hez dinamm, bezomp mez eus hon buhe dremenet ha kemeromp ar stum da blijout d'an Hini a gav e blijadur o peuri e kreiz al lili. Karomp dreist pep tra ar vertu a c'hlanded a laka ac'hanomp da veza henvel ouz an Aele, hag evit-se, heuilhomp, herve hon nerz, an hent pleustret gant Mari hag ar Sent. Elec'h rei tu d'an dentasion ; elec'h c'hoari gant an droug, evel ma ra ar vugale diskiant gant

an tan, elec'h mont da benn hent d'ar pec'hed, troomp kein d'ar gwall gompagnunez ; greomp fae war giziou ar bed ; distagomp hon spered hag hon c'halon diouz an ebatou hag ar plijadurezou direiz ; evesaomp ervat hon sonjou ; beilhomp war hon diskuarn hag hon daoulagad, gant aon na chomfent digor da zigemer avel ar pec'hed ha c'houez ar breinadur ; miromp digailhar hon c'horf hag hon ene.

Arabat vije d'imp, koulskoude, sonjal dont a-benn eus hon labour, nemet gant sikour an Otrou Doue ha hini e Vamm.

Ar glanded, evel an erc'h, a deu eus an nenv. Tan an hudurniez ne ve mouget nemet gant gliz ar baradoc.

Biken ne deufomp da veza glan, nemet gant sikour Doue. Pedomp eta gant izelegez ha fizians, dreist-holl e mare an dentasion ; tostaomp alies ouz an Daol santel da zigemer bara an Aele hag ar gwad divin a laka ar glanded da ziwan er c'halonou ; en em lakomp dindan skoazell Gwerc'hez ar Gwerc'hez, an Itron-Varia.

Eur stumm da veritout beza diwallet ganti eo lavaret bemde, en he enor, tri « Ave Maria », gant ar bedenn verr : « O Mari, konsevet hep pec'hed, pedit evidon ! »

SKOUER

Ebarz Istor Breiz e lennomp an dra-man. Unan eus hon rouane koz aet da chaseal gant eun toullad mignoned a gavas en eur c'hoad eun herminig vihan wenn. Kerkent, ar chas en em lakas da harzal ha da redek war he lerc'h. Ar paour kêz loen, spountet, a glaskas kemer an tec'h, met prestik en em gavas dirak eun toufle leun a fank. Evit mont pelloc'h, e

vije bet ret d'ezan treuzi an dour lous ; met an herminig, gwelloc'h ganti beza taget evit mastari he bleo gwenn e kreiz ar fank, a chomas eno nec'het. Ar roue, o welet kement-se, a gemeras true ouz al loen paour. Tapout a reas anezan etre e zivrec'h hag e lavaras d'e vignoned : « Setu aman eur gaer a gentel evit an holl Vretoned ! An herminig-man a oa gwelloc'h ganti beza taget evit beza mastaret. Kemeromp skouer warni. Hiviziken, war vanniell hon Bro e vo skrivet ar c'homzou-man : « Potius mori quam fœdari ; en em vastari, biken ; kentoc'h mervel ! » Krenn-lavar ar roue breton a dleje beza lezenn pep kristen.

Kasit ac'hanomp, Gwerc'hez dinamm, war ho lerc'h, gant c'houez vat ho santelez !



PEMZEKVET DEVEZ

Sentidigez ar Werc'hez

- I. Mari a zo bet sentus.
- II. War he lerc'h, deskomp senti.

I

An hent ar berran hag ar gwellan evit mont d'ar baradoz eo senti : an hini a zo sentus a gas da benn e holl deveriou ; anez senti, n'hallomp ket plijout da Zoue.

Mari he deus heuilhet al lezenn-man, adalek ar penn kentan eus he buhe betek he maro ; biskoaz n'he deus klasket nemet eun dra : ober bolonte an Otrou Doue.

Abred, e skol he Mamm Santez Anna, ar Werc'hez a zeskas senti.

D'an oad a dri bloa, ar bugel a glev eur vouez dous-murbed o lavarout d'ezi : « Kuita da di ha da gentent ha deus er vro a diskouezin d'it ». Hep mar ebet, ar vouez-se eo mouez an Otrou Doue. Kerkent e welomp anezi o kimiadi diouz he zad hag he Mamm hag o pignal gant treujou Templ Jeruzalem, elec'h ma chomo kuzet epad daouzek vloa, o ren eur vuhe a bedenn hag a labour, o heuilh, dreist pep tra, gant doujans ha kalon, ar c'henteliou hag ar skoueriou mat roet d'ezi gant ar vestrezed karget d'he c'helenn.

Diwezatoc'h pa vo deut eviti ar c'houlz da zi-mezi, ar Werc'hez a vo ken sentus all e kenver he fried, Sant Jozef, penn-tiegez ar Familh Santel.

Pa deu an Arc'hael Gabriel d'he saludi ha da rei da anaout d'ezi eo bet choazet gant Doue evit beza Mamm Salver ar bed, Mari ne gav nemet eur ger da respont d'ezan : « Me, emezi, eo servijerez an Otrou Doue ; ra vo graet d'in herve ho komzou ». Kentan dever eur servijerez, kentan karg eur vatez eo senti ; setu perak Mari a ro kerkent he asant da gomzou an Ael.

O veza Mamm dre c'halloud ar Spered-Santel, ar Werc'hez Vari a voe aliet gant Doue da vont da gaout he c'henitervez Santez Elisabeth. Kuit a varc'hata, setu hi raktal o vont a-dreuz d'ar meneziou, hep sonjal eo hir ha diaes an hent. Doue a fell d'ezan an dra-se ? Awalc'h eo evit e servijerez ; kzel a ra a-goste pep digare ; ne sell tamm ouz ar boan. Mari n'he deus nemet eur c'hoant : ober plijadur da Zoue.

Mar eo sentus e pep tra ouz mouez an Otrou Doue, Mari ne welfet ket anezi o vont eneb da lezennou he bro na da c'hourc'hemennou ar pennou-bras karget da ren ar bobl. Eun urz embannet en hano an impalaer Sesar-August a gemenne da bep den mont da rei e hano er gêr ma oa ganet e dud koz. Mari ha Jozef a oa o-daou eus ligne ar Roue David : kerkent, en despet d'ar gouanv, setu hi war bale o vont eus Nazareth da gêr Vethleem, evit senti ouz an impalaer.

Eiz de goude m'eo ganet ar Mabig Jezuz, Mari a ro d'ezan e hano, evel m'eo skrivet e lezenn ar Judevien, hag an hano-se a vo an hini bet diskleriet d'ezi gant an Ael.

Pa deu eviti amzer ar Burifikasion, Mari a deu adarre gant he Mab d'an Temple, da ginnig anezan

da Zoue, hag evit rei d'imp eur gentel a sentidigez, ne loskao ket a-goste an disteran eus al lidou gourc'hemennet gant Moyzez. Ha bep bloa, d'ar c'houlz merket ebarz al lezenn, ar Familh Santel a gemer hent Jeruzalem hag a ya betek ti an Otrou Doue da gemer perz er goueliou kaer lidet gant ar veleien hag ar bobl.

Pa deuas evitan an eur da c'houzav e Basion, Jezuz ne fellas ket gantan mont da benn hent d'ar maro, nemet goude beza bet aotre digant e Vamm, hag ar Werc'hez ne voe ket awalc'h d'ezi rei he asant, c'hoantaat a reas, zoken, kemer lod e poaniou he Mab ha meska he daerou gant gwad Salver ar bed.

« Diou aoter, eme an den santel Arnauld de Chartres, a zo bet savez war venez Kalvar : unan ebarz kalon ar Werc'hez ; eben war ar groaz, hag o-diou evit kinnig da Zoue ar memez sakrifis, rak bolonte Jezuz ha bolonte Mari na reont nemet unan hepken. Pedenn ar Werc'hez a oa ar memez pedenn evel hini he Mab : O ma Zad, ho polonte bezit graet ha nann ma hini ! Evel Jezuz, Mari a zo bet sentus, sentus betek maro he Mab war ar Groaz ! »

Hed he buhe eta, e kreiz ar joa hag e kreiz ar boan, Mari n'he deus klasket nemet eun dra : ober bolonte an Otrou Doue.

II

Etouez an holl vertuziou kristen, an hini gentan eo ar sentidigez. Senti eo al lezenn roet da bep krouadur digaset er bed-man gant an Otrou Doue. Graet omp evit senti, evel m'eo bet graet an heol evit rei sklêrijenn, an evned evit nijal, ar pesked evit neuial.

Hirie an de, ne gomzer ken nemet eus al liberte. Klevet e ve, a bep tu, gwall-brêzezerien o lavaret :

« N'eus na Doue, na mestr! » Ha dre holl e sav ar memez klemmou : ar vugale n'houlont ken senti ; an dud yaouank ne ver ken evit o lakaat da zouja ; pep hini a ra e benn.

Arabat eo, koulskoude, ankouaat penôs senti a zo ret.

Digorit ho taoulagad ha sellit petra a dremen endro d'ec'h.... An avel hag ar mor, ar stered, kenkoulz hag an denvalijenn ; ar plant hag ar gwe, evel al loened mut, petra reont, e peb amzer, nemet plêal gant o labour hag ober penn-da-benn ar pezh a zo kemennet d'eze gant Doue ? N'eus hini aneze, na bras na bihan, hag a gredfe tremen hep senti : ha setu perak eo urziet ken mat pep tra ebarz ar bed.

Doue ha Doue hepken, a zo digabestr ha Mestr d'ezan e-unan. Met an den n'eo ket dishual ; n'en deus ket frankiz d'ober e benn : eul lezenn a zo bet roet d'ezan da heuilh. Ar roue, kenkoulz hag ar paour ; an den koz, kenkoulz hag ar bugel, mar fell d'eze plijout da Zoue ha sovetaat o eneoù, eo ret d'eze plega da volonte an Otrou Doue ha miret e c'hourc'hemennou. « Mar fell d'ec'h, eme an Aviel, en em gaout er vuhe peurbadus, dalc'hit d'ar gourc'hemennou ». Miromp eta penn-da-benn lezenn santel an Otrou Doue.

Na vezomp ket eus ar gristenien lôsk a ra diou lodenn eus ar gourc'hemennou : dibab a reont ebarz al lezenn ar pezh a gavont aezet da virout hag ar peurrest a lezont a-goste. Servijerien a sort-se a zo mevelien fall. Ankouaat a reont penôs gwall-derri unan eus gourc'hemennou Doue a zo awalc'h evit koll ar baradoz ha meritout an ifern.

E tu-hont da Zoue, ar Mestr bras kuzet ouz hon daoulagad, beza hon eus c'hoaz en hon c'hichen mestrou all karget gant Doue da ren ac'hanomp er bed-

man. D'ar mestrou-se e tleomp ar memez doujans evel da Zoue e-unan, abalamour d'o c'harg, abalamour ma talc'hont e lec'h war an douar. « Pep gallowad a deu digant Doue, eme an Abostol Sant Paol, ha setu perak e tleomp senti ouz hon mestrou, n'eus fors piou int, evel pa vije Doue e-unan o komz dre o geno ». Hen gouzout a ran, senti a zo, awechou, eun dra start ha diaes ; n'eo ket bep tro gant plijadur e teuer da blega da Zoue ha, nebeutoc'h c'hoaz, d'ar re a zalc'h e renk en hon c'hichen : en desped da ze, elec'h termal dirak an dever, bezomp sonj penôs senti hep klemm, hep marc'hata, hep mouza, eo kaeran trec'h a c'hallfemp gonit warnomp hon unan ha kaeran sakrifikis a c'hallfemp kinnig da Zoue.

Dizenti eo heuilh an drouk-spered ha kemer hent an ifern : elec'h senti a wir galon a zo heuilh roudou Jezuz, Mari hag ar Sent ; kemer an tu da danva ar peuc'h war an douar ha da veza, hep mar, kurunet er baradoz.

SKOUER

N'eus bet biskoaz bugel muioc'h sentus evit Santez Jann d'Ark, dasprenerez bro Franz. A vihanik, e teskas douja d'he zud ha miret ar c'henteliou mat roet d'ezhi ebarz ar gêr ha war bankou ar c'hatekiz. Ma ne ouie na lenn na skriva, gout a ouie pedi, senti ha heuilh he deveriou kristen. Person Domremy a lavare n'he devoa ket he far ebarz ar barrouz.

Epad seiz vloa, Sant Mikêl, Santez Marc'harit ha Santez Katel en em ziskouezas meur a wech dirazi, pa veze o tiwall he derved, hag a c'houlennas diganti beza fur, devot, pleustri an Iliz hag ar sakramanchou. Ar bugel a heuilhas o c'huzuliou.

Eun devez, e klevas ar c'hoñzou-man : « Jann, ret e vo d'it mont da ziframma bro Franz a-zindan.

galloud ar Sôzon hag ober kuruni ar Roue en Iliz-Veur kêr Reims ». O klevet an dra-se, ar plac'h yaouank a grenas gant ar spount : « Nan on, emezi, nemet eur paour kêz mêsaerez derved ; ne ouian na pignal war varc'h, nag ober brezel : gwelloc'h e vije ganin, kant gwech, chom aman da wriat ha da neza, e kichen mamm ». — « N'eus forz, a vo respountet d'ezi, ke bepred, merc'h an Otrou Doue ; na spount ket, Doue a vo ganit ». Hag evit senti, e kuitaas kerkent Iliz he badeziant hag he fask kentan, ti he zud hag he bro, ha setu hi war an henchou-bras, mesk ar soudarded. « Ma Mestr eo Doue, emezi. Na pa 'm ije bet kant tad ha kant mamm, e vijen tec'het. Na pa vije bet ret d'in uza ma diouhar betek pennou ma daoulin, ne vijen biken chomet er gêr. Ar pezh am eus graet, n'am eus han graet nemet dre urz an Otrou Doue. »

Evel Jezuz, he Mestr, Jann he deus sentet penna-da-benn, betek ar verzerenti, betek ar maro. Dre he sentidigez, he deus sovetaet bro Franz.

O Mari, Gwerc'hez feal, gwir servijerez an Holl-C'halloudeg, deskit d'in senti e pep tra hag ober, hed ma buhe, bolonte santel an Otrou Doue.



C'HOUEZEK VET DEVEZ

Labour ar Werc'hez

I. Penôs e labourer Mari.

II. Penôs e tleomp-ni labourat.

I

Diskennomp betek kêr Nazareth ! Aman, pell diouz an drouz, e ti ar Familh Santel, pep hini a zo gant e labour. Jozef, mestr kalvez, a zesk e vicher d'ar Mabig Jezuz. Na zouezus eo gwelet an Holl-C'halloudeg, Perc'hen an holl skianchou, an Hini en deus tennet ar bed holl eus a netra, er skol gant eur paour kêz artizant ! Jezuz a vo hanvet gant ar Judevien « Mab ar c'halvez, — filius fabri ». Goude kement-se, penôs e teufe al labourer pe ar micherour da gaout mez ouz e stad, daoust ha pegen dister e c'hallfe bezan ?

E keit ma 'man an daou artizant gant o labour, Mari ne chom ket dibreder. E ti Nazareth, n'eus na mevel na matez : war gont ar Werc'hez e vo ar pre-jou, ar menaj, an arrebeuri. Ne choazo ket he micher ; digemer a reio, a galon vat, an hini a zo merket d'ezi gant Doue, ha ne vo ket klevet o klemm war he foan, na gwelet o koll he amzer.

Gwir eo eviti komzou ar Skritur-Sakr : « In laboribus fui a juventute meâ » ; a vihanik am eus desket petra eo ar boan hag al labour ».

Epad an daouzek vloa he devoa tremenet en Templ, he devoa desket gwriat, neza, ober stamm, pleal gant holl labouriou an ti ; ha breman, etre ar prejou, goude beza laket urz vat endro d'ezi, e kemero an nadoz pe ar gegel evit ober dilhad neve pe dresa ar re goz. Ar vantel a oa war diouскоа Hon Salver epad e Basion, hag e oa bet tennet plouz berr warni gant ar soudarded, ouz troad ar Groaz, a oa bet nezet gant ar Werc'hez.

Mari n'he devoa ket choazet he micher : digemet he devoa, gant kalon vat ha doujans, an hini a oa bet merket d'ezi gant an Aotrou Doue. Ne goll e ket he amzer ; ne souze ket dirak ar boan ; kas a rae da benn, daoust pegen start e c'helle beza, kement labour a veze fiziet enni. A dra sur, Jezuz en dije gallet diskarga e Vamm eus lezenn al labour, ha koulskoude, Mari a vije bet gwall-diaes d'ezi plega d'an dra-se ha chom dibreder. Evel he Mab, eo bet gwelloc'h ganti staga kalonek gant al labour ha diskouez d'imp, dre eno, pegen enorus eo, evit an diwezan micherour, gonit e vara pemdeziek diwar bouez e ziouvec'h.

Artizanted, labourerien, tud a boan, na glemmit ket eus ho stad, pa welet dirazoc'h Mab Doue, Sant Jozef hag ar Werc'hez o pleal, evel doc'h, gant al labour, adalek ar beure betek an noz.

Greomp breman eur sell ouz Mari e kreiz he labour. Pep tra a zo graet ganti e koulz, gant evez, gant intansion rik, nann evit plijout d'an dud, met evit ober plijadur da Zoue, ha netra ken. Arôk kregi gant he labour, e taol plê da sevel he spered hag he c'halon etrezek an nenv, evit kinnig he foan da Zoue. Lies a wech, epad an de, he sonj, skanvoc'h evit an alc'houeder a nij warzu ar baradoz d'en em unani gant he C'hrouer ha da lavaret d'ezan he c'harante. Pedi ha labourat a ra, war an

dro, hag he buhe penn-da-benn a zo evel eur c'han peurbadus en enor d'an Holl-C'halloudeg. An disterran tra graet ganti a blije kement da Zoue, eme eun Doktor eus an Iliz, ken e tenne muioc'h a c'hounid eus he labour, evit ar merzer Sant Lorans, epad ma oa e gorf o rosta war ar glaou ru.

II

Al labour, setu aze al lezenn gentan roet gant an Otrou Doue d'an holl grouadurien.

Adalek penn kentan ar bed, Adam, hon tad kentan, a oa laket ebarz eul liorz dudius, hanvet Baradoz an Douar, nann evit diskuiza, met evit labourat « ut operaretur », evel ma lavar d'imp ar Skritur-Sakr. D'ar c'houlz-se, al labour ne oa nemet eur c'hoari hag eur blijadur : met adalek ma tigouezas gant hon zud kentan dizenti ouz Doue ha koueza er pec'hed, al labour a deuas da veza, evit Adam hag e vugale, eur c'hastiz hag eur binijenn. « Adalek breman, eme an Otrou Doue d'an den, e poani start hag an douar ne dougo nemet drez ha spered : da vara a dêbri diwar c'houezenn da dal ».

Al lezenn-man a bouez war an holl grouadurien. Sellit endro d'ec'h penôs e tremenont o amzer. Adalek ar beure betek an noz, ar gefnidenn, ar vèrienenn, ar wenanenn, al lapoused, o gwelfet o plêal pep hini gant e labour ha ne chom hini aneze dibreder. Kas a reont sonj d'imp penôs al labour a zo eun dra ret, eun dever evit pep den, paour ha pinvidik. Pep hini a dle ober e lod ; pep hini a dle labourat, pe gant e gorf, pe gant e spered, herve e stad hag e vicher, ar penn-tiegez koulz hag ar mevel pe ar vatez : arabat na vije unan bennak o veva diwar goust ar re all. « An hini n'houl ket labourat, a lavar d'imp Sant Paol, ne dleje ket dibri ». Eun devez,

herve ma lennomp ebarz an Aviel, Hon Salver o vont eus a Vethani da gêr Jeruzalem, a gavas war e hent eur wezenn fiez goloet a zeliou, hag a dostaas da welet ha kaout a rafe enni eur frouezenn bennak ; ne gavas ket unan. « Ra vezi difrouez da viken ! » eme Jezuz ; ha kerkent e voe dizec'het ar wezenn. Gwellat kentel d'ar re a zilez o dever hag o labour evit beva dibreder ha didalve. Mat e vije d'eze diwall na deufe Doue da skuiza gante ha d'o dilezel. Mat e vije d'eze poueza komzou an Aviel : « Kement gwezenn na zougo ket a frouez a vo troc'het ha stlapet en tan ».

Hen klevet hoc'h eus meur a wech : « An diegi eo mammenn an holl siou fall ». A dra sur, an hini a labour start ha kalonek n'en deus ket amzer da sonjal en treou all ; elec'h an hini a dremen e amzer o sorc'henni, eo digor e spered d'an drouk-sonjou evel an hent bras d'an holl dremenidí. Pegen fur eo an ali a ro Sant Jerôm d'e ziskibl Nepotian : « Epad ma 'z eus eun diaoul o vêsa eun den stag ouz e labour, zo dek o evêsaat an hini n'en deus netra d'ober. Gant-se, taol plê ma ne gavo biken an drouk-spered ac'hanout dilataour ».

De e varo, an impalaer Mark-Aurel a c'halvas en e gichen unan eus e ofiserien hag a lavaras d'ezan ar ger-man : « Laboremus, labouromp!... » ha kerkent e roas e huanad diwezan.

Ni ive, labouromp, labouromp a galon vat ; al labour a zo eur yec'hed evit ar c'horf hag evit an ene : diwallomp, koulskoude, na vije kollet ganimp hon foan. Nag a hini a gemer kalz a boan war an douar-man ha n'en deus gonid ebet dirak an Otrou Doue ! « Al labour, emezê, a zo eur bedenn ! » An dra-se n'eo ket gwir bep tro. Kavout a raer tud hag a labour gwasoc'h evit loened mut ; o sell ne sav ket uheloc'h evit an douar ; darn all ne glaskont nemet

dastum madou ha danve ; darn ne souzfont ket dirak al labour ar startan, gant ma vo roet d'eze meulodi. Ar re-man, koulz lavaret, a goll o foan hag o amzer. N'eo ket evit gonit eun dornad gwenneien, pe eur vogedenn esans e tleomp pleal gant hon labour pemdeziek, met, dreist pep tra, evit plijout da Zoue ha tizout kurunenn ar baradoz. Diouz ar beure, n'ankouaomp ket kinnig hon c'halon hag hon devez da Zoue. Greomp pep tra e sell ouz an Otrou Doue. « Pe c'houi a zebr, pe c'houi a ev, pe c'houi a ra eun dra all bennak, eme Sant Paol, grit pep tra evit gloar Doue ». Digemeromp evel eur binijenn ar boan stag ouz al labour ha kinnigomp anezan d'hon C'hrouer, ma teuo da veza talvoudus evit ar baradoz. N'eus forz pe start pe verr pe hir e vo an devez ; n'eus forz pe start pe aezet e vo al labour, gant a refomp, da gentan, bolonte hon Tad a zo en nenv. Evit beza eur Sant, n'eo ket ret ober burzudou : awalc'h eo ober ervat an deveriou a stad, daoust ha pegen dister e seblantfent beza, dindan sellou an Otrou Doue. « Klaskit da gentan rouantelez Doue hag e justis, eme Jezuz, hag an holl draou all a vo roet d'ec'h war ar marc'had ».

SKOUER

Ar Sent o deus karet al labour, rak goût a ouient eo al labour mammenn ar furnez. Muioc'h kalonek evit Jann d'Ark n'eus bet hini. War moger he zi, a-us d'an nor, e weler c'hoaz hirie eur skoed mein, kizellet warnan ar geriou-man : « Vive laheur ! — Bevet al labour ! ». Ar c'hrenn-lavar-se, skrivet doun en he c'halon, a zo bet, e peb amzer, lezenn he buhe. Abred e teskas pleal gant al labour. He zud a oa menajerien ha na oent ket pinvidik, pell a-c'hane ; d'ar c'houlz-se, en eur vro dismantret gant ar brezel, ne oa ket aezet pourchas bara ha dilhad

da bemp a vugale. Start e oa beva ha Jann n'he devoa ket amzer da vont d'ar skol. Adalek ar beure betek an noz, e veze gwelet oc'h ôza boed d'an dud ha d'al loened, o kanna pe o tresa al lienaj hag an dilhad, o lakaat urz ebarz an ti, pe o vêsa he denved. En em blijout a rae er gêr, e kichen he mamm ; met pa veze labour start er park, gant an here pe an eost, ar plac'h yaouank a roe dorn d'ar bôtred, hep souza dirak ar boan ; ha d'ar gouanv, goude koan, e korn an oaled, e chome diwezat da neza kannab ha gloan. Er prosez graet goude he maro. an testou o deus diskleriet, dirak al lez-varn, n'he devoa ket he far da baka labour. Ha d'he barnerien, a c'houlenne diganti petore micher a oa bet desket d'ezi er gêr : Desket am eus, emezi, gwriat ha neza ha, hep mar ebet, evit ar pez a sell kas endro ar c'harr-neza pe jacha war an nadoz, n'eus ket unan gouest da drec'hi warnon ».

Labouromp kalonek evelti.

« O Gwerc'hez Vari, gwir servijerez an Otrou Doue, sikourit ac'hanon da garout ma micher, d'ober ervat ma deveriou a stad, da santelaat ma labour pemdeziek, dre ar bedenn, ha d'ober, e pep tra, bolonte an OtrouoDue ha nann ma hini ».



SEITEKVET DEVEZ

Komzou ar Werc'hez

- I. Taolomp plê d'hon zeod.
- II. E skol Mari, deskomp tevel.

I

Goude ar skiant, unan eus ar c'haeran donezonou hon eus bet digant Doue eo ar gomz : ma eo mut al loened, d'an den eo bet roet ar galloud da zisplega, gant e deod, ar pez a dremen en e spered hag en e galon.

Eun dra gaer, e gwirione ; ha koulskoude, bezomp war evez : an treou ar gwellan eo arabat ober impli fall dioute. « Ac'hanta, eme an den fur Esop, an teod eo gwellan ha gwasan tra a oufe beza er bed. »

Komz a zo eun dra vat hag eun dra ret awechou. Ha gant-se, eun tad hag eur vamm eo eun dever evite sevel o mouez evit hentcha o bugale, evit o c'helenn, o diwall diouz ar gwall-gompagnunez, ar skouer fall, hag ebatou risklus ar bed. Eur pec'hed eo tevel, pa ve ar c'houlz da zifenn ar feiz, da ziskleria ar wirione, pe da skoazia an nesan. Siouaz d'an hini na gred ket digeri e c'henou pan eo evitan eun dever komz ! Ne ve ket laket eur c'hi mut da vêsa an denved.

Komzomp eta, pa ve ret ; komzomp gant furnez ha komzomp e koulz. Rak mar 'z eus eur c'houlz da gomz, bez ez eus ive eur c'houlz da devel. Diaesoc'h eo tevel eget displega ervat eur gaoz.

An Abostol Sant Jakez a skrive d'ar gristenien gentan : « An hini na ra pec'hed ebet gant e deod a zo eun den krenn didamall. Deskit eta digeri prim ho tiouskouarn da chilaou, ha kemerit hoc'h amzer da gomz. Ma 'z eus en ho touez unan bennak hag a gar d'ezan beza eun den devot, goude ma n'eo ket barrek da viret e deod, kredit hardi ne dalve netra e relijion ».

An dra-man a zo aezet da gompren. An hini n'eo ket evit ren e deod, penôs e teufe a-benn da veza mestr war e spered hag e galon ? N'hall beza nemet dizurz ha trabas en e vuhe. Eur forn digor ne vir ket pell he zomder ; kenkouz-all, tân ar garante a varv prim en kalon an hini a zigor re frank e c'henou. Serrit kentoc'h dor ar forn ; klozit ho kenou ; en em dennit e goueled ho kalon gant an Otrou Doue hag e teuo da greski ho karante hag ho tevoision. Tevel eo ar c'haeran meulodi a oufemp renti da Zoue ; tevel eo maga en hon c'hreiz ar vertuzioun kristen. « An hini a ziwall e deod a ziwall e ene », eme ar Spered-Santel.

Hon tud koz a lavare, gant kalz a furnez : « Komz a dalvez arc'hant ; met tevel a dalvez aour ». Hag eur Sant a lavar d'imp, d'e dro : « Peurvuian ec'h on bet waz o veza komzet ha biskoaz n'am eus bet a geun o veza tavet ».

Eun elvenn dan a zo nebeut a dra ha koulskoude ez eus enni trawalc'h a nerz evit c'houeza eun tângwall : hon zeod ive a zo eun dra dister da welet, met ma loskaomp anezan dishual, ne vo ket pell oc'h ober eun dismantr bras. Gwasoc'h eo eun teod-fall evit an tan. Eur gomz, eur ger hepken a zo awalc'h evit laerez digant eun den e vrud vat, e enor, e feiz. Ne ver ket evit niveri an droug graet ebarz ar bed gant ar gwall-deodou.

Bezomp eta war evez ha pouezomp kement ger a dle dont war hon muzellou.

« De ar Varn, eme Hon Salver, pep den a rento kont eus e holl oberou ha, zoken, eus kement ger goullo en devo lavaret ; diwar e gomzou e vo didamallet pe barnet pep hini ». Ma ve ret renti kont eus ar c'homzou goullo, pegen garo ne vo ket neuze barnedigez an hini en devo mastaret e deod gant kont eus ar divalo, brein, disleal ha difeiz !

« An teod, eme Jezuz, a zispleg ar pezh a dremen er galon : an den fur ne deu eus e galon nemet furnez hag eun den fall n'hall dont eus e galon nemet fallagriez ».

Ma fell d'ec'h gouzout petra zo kuzet e kalon eun den, n'hoc'h eus nemet teurel plê d'e gomzou. Ne deu eus ar sac'h nemet ar pezh a zo ebarz.

Setu perak an den fur Sênèque a lavare d'eun den yaouank deut da gaout anezan : « Ma mignon, komzit, evit ma ouvein gant piou am eus d'ober ». Hag e gwirione, ma eo diaes divuni petra a zo kuzet e kreiz eun den, e brezeg a zo evel eur mellezour hag a ziskouez d'imp diabarz e galon.

An hini a zigouezfe d'ezan beza dizammet diouz an holl bec'hejou en deus graet dre gomz, a vije gwell skanvaet d'ezan e gonsians. Evel ar Sent, klas-komp kompagnunez Doue, kentoc'h eget hini an dud : nebeutoc'h a se e komzfomp ha furoc'h a se e chomfomp !

II

Krouadur ebet n'en deus anavezet misteriou ar relijion ha sekrejou an Otrou Doue gwelloc'h evit an hini a zo hanvet gant an Iliz Trôn ar Furnez, Rouanez ar Sent hag an Aeles. Goude beza bet savet en eur garg ken uhel ; goude beza bet dibabet evit beza Mamm da Salver ar bed ; goude beza douget, epad nao miz, an Hini a dlee digas d'ar bed gwir skleri-

jenn ar feiz ; goude beza tremenet tregont vloa gant Mab Doue e Nazareth, Mari he devoa gwelet ha klevet kalz a dreou ha ne vije ket bet diaes d'ezhi diskleria ar pezh he devoa desket en eur skol ken santel. Met elec'h komz, Mari eo gwelloc'h ganti tevel ; ha dre eno, e tiskoue d'imp pegement e plije d'ezhi an izelegez. Kentoc'h evit rei tu d'al lorc'h ha d'ar fouge ; betegout tenna warni sellou ha meulodi an dud, ar Werc'hez ne lavaro ket eur ger evit embann ar burzudou graet enni gant Doue. Heuilh a reio penn-da-benn ali ar Spered-Santel : « Eun dra vat eo mirout kuzet ar sekrejou diskleriet d'imp gant Doue ». E kreiz al levenez, 'vel e kreiz ar boan hag an dismegans, kement a welo hag a glevo a viro koachet e goueled he c'halon. Seblantout a ra d'ezhi klevet eur vouez hag a lavar : « Ma merc'h, chilaouit, taolit plê, ha digorit ho tiouskouarn ». Hag e respont gant ar profed : « Pa deurne an Otrou Doue komz ouzin, me a chilaouo ar pezh a lavaro d'in ».

Ar Werc'hez he deus gouveet tevel, ha setu perak he deus desket komz. N'eo ket stank ar c'homzou a zo deut war he muzellou. Peder gwech, herve an Aviel, he deus digoret he genou ha, pep tro, zo deut ganti komzou leun a furnez.

Pan eo saludet gant an Ael Gabriel evel Mamm Salver ar bed, Mari ne gav nemet an dra-man da respont d'ezan : « Me a zo servijerez Doue ; ra vo graet d'in herve ho komzou ».

Evit respont da Santez Elisabeth, a ra d'ezhi eun digemer eus ar c'haeran, Mari a drugareka an Otrou Doue o kana : « Magnificat, ma ene a veul an Holl-C'halloudeg ».

Kavet ganti en Templ he Mab, bet kollet epad tri devez, ar Werc'hez en em glemm d'ezan gant dous-ter : « Perak ec'h eus graet kemend all d'imp? »

En eured Kana, p'en em gavas berr an evach, Mari a deuas da gaout Jezuz hag a lavaras d'ezan : « An dud-man n'o deus ken a win ».

Sellit pegen fur eo bet Mamm Doue e pep tra ! Ne gomz nemet pa ve ret, ha bep tro e teu ganti komzou leun a zouder hag a izelegez. Kaeran kentel a ro d'imp war an doare da devel ha da gomz !

SKOUER

Eun ali hag a roe alies Sant Fransez Asiz d'e venec'h eo heman : « Ar skoueriou o deus muioc'h a nerz evit ar c'homzou ».

Eun devez bennak, c'hoant gantan da rei eur gentel d'unan eus e vreudeur, e lavaras d'ezan : « Ma kerez, breur Jil, ec'h efomp da brezeg da vourc'hizien Asiz ». Ha setu i en hent, hep sellout ouz den, pleget gante o fenn, o daouarn gantê en o manchou, hep ranna ger.... Diou eur bennak e padas ar valeadenn, ha graet gantê tro kêr Asiz, an daou vanae'n en em gavas adarre ouz toull dor ar manati. « Arsa eme ar breur Jil, pegoulz eta e tigo ro ar brezegenn? » — « Ar brezegenn? eme Sant Fransez, achu eo, ma den mat ! Diou eur 'so n'hon eus graet nemet prezeg da gement hini hon eus kavet en hent, ha bez sur n'hon eus ket kollet hon foan : ar skouer vat a dalve muioc'h evit ar gwellan prezegennou ».

Sant Fransez a gerze war roudou Hon Salver en deus prezeget dre skouer, da c'hortoz prezeg dre e gomzou.

O Gwerc'hez santel, Trôn ar furnez, deskit d'in tevel ha poueza ervat ar c'homzou a deuo war ma muzellou !

TRIOUEC'HEC'HVET DEVEZ

Paourante ar Werc'hez

I. Mari he deus karet ar baourente ;

II. Evelti, distagomp hon c'halon diouz an danve.

I

An den, er bed-man, a red warlerc'h an evurusted, laeret digantan dre bec'hed hon Tad kentan ; met an holl ne sonjont ket ar memez tra diwarbenn an evurusted. Darn, gant ar bed diskiant, a lavar : « Evurus an hini en deus kalz a vadou ». Elec'h Jezuz, Roue ar furnez, pa grogo da brezeg an Aviel, e klevfomp anezan o tiskleria : « Evurus an hini eo distag e spered hag e galon diouz madou ar bed-man ; d'ezan eo rouantelez an nenvou ». Hag evitan da veza perc'hen an holl vadou, Hon Salver en deus graet fae war an aour hag an arc'hant ; fellet eo gantan genel paour, beva paour ha mervel e kreiz ar vrasan dienez.

Evel he Mab, Mari he deus klasket ha karet ar baourente. Yaouank-flamm en em denn en Templ Jeruzalem evit beva eno didrous, pell diouz goueliou hag ebatou ar bed, o pleal gant ar bedenn hag al labour. Dre ma oa eus ligne ar rouane, he dije gallet beva diwar madou he zud ; met gwelloc'h eo bet ganti ranna he feadra gant ar beorien ha gonit he bara diwar bouez he diouvrec'h, evel an hini diwezan eus ar vitizien.

Deut eviti ar c'houlz da zimezi, ar Werc'hez a gemeras evit pried Sant Jozef, eun artizant diwar ar

mêz, ezommek evelti, hag o-daou e teujont da chom e kêrig Nazareth. Paour-du ne oant ket, peogwir e labourent, an eil hag egile ; met n'o devoa evit beva nemet o labour hag o foan hag, evel al lodeñn vrasan eus an dud, e oa ret d'eze gonit o bara diwar c'houezenn o zal.

Evit dont da Vethleem, e rejont an hent war droad, ha pan arrujont e kêr, d'an abarde-noz, dre ma oant gwisket paour, ne gavjont ket a lojeiz en ostaleriou ; evel klaskerien-bara, e voe ret d'eze en em denn war ar mêz, en eur c'hraouig dister ha digor d'an avel yen. Kerkent ha ma voe ganet ar Mabig Jezuz, Mari, e Vamm, hen mailhuras gant an nebeut lienaj he devoa digaset ganti hag hen astennas war eun dornad plouz ; ne gavas ket, zoken, eur feuskenn keuneut evit tomma e izili ruziet gant ar riou. Piou en dije kredet eo er stad-se ken reuzeudik e vije deut er bed-man Roue an nenv hag an douar ? Paneved ar Bastored hag ar Rouane deut da adori ar Bugel neve-c'hanet ha da ginnig d'ezan o donezonou, penôs o dije graet Mari a Jozef, en eur stad ken truezus, evit pourchas ar pezh o devoa czomm ?

Pa vo digaset ar Bugel d'an Templ evit beza gwestlet d'an Otrou Doue, e gerent, paour eus madou an douar, ne gavfont da ginnig nemet prof ar beorien, eur c'houblad turzunelled... Prestik, pa ranko ar Familh Santel kamer hent an harlu ha tec'hel dirak soudarded Herodez, er vro estranjour, e vo kaletoc'h c'hoaz he flanedenn : Mari a digouezo ganti dibri, distrempet gant he daerou, bara an aluzen!....

En Nazareth, nag a boan evit gonit ar bara pemdeziek ! Epad ma veze Jozef ha Jezuz gant o labour, Mari ne chome ket dibreder ; goude beza laket urz en ti, e kroge en he stamm, pa ne gase ket war

rôk an nadoz pe ar c'harr-neza. Ha goude ma voe pignet he Mab d'an nenv, herve ma kont d'imp an den santel Bêd, Mari, kollet ganti he holl binvidigez, en em dennas e kichen an Abostol Sant Yann, e kêr Efez, hag eno e vevas diwar an aluzen roet bemde d'an intanvezed. Gallout a raé lavaret evel Jezuz : « Al loened goue o deus eun toull d'en em guza ; al lapoused o deus eun neiz da c'hôri o evnedigou, met me n'am eus ket eur men da ziskuiza ma fenn ».

An hini a zo bet galvet evurus gant an holl boblou he deus bevet hag a zo maro paour. Gwellat kentel da neb en em glemm eus e stad hag a glask en em sevel uheloc'h evit e renk!

II

« Den ebet, eme Jezuz, ne c'hell serviji daou vestr war an dro : pe en devo kasoni ouz unan ha karante evit eun all ; pe en em stago ouz unan hag e tisprizo egile. Ne c'hellit ket serviji Doue hag an arc'hant. Klaskit eta, da gentan, rouantelez Doue hag ar pez a zo just, hag an holl draou all a zeuio d'ec'h war ar marc'had ».

Hirie, evel en amzer Hon Salver, 'z eus daou vestr o klask ren war galonou an dud. « Diou garante a zo ebarz ar bed, eme sant Aogustin ; unan a zo stag ouz an danve hag eben ouz madou an nenv. »

Diwallomp eta da vont da zaoulina dirak an aour ; da veza sklaved an arc'hant ! Madou ar bed-man n'int nemet pri ha fank ; re dister int evit gallout karga kalon an den ha rei d'ezan ar gwir evurusted. An hini eo dallet e spered gant karante direiz an arc'hant n'eus evitan peuc'h ebet, gant aon en deus ve laeret digantan e beadra.

Ober fortun priman ma c'heller, setu aze preder

meur a hini en de hirie, hag e keit-se e ankouaont Doue, o ene hag o silvidigez. Ne seller ket berr evit ober gaou ouz an nesan, gant ma vo kresket an danve. Petra a zo kiriek d'ar prosezou, d'al laeron-siou, d'ar muntrou ken stank hirie, ma n'eo ket an arc'hant milliget ?

A dra sur, n'eo ket difennet ouzimp espern, kreski hon feadra, gant ma kerzfomp en hent an onestiz hag al lealded ; betek ne vo ket hualet hon c'halon gant an avaristed, gant ar c'hoant direiz da zastum ha da vernia arc'hant. N'eo ket an danve a zo bet milliget gant Jezuz, met an impli fall a ve graet dioutan hag an techou fall a laka da ziwan e kalon an dud.

Evel ma lavar Jezuz ebarz an Aviel, keit ha ma vo ar bed bed, e vo bepred war an douar tud pinvidik ha peorien. Ha kaer e vo klask lakat an holl keit-ha-keit, skuba ar baourente diouz ar bed, lakat an holl dud da veza par an eil d'egile e pep tra, koll amzer ne raer ken : biken ne digouezo gant pep hini kaout an hevelep lod a spered, a nerz hag a yec'hed. Ha koulskoude, pep hini en e stad, paour pe binvidik, a dle mirout ar vertu a baourente, da lavaret eo, beza distag, a spered hag a galon, diouz madou ar bed-man.

Elec'h staga hon c'halon ouz an danve, troomp anezi warzu madou ar baradoz. « Nebeut a zanve, gant doujans Doue, eme ar Spered-Santel, a zo gwelloc'h evit pinvidigez gant c'hoantedigeziou direiz. » Ar pez a laka tabud, diaezamant ha brezel etouez an dud eo ar warizi a-berz ar beorien, al lorc'hente hag an avaristed a-berz an dud pinvidik. Ma chomfe pep hini er stad merket d'ezan gant Doue ; ma vevfe pep hini herve e vicher hag e stad, neuze e renfe ar peuc'h hag an evurusted e-mesk an dud. Neb en deus kalz a vadou eo eun dever evitan dispign lod aneze da renti gloar da Zoue ha da sikour e vreudeur, hag

an hini n'en deus netra eo arabat d'ezan klemm eus e stad pe c'hoantaat treou ar re all.

Greomp aluzen, herve hon danve hag ezommou ar paour : ma hon eus kalz, roomp kalz d'an dud ezommek ha d'an oberou mat ; mar hon eus nebeut, roomp nebeutoc'h, met roomp bepred a galon vat hag hon Tad eus an nenv a zigollo ac'hanomp er bed-man hag er bed-all, peogwir en deus lavaret, hen e-unan, ne lezfe ket hep he faea eur werennad dour roet d'ar paour en e hano.

SKOUER

Warlerc'h Jezuz, Sant Erwan en deus gonezet an hano kaer a Dad ar beorien. Eun dra hag a weled o vont war gresk ennan, dre ma kosae, a oa e garante e kenver an dud ezommek. Biskoaz n'eo bet gwelet o chom hep rei an aluzen, pa deued da c'houlenn digantan. Daou vil skoed leve bennak en devoa a-berz e dud ; met n'en devoa netra evitan e-unan ; e daol a oa digor da gement hini a gare azeza outi. Gwiska a rae ar beorien ; rei a rae lojeiz d'an dremenidi ; ôza a rae d'eze o gweleou, hag evel ma oa re enk e di, e reas sevel eun ospital e kichen Kervarzin.

Eun devez e kavas, war dreuzou e zor, eur paour kêz den goloet e gorf gant al lorgnez ; digemer a reas anezan gant laouenedigez ; rei a reas d'ezan peadra d'en em walc'hi hag e lakas anezan d'azeza ouz tôl en e gichen. An den lor, goude beza graet seblant da zibri eun dra bennak, a savas en e sav, hag o sellet ouz Sant Erwan, a lavaras e brezoneg : « Doue ra vezo ganec'h ! » Kerkent e teuas da veza skedus evel an heol hag e pignas en nenv. Erwan a zaoulinas war an douar, hag epad meur a zevez, ne gredas ket azeza ouz eun daol hag e oa bet Jezuz-Krist azezet outi.

Gwerc'hez vinniget, deskit d'imp distaga hon c'halon diouz an danve ha kaout true ouz an nesan.

NAONTEKNET DEVEZ

Mari hag ar vugale

- I. Jezuz a zo bet leun a vadelez evit ar vugale.
- II. War e lerc'h, ar Werc'hez he deus graet ar brasan stad eus ar vugale vihan.

I

Tra souezus ! ar vugale, o veza m'eo glan ha dinamm o c'halon, a zo bet, a-viskoaz, gwellan mignoned an Otrou Doue. Kaerat levr a vije gallet ober gant ar pezh en deus graet ha lavaret Jezuz dre garante evit ar vugale !

Hon Salver en dije gallet dont er bed-man, evel Adam, e kreiz e nerz hag e bar an oad ; met gwelloc'h eo bet gantan beza ganet, evel pep hini ac'hanomp, dister ha dinerz, tremen dre stad ar vugaligou evit beza o skouer e pep tra ha diskouez d'eze e garante. Pa brezeg an Aviel, Jezuz a c'houlenn digant an dud vras diskouez ar brasan doujans e kenver ar vugale : « Diwallit, emezan, da zisprizout unan hepken eus ar vugaligou, rak o aele a wel, de ha noz, dremm ma Zad a zo-en nenv ». — « Gwaz a se, emezan c'hoaz, d'an hini a ro skouer fall d'unan eus ar re vihan-se a gred ennon. Gwelloc'h e ve d'ezan beza staget eur men-milin en e gerc'hen ha beza stlapet e kreiz ar mor. » Rei a rae da c'houzout, dre eno, e kemer ar vugale dindan e skoazell hag en em garg, hen e-unan, da gastiza neb a glask noazout outê.

D'ar vugale e vo hepred al lec'h kentan ebarz kalon Hon Salver. Eun devez bennak ma oa tabud etre

an Ebestel da c'houzout pehini dioute a vije savet an uhelan en rouantelez an Otrou Doue, Jezuz a gemeras dre e zorn eur bugel bihan, hag o lakaat anezan en o zouez, e lavaras d'e Ebestel : « En gwirione, ma ne deuet ket da veza henvel ouz ar bugel-man, biken n'efet en rouantelez an nenvou ». Da lavaret eo, anez beza dinamm, izel a galon hag eün a spered evel ar vugale, ne deuer ket a-benn da blijout da Zoue ha da c'honit kurunenn ar baradoz.

Ar vugale ne oant ket bet pell evit anavezout o mignon, o difenner : kerkent ha ma welent anezan o tont gant an hent, e redent da vont d'hen kaout ha, pep tro, e veze graet d'eze ar gwellan digemer.

Eun devez ma oa Hon Salver o prezeg war ribl stêr ar Jourden, ar mammou a zigasas d'ezan o bugale evit ma stokfe outê, ma lakfe warneze e zaouarn ha ma pedfe evitê. Met e ziskibien a bellae, gant rustoni, ar re o digase d'ezan. O welout kement-se, Jezuz a reas rebech d'eze : « Lezit ar vugaligou, emezan, da dostaat ouzin ha na glaskit ket mirout outê. Me a lavar d'ec'h en gwirione : an neb na zigemer ket rouantelez Doue evel eur bugel, ne deüio ket gannin d'ar baradoz ». Hag e astenne e zaouarn warneze hag e vinnige aneze.

Ma eo bet Hon Salver ken karantezus e kenver ar vugale, ar re-man, d'o zro, n'o deus ket ankouaet o madoberour. O anaoudegez vat o deus diskouezet, dreist-holl, de ar Bleuniou, pa oa bet digemeret Jezuz e giz eur Roue, gant ar bobl, e kêr Jeruzalem. Ar bobl o veza klevet e oa arru Jezuz a astennas dilhad war an hent hag a droc'has skourrou eus ar gwe da deurel dindan e dreid. E keit-se, ar vugale, gant barrou palmez en o daouarn, a lake an êr da dregerni gant o c'han : « Benniget an Hini a zeu en hano an Otrou, Roue Israël! Hosanna e barr an nenvou! » Ar Farizianed, o klevet aneze, a yeas

droug ennê hag e lavarjont da Jezuz : « Ha klevet a ret ar pezh e lavaront? Graet d'eze tevel! » Hag e respontas d'eze : « Ha n'oc'h eus ket c'houi lennet ar gomz-man : Eus genou ar vugale hag ar re a zo war vronn o mamm, hoc'h eus tennet ar wellan meulodi? ».

Ar pezh a c'hoarvezas en de-se e kêr Jeruzalem a c'hoarvez bemde ebarz ar bed kristen. Ar vugale, pa n'int ket distroet gant ar skoueriou fall, eo o brasan plijadur tostaat ouz Jezuz ha kana e veulodi.

II

N'eus bet biskoaz ha ne vo biken diou galon muioch'h henvel evit hini Jezuz ha hini e Vamm. Da heul skouer he Mab, Mari a gar an holl dud ; met, evel Jezuz, ar Werc'hez he deus evit ar vugale cun deneridigez dispar, hag eveltan e c'hall lavarout : « Ma brasan plijadur eo beza gant bugale an dud! »

Kentan bugel a gavomp etre divrec'h ar Werc'hez eo an hini kaeran, an hini furan eus an holl vugale, ar Mabig Jezuz. E garante evit e grouadurien he deus graet da Zoue an Tad digas er bed-man e Vab Unik : ha Mab Doue en deus kemeret kalon glan ar Werc'hez Vari evel eur skabel evit diskenn eus an nenv war an douar. Mari he deus bet an enor hag ar blijadur da zigemer Hon Salver, da vaga anezan, da starda anezan war he c'halon, da rei d'ezan ar pok kentan, da ziskouez anezan d'ar Bastored, d'ar Rouane ha d'ar bed holl. Hag adalek neuze ive, an holl vugale, dre m'int breudeur da Jezuz, a zo karet meurbed gant ar Werc'hez.

Al levriou sakr a lavar d'imp nebeut a dra diwarbenn Mari. Gouzout a reomp, koulskoude, penôs, goude ma voe pignet Jezuz d'ar baradoz, e Vamm a chomas gant Sant Yann hag an Ebestel, evit rei

d'eze dorn d'azeza an Iliz. Ar re-man, bet e skol gant Jezuz, o devoa desket gantan prizout ha karout ar vugale, ha Mari, kalz gwelloc'h evite c'hoaz.

Ahendall, evel Mamm d'Hon Salver, ar Werc'hez a oa doujet hag enoret gant ar gristenien gentan ; ar mammou a rae kalz a stad ouz an hini a zo bet binniget dreist d'an holl gwraze ; eur blijadur a oa evite digas d'ezi o bugale vihan evel ma tigasent aneze gwechall da Jezuz, evit kaout e vennoz.

Nag a wach zo digouezet gant ar Werc'hez kaout war he hent eur vamm, ganti eur bugel o heul anezi dre an dorn ? Ar vamm a lavare neuze d'he c'hrouadur : « Houman eo Mamm Jezuz ! Sell dic'hi, ma bugel ! » Gonezet gant mousc'hoarz ar Werc'hez ar bugel a yae d'en em deurel etre he divrec'h. Ar c'hrouadur a zigase sonj d'ezi eus ar Mabig Jezuz ; seblantout a rae d'ezi klevet komzou Hon Salver war ar Groaz : « Setu aze ho mab » ; hag e starde anezan war boull he c'halon, evel pa vije bet Jezuz e-unan. Plijout a rae d'ezi gwelet eur gurunenn a vugale dastumet endro d'ezi evel bodou lili, ha ne skuize ket o tisplega dirazê bloaveziou kentan Jezuz e Nazareth.

Ar vugale, kenkoulz all, a blij d'eze beza e kichen Mamm Doue. « Eun dra anat, eme an Eskob dall, an Otrou de Ségur, eo ar garante o deus ar vugale evit skeudenn ar Werc'hez ganti war he brec'h ar Mabig Jezuz. Ne skuizont ket o sellct outi, o pokat d'ezi gant teneridigez : eun dudi eo evité klevet komz eus Jezuz ha Mari ha, ma n'eo ket lemm awalc'h o spered evit gwelet eno an Doue Holl-C'halloudek, ne ve ket pell arôk anavezout ar Bugel-Doue o tiskuiza eveltê war galon e Vamm ».

Eur Santez vras euz ar Beljik, Santez Lidwina, a danvaas adalek he bloaveziou kentan douster an devosion e kenver Mamm Doue. Araok ma oa goucst da gomz, e veze klevet o vesteodi an « Ave Maria »

ha, bep tro ma tremene dirak skeudenn ar Werc'hez, ne vanke ket da saludi anezi : abalamour da se, Mari a gemeras anezi dindan e skoazell.

Ar mammou kristen eo eun dêver evité gwetla o bugale d'ar Werc'hez : netra gwelloc'h evit mirout aneze diouz ar pec'hed, risklou ar bed ha kasoni an drouk-spered ; danzen o evurusted er bed-man hag er bed-all. Evurus ar bugel en deus sunet, gant leaz e vamm, eur gwir devosion e kenver ar Werc'hez Vari !

SKOUER

Ar pezh a zo bet c'hoarvezet en hon bro Frans, epad ar c'hantved diwezan, a ziskouez d'imp, reizmat, pegen tener eo he c'harante e kenver ar vugale. Teir gwech dioustu, en eur ober nebeutoc'h evit pemp bloa warnugent, Mamm Doue he deus teurvezet diskenn war douar Franz, evit rei da c'houzout ne zileze ket ac'hanomp diskoazel etal ar c'hastiz hag an dismantr dare da goueza war hon bro.

Ar burzud-se a zo bet gwelet, da gentan, war mene ar Salett ; goude, war roc'hell Massabiel, e Lourd ; ha, d'an diwezan, e kêrig Pontmain, epad ar brezel 70. Rouanez ar baradoc'h a deue, er stumm-se, d'en em lakaat etre an Tad kounnaret hag ar vugale kablus, evit ma teuje adarre ar peuc'h da ren etreze.

Ha piou a zo dibabet ganti da zigas d'imp he gourc'hemennou ? N'eo ket tud vras desket ha brudet : met, kentoc'h, gwellan mignoned an Otrou Doue, breudeur muian-karet ar Mabig Jezuz, bugale diwar ar maez, mesaerien denved, hep deskadurez, paour met fur ha sentus, a zo bet karget ganti da embann he c'homzou.

O Mamm ar gwellan, kemerit ar vugaligou dindan ho skoazell ha difennit aneze a bep droug evel m'ec'h eus miret gwechall ar Mabig Jezuz !

Mari hag ar yaouankiz

- I. Amzer ar yaouankiz a zo risklus.
II. Kemer skouer diwar Mari a zo kemer hent ar furnez.

I

Keit ha ma ve bihan eur bugel, epad ma chom dorn-ouz-dorn gant e vamm, endro d'ar gêr, evel eun evnig en gwasked e neiz, ez eus nebeut a riskl evitan. Met p'en devo kresket ; p'en em gavo dishual evel an evn, kwitaet gantan e neiz, mat e vo d'ezan digeri e zaoulagad ha diwall ouz an enebourien. An drouk-spered a zo ken lipous war eur galon neve-flamm evel m'eo ar sparfel war ar c'hig fresk ha tener. De ha noz, an den a dle beza war evez, met da goulz ar yaouankiz eo en deus ar muian d'ober evit en em virout diouz an techou fall. Mare ar yaouankiz a zo henvel ouz an neve-amzer. Na koant eo al liorzou, d'ar c'houlz-se eus ar bloa, pa weler, a bep tu, ar bleuniou o tispaka o liou kaer hag o c'houez-vat dindan bannou an heol tomm! O welet ar gwe ken gwisket kaer, al labourer eo laouen e galon, rak goude kement a vleun eman e sonj da zastum eleiz a frouez. Allaz! n'eus netra muioc'h tener evit bleuniou an neve-amzer! Eur barr-avel, eun nozvez reo a zo awalc'h evit riva anez!

Evel-se eman kont ive gant ar yaouankiz. N'eus ket eun dra kaeroc'h eget kalon eur pôtr pe eur plac'h yaouank miret gante sked ar furnez ha gras o badeziant : bleuniou an douar a zo disliv e kichen lilienn kann ar vertu. Ar vleuenn-man, siouaz, a zo

tener meurbet ; an disteran c'houezadenn avel, eur gomz, eur sell, eur sonj direiz a zo awalc'h evit he gwenvi hag hen saotra e fank ar pec'hed.

Diouz ma ve ar bleun, e ve ive ar frouez. Bleun ar vuhe eo ar yaouankiz ha, diouz ma tremener ar bloaveziou kentan, e teuer da veza diwezatoc'h mat pe fall. Dre natur, pep den a zo muioc'h techet d'an droug evit d'ar vad, ha setu perak eo ret plêal abred gant an ene evit rei d'ezan plegiou mat, rak, eme ar Spered-Santel, an den, bep ma kresko, a zalc'ho da heuilh an hent en devo kemeret en e yaouankiz. Kaer ho po ober, eur pod a viro bepred c'houez ha blaz an evaj a vo bet laket ennan da gentan. Pep hini a zastumo en e gozni ar pez en devo hadet e penn kentan e vuhe ; an eost ne deu nemet goude an here.

En de hirie, e oar re lôsk e kenver ar yaouankiz. Arabat, emê, derc'hel re start war an dud yaouank ; ar vuhe a zo berr ; mat eo da bep hini kaout e lod a blijadur... Ha war digare kement-se, e ve lôskaet ar pôtr pe ar plac'h da vont digabestr ha dishual gant e hent. Gwaz a se evitan ma ne gav ket an tu da bellaat diouz ar skoueriou fall, diouz ar pechou treitour stignet endro d'ezan gant ar bed hag an drouk-spered! Gwaz a se ma n'eo ket krenv awalc'h evit mouga an techou fall a darz en e galon! Gwaz a se ma eo jachet gant gwall-gompagnunez, e kreiz an ebatou hag ar blijadur a noaz kenkoulz d'ar c'horf evel d'an ene! Eun dulad stoup ne bado ket pell ma ve laket re dost d'an tan.

Santez Thereza, goude beza heuilhet en he yaouankiz eur genitervez d'ez, skanv hag avelék, a lavare : « Ar spont a grog ennon pa sonjan en droug a c'hall ober d'ar yaouankiz ar gwall-gompagnunez! »

Tud yaouank, teulit plê dre belec'h kerzet ha gant piou bale.

II

Goude beza bet eur bugel eus an dibab, Mari, kresket en oad, a deuas da veza ar plac'h yaouank ar furan hag ar santelan a zo bet biskoaz. Petra benak ma oa bet choazet gant an Dreinded, a beb amzer, evit beza Mamm da Salver ar bed, ne ouie ket petra e teuje da veza eun de. Da c'hortoz, ne glaske nemet eun dra, senti ouz ar Spered-Santel : eviti da veza bet konsevet hep pec'hed ha miret diouz pep droug, ar Werc'hez ne baoueze ket da ziwall ha da bedi, evel pa vije bet techet da goueza en lasou an drouk-spered. Adalek he bloaveziou kentan, e preze-gas dre skouer hag e heuilhas, bep tro, al lezenn roet diwezatoc'h gant Jezuz d'e Ebestel : « Bezit war evez ha pedit betegout koueza en droug an dentasion ».

Abred en em roas, korf hag ene, da Zoue. Goude n'he deus tamm ebet da ziwall evit chom fur, e wel-lomp anezi, koulskoude, o trei kein d'ar blijadur hag o'n em denn pell diouz goueliou hag ebatou ar bed, evit beva sioul ha kuzet dindan lagad an Otrou Doue. Gant aon na vije diaes d'ezi en em virout fur e kreiz ar bed, Mari, d'an oad a dri bloa, a lavar kenavo d'he zud hag a guita he zi evit mont d'en em guza en Templ Jeruzalem elec'h ma tremeno, ebarz ar sioulder, al labour hag ar bedenn, amzer he yaouankiz. Pebez kentel evit an dud yaouank trelatet o spered gant ar blijadur! Elec'h beza war evez ha pellaat diouz ar pechou stignet gant an drouk-spered, ne glaskont nemet en em ziskouez emesk an dud, redek ar goueliou hag an ebatou, heuilh kement giz diroll kavet mat gant ar bed. O vont gant an hent-se, daoust hag-en ne digouezo ket gante koll o furnez o brud-vat hag enor o zud?

Nag a hini a zo bet waz da veza chilaouet komzou tromplu an hini a roe d'ezan meulodi! Gwel-

loc'h e vije bet da Eva, hon Mamm gentan, trei kein d'an diaoul evit chor da zivizout gantan diarbenn a freuz difennet.

N'eo ket Mari a vije bet tapet evelti gant komzou flour! Kerkent ha ma tigoue ganti gwelet dirazi eun Ael skedus, ar Werc'hez, leun a furnez hag a zisfizians, en em laka da grena gant ar spount. Eviti da veza an hini santelan eus an holl grouadurien, Mari he deus aoun pa glev komzou meulodius Gabriel, ha ne blego da rei he asant nemet pa he devo gwelet sklaer pelec'h eman bolonte an Otrou Doue. Krenomp, evel Mari, dirak an disteran riskl, betegout beza diskaret : nebeut a dra, eur sell, eur gomz, eur sonj a zo awalc'h evit hon distaga diouz Doue ha kas ac'hanomp da goll.

Ar Werc'hez, eme an Tadou Santel, a oa ken unanet he spered gant Doue ha ken gwerc'h he c'hallon ma vije gwelet war he dremm evel eur skeudenn eus he santelez : ar glanded hag ar furnez a bare war he zâl. Ne golle ket amzer o'n em ficha ; gwisket e oa sempl ha dereat herve giz he bro, ha netra nemet gwelet anezi a rae vad da gement hini a gave war he hent.

Tud yaouank, ma fell d'ec'h tremen didamall ar c'houlz ar muian risklus eus ho puhe, dalc'hit sonj eus ar Werc'hez hanvet gant an Iliz mellezour ar furnez, ha-pedit anezi gant fizians.

SKOUER

Eur plac'h yaouank, neve gaset d'ar skol e kêr, a skrivas d'he mamm da lavaret d'ezi he devoa ezomm bras da gaout eur mellezour. Prestik goude, e voe digaset d'ezi eur voest ha, war an dro, eul lizer. « Ma merc'h, a skrive d'ezi he mamm, n'eo ket eur mellezour a gasan d'it ; kavout a ra d'in n'az po

ket re eus tri. An hini kentan a ziskouezo d'it petra
c'h out breman ; an eil zesko d'it petra e teui da
veza hepdale, hag an trede a lavararo d'it petra e
tlejes beza ».

Er pakad kentan, e oa eur mellezour lugernus :
o welet ennan he foltred, frealz ha koant, e pokas
d'ezan gant teneridigez en eur lavarout : « Pegen
brao a ra d'in ma mamm ger! »

Ha dioustu d'an eil! Hepdale, e kouezas dindan
he daoulagad eun daolenn divalo, livet warni eur
penn-mar. Chom a reas da sellct outan gant
spount : « Setu aze, en gwirione, emezi, petra a
vano diouzin a-benn nebeut bloaveziou. Da betra ober
kement a stad eus eur c'horf ha na vo ken, prestik,
nemet eur bern relegou? »

Menel a rae c'hoaz eur pakad. Hen digeri a reas
gant evez hag e kavas ennan eur skeudenn gaer eus
ar Werc'hez Dinamm : « Setu aman, en dro-man,
emezi, ar pez a fell d'in beza, hag a vin, hep mar
ebet, gant sikour an Otrou Doue ». Hepdale, e stouas
d'an daoulin hag e reas eur bedenn galonek.

Didennet gant ar c'houez-vat a zeu diouzoc'h, ni a
red d'ho kaout, o Gwerc'hez Vari : ar yaouankiz
kristen ho kar meurbet...

KENTAN DEVEZ WARNUGENT

Mari hag ar grwage

- I. Dever ar gwraze a zo eun dra diaes.
- II. Mari a zigas d'eze sklerijenn ha sikour.

I

Kement den a deu er bed-man eo merket d'ezan e
stad. Darn a dle dimezi ; darn-all ne dleont ket. Dre-
ze, eo eun dever striz evit pep hini kemer an hent
dibabet evitan gant an Otrou Doue. Da brederia ez
eus war an dra-man, da glask ha da c'houzout dre
belec'h bale evit dont aezetoc'h a-benn d'ober ar sil-
vidigez. Gwellan tra he deus d'ober eur plac'h
yaouank hag a fell d'ezi gwelet sklaer e kement-
man, eo ren eur vuhe direbech, pedi a greiz kalon,
goulnenn sklerijenn digant he zad, he mamm hag he
c'hozeour, poueza mat en he spered penôs n'eo ket
ar gened, an danve ha madou ar bed-man a zigas
bep tro, war o lerc'h, ar gwir evurusted. Arôk asanti,
sellit, da gentan, da biou e roet ho kalon, rak, eur
wech dimezet, e vefet re diwezat evit distrei war
ho ker ; elec'h ma ve stag ar c'havr eo ret d'ezi
peuri.

Etre an daou bried e tle beza eur garante wirion,
intent vat ha peuc'h ; skouer-vat ha skoazell a
dleont an eil d'egile e peb amzer. Etre daouarn ar
pôtr eman ar galloud hag an nerz : d'ezan eo d'ober
lezenn. E kalon ar plac'h ne dle beza nemet douster,
madelez ha karante : plega a reio d'he gwaz e ke-
ment tra n'eo ket difennet gant Doue. Epad ma vo

ar gwaz ermaez gant e labour, ar wreg en em blijo er gêr : war he c'hount eman labour an ti ; pep tra a vo reizet mat ganti en he rouantelez. Ha mar n'a ket an treo plen awalc'h ; ma sav, gwech pe wech, eun tamm trouz bennak, elec'h c'houeza war an tân, ar plac'h a zesko tevel : gwelloc'h evit ar vuanegez, an douster hag an habaskded a deu a-benn eus an treo hag eus an dud. Gouzant a reio, heb en em glemm, ar poaniou a zigouezo ganti ; digemer mat a reio da bep hini ; klask a reio ober plijadur d'an holl ha, dreist pep tra, da dud an ti. Ha ma tigoue ganti gwelet he den glac'haret pe trubuilhet, ne zilezo ket anezan e-unan gant e boan-spered ; klask a reio an tu da frealzi ha da gennerzi e galon ankeniet : eur bec'h digemeret etre daou a deu da veza skanvoc'h da zougen.

Ma teurve gant an Otrou Doue lakaat war he fenn ar gurunenn a vamm, eur samm pounner a gouezo war he diuskoad, war an dro gant an enor, rak war gont ar wreg eman ar garg diaes meur'bet da vaga korf hag ene he bugale.

Eun dever eo evit ar gerent digas ar bugel d'an iliz-parrouz, kerkent ha m'eo ganet, evit ma vo graet dioutan, dre ar Vadeziant, bugel an Otrou Doue hag an Iliz. Goude kement-man, ne vo ket awalc'h maga ha gwiska ar bugel, ha diskouez d'ezan penôs en em denn er vuhe ; ret e vo, dreist-holl, deski d'ezan gonit ar baradoz ha ren eur vuhe gristen. An abretan ma ve plêet gant ene eur c'hrouadur eo ar gwellan : eur galon neve-flamm a zo gwag evel eun tamm koar : ar c'henteliou hag ar skoueriou roet d'ezan en e vlaveziou kentan a sanko ennan hag a zougo o frouez. Ar skiant-prenan a ziskouez d'imp penôs eur bugel eo kemeret gantan e bleg araok ma ve deut d'ezan an oad a skiant. Dre se, mammou kristen, na daleit ket da gelenn ha da stumma ho pugale. Adalek m'int akuit, deskit d'eze anavezout o

Zad eus an nenv, lavaret o fedennoù, studia ar c'ha-tekiz. Evurus ar bugel a gav, o tont er bed-man, eur vamm santel endro d'e gavel! Ar c'homzou strinket eus kalon eur vamm hag ar bedenn desket war he barlenn ne vezint biken ankouaet.

Lagad eur vamm gristen a ve war c'hed, noz-de, endro d'he bugale : rei a ra kentel ha skouer-vat ; kastiza a ra, pa ve ret ; diwall a ra he ziegez eus an techou fall hag ar gwall-gompagnunez ha, bep ma kresk ar vugale, e ve muioc'h war evez, betegout na vijent distroet diouz an hent mat. Diouz ma vezint bet savet, e vezint kavet diwezatoc'h! Ar vugale savet mat a reio evurusted o zud er bed-man hag o c'hurunenn er bed-all !

II

Daoust ha lennet hoc'h eus ar pennad-skrid-man tennet eus Levr ar Furnez ? « Piou, eme ar Spered-Santel, a gavo eur vaouez kalonek ? Muioc'h talvoudus eo evit an tenzoriou deut eus a-bell-bro. He gwaz en deus fizians enni ha ne vo kammed en dieuez a netra. Ober a ra d'ezan vad, ha nann droug, bep de eus he buhe. Klask a ra gloan ha lin ha labourat a ra gant he daouarn. . . . Eviti he deus gant eur sae ; gant lin ha moug eo gwisket. N'he devo ket da gaout aon evit tud he zi, pa deuiou ar goanv hag an erc'h, rak daou re zilhad a vo gant pep hini. . . . An nerz hag ar sked eo he braoigou ha gant levenez e sell ouz an amzer da zont. Digeri a ra he genou d'ar furnez ha ne lavar nemet komzou leun a vadelez. Gwelet a ra en he zi betek rou-dou an treid, ha ne zebr ket a vara hep labourat. He bugale a zo savet da embann eo evurus ; he gwaz a zo savet d'he meuli. Meur a vaouez o deus dastumet madou, met c'houi ec'h eus trec'het war-neze holl. Ar goned a zo tromplous hag ar goantiri

n'ec nemet moged ; ar vaouez eman doujans Doue en he c'halon, hounnez eo a zo da veza meulet. »

Er bajenn-man, e kavomp evel eur poltred beo eus ar Werc'hez.

O veza m'he devoa kuitaet ar bed evit en em denn ebarz an Templ ha graet, pell a oa, al le dachom gwerc'hez hed he buhe, Mari ne oa tamm ebet e sonj da zimezi. Met menoz Doue, war an dra-se, ne oa ket he hini. Dre ma oa galvet da veza eur skouer a vuhe santel evit an holl hag e pep stad, an Dreinded a zivizas e vije pried ha Mamm. Elec'h ober he fenn, Mari a chilaouas ali he zud hag a blegas da volonte an Otrou Doue. Dimezi a reas eta d'an hini a oa bet dibabet gant Doue e-unan ha diskouezet d'ezi anat, dre eur burzud. Heman a oa eur micherour, ganet evelti eus lignc ar roue David, paour evelti eus madou an douar, met pinvidik eus madou an nenv ; eun den fur, e hano Jozef. Adalek ma voe eurejet, Mari a heuilhas dre holl he gwaz evit kemer lod en e labour hag en e boaniou. O-daou na raent nemet eun ene hag eur galon. Ar grasou dispar he devoa bet digant Doue, ar Werc'hez o lodenne gant he fried, hag e skol Mari, Sant Jozef, dija ken fur, a savas uheloc'h c'hoaz e skeul ar santelez.

An hent he devo breman da heuilh a vo dishenvel kaer diouz an hini he deus pleustret betek breman ; met Mari a gerzo ennan kalonek ha dispount, dre garante evit Doue. Da gentan, an amzer a dremen sioul e ti Nazareth, rannet etre al labour hag ar bedenn, pa digouez eno eun darvoud burzudus. Dre c'halloud ar Spered-Santel, ar Werc'hez a deu da veza Mamm Salver ar bed.

Kalon eur vamm, herve ma lavarere, a zo kaeran pezh-labour graet gant an Otrou Doue. Met piou a lavaro d'imp an deneridigez, an nerz hag ar garante kuzet e kalon Mamm Doue ?

A dra sur, Jezuz, Holl-C'halloudek, en dije gallet tremen hep kaout eur vamm war e dro : gwelloc'h eo bet gantan beva dindan lagad eur vamm, abalamour kentelia an holl vugale ha deski, war an dro, d'ar gwrage penôs sevel o bugaligou. Evel just, an drubuilh hag ar c'hroaziou ne vezint ket espernet da Vari. E kraouig Betleem, e kreiz ar vrasan dienez, war hent an harlu hag en bro an Ejipt, pegen diaes e vo da Vari pourvezi peadra da vaga he Mabig! Petra bennak m'eo perc'hen an holl ouiziegez, Jezuz a fell d'ezan beza kelennet evel pep hini : war varlenn e Vamm e tesko komz, pedi, lenn lezenn Moyzez ha heuilh gizioe e vro. War he lerc'h, e savo d'an Templ, gant ar goueliou bras, ha Mari a vo eur blijadur eviti gwelet he Mab o kreski en oad hag en furnez, dirak Doue ha dirak an dud.

Pebez glac'har eviti pa vo diskaret sant Jozef gant ar maro! Pebez anken pa welo Jezuz o kuitaat ti bihan Nazareth evit mont da brezeg an Aviel! Pebez rann-galon, pa welo he Mab barnet d'ar maro, staget ouz ar Groaz, o vervel etre daou laer evel an diwezan eus an dorfetourien! Ha pa vo pignet Jezuz d'an nenv, Mari a vano he-unan-penn er bed-man. He amzer a dremenno neuze o nerza hag o kelenn an Ebestel ; o pedi hag o hada ar vad endro d'ezi, da c'hortoz ma teuo eviti an eur da gimiadi diouz ar bed-man.

Priejou, mammou, intanvezed, deut d'ar skol daved ar Werc'hez, da zeski ganti kerzet fur er stad merket d'ec'h gant an Otrou Doue.

SKOUER

« E bro Franz, eme eun den a zoare, ar bôtred a ra al lezennou hag ar merc'hed a ra an tiegeziou ».

Ar wirione-se e kavomp eun testeni anezi ebarz Lever Buhez ar Sent. Ha teulet hoc'h eus pled d'an

dra-man? E kichen kavel eur Sant, e kavfet, bep tro, eur vamm gristen.

Ha gant se, sant Tual en deus bet evit mamm santez Koupaia ; sant Koneri a zo bet stummet gant e vamm, santez Eliboubana.

Sant Erwan, Patron Breiz, en deus sunet ar santez gant al leaz, war barlenn e vamm hag a lavare d'ezan alies : « O ma mabig, bezit fur, ma vefet eun devez eur sant ».

Gwenn a Gastill, chomet abred intanvez, a reas eus he mab, sant Loeiz, ar gwellan den a zougas biskoaz kurunenn rouantelez Franz, Meur a wach, e reas d'he bugel ar gentel-man : « Ho karet a ran, hep mar ebet, kement ha ma c'hell eur vamm karet he mab ; koulskoude, gwell e vefe ganin mil gwech ho kwelet o koueza en harz ma zreid, maromik, evit ho kwelet o koueza en eur pec'hed marvel ».

O Mari, binniget dreist d'an holl gwraze, roit d'hon bro priejou kalonek ha mammou kristen!

EIL DEVEZ WARNUGENT

Mari hag ar glac'har

I. Goude Jezuz, den n'en deus gouzanvet kement ha Mari.

II. Da barea an dud poaniet n'eus ket evelti.

I

Dre m'eo bet konsevet hep pec'hed ha dibabet da veza Mamm Salver ar bed, e sonj d'imp, marteze, e vo ar Werc'hez an hini evurusan eus an holl grouadurien, hag e vo diwallet diouz ar boan. Fazia a reomp! Hent ar vuhe a zo bet start meurbet evit ar Werc'hez!

Tulit pled d'an dra-man : seul-vui e tostaer ouz Doue, seul-vui eo ret gouzanv poan. Sellit, kentoc'h, ouz Hon Salver : e vuhe penn-da-benn n'eo bet nemet eur verzerenti. Ac'hanta, an hini a zo an nesan da Zoue, goude e Vab, eo ar Werc'hez. O veza m'eo hep pec'hed, e vo karget da baea ha da zic'haoua, nann eviti he-unan, met evit ar bec'herien ha, dre he foaniou, e tevio a-benn da sioulaat koler an Otou Doue, en abeg d'he santelez a zo dispar. Setu perak eo bet ken kalet he flanedenn!

Klemm a reomp war ar bec'h a deu da boueza war hon diuskoka. Met piou a zo barrek da gonta ar poaniou diniver ha divent bet gouzanvet gant ar Werc'hez, dreist-holl adalek an de m'eo bet choazet da veza Mamm da Zoue?

« An holl boaniou o deus gouzanvet ar verzerien en o c'horf, eme sant Bernard, a zo nebeut a dra

é kichen ar pezh he deus gouzanvet en he ene hag en he c'halon. » N'eo ket hep digare eo bet hanvet Rouanez ar Verzerien hag Itron-Varia ar Glac'har. N'eo ket seiz gwech hepken, met kant ha kant gwech eo bet treuzet he c'halon gant ar c'hleze. He buhe a zo bet evel eur chadenn a boaniou, eur cha-peled a groaziou, eur verzerenti peurbadus. Kement droug a zo er bed, nemet ar pec'hed, a zo kouezet warnezi. « Ouz piou e lavarinn oc'h henvel, o merc'h Jeruzalem, eme ar profed Jeremi? Pelec'h kaout eur glac'har evel ho hini, ha penôs ho frealzi, merc'h Sion? Hoc'h anken a zo bras evel ar mor. »

Biskoaz n'eus bet eur verzerenti ken spoutus ha hini Hon Salver ; kenkoulz-all, n'eus bet den ken ankenic'h hag ar Werc'hez, e Vamm. Kement poan a zo deut da skei war gorf he Mab, Mari he deus he gouzanvet en he c'hreiz, gant nerz-kalon.

Ar Werc'hez he devoa lennet hag adlennet ar Skritur-Sakr ; gouzout a ouie ar pezh a oa bet displeget gant ar Brofeted ; klevet he devoa komzou an den santel Simeon : « Ar bugel-man a zo deut er bed evit koll hag evit sovetaat kalz a dud en Israel. Beza vo evel eur sin hag a vo enebet outan. Evidoc'h c'houi, ho ine a vo treuzet gant eur c'hleze..... » Hep mar, ar c'homzou-se a oa aet don en he c'halon : He Mab a digouezfe d'ezan beza kaset d'ar maro, ha hi a vije ret d'ezi kemer lod en e verzerenti. Adalek an de-se, ar sonj eus ar pezh a dlee c'hoarvezout ganti ne dec'he ket a-zirak he daoulagad.

Piou a lavaro d'imp pegement he deus gouzanvet, hed he buhe, ha dreist-holl war vene Kalvar ? Klas-kit etouez an holl boaniou ha ne gavfet ket unan ha na vije ket en em strinket warni : an eil warlerc'h egile, ar baourent, an drubuilh, an dis-megans, ar velkoni, an enkrez o deus bourrêvet he c'halon hep true.

Epad ma oa en he sav e-tal ar Groaz, beuzet gant daerou ha mantret he c'halon gant ar glac'har, e c'helle lavaret gant gwirione : « O c'houi holl hag a vale war hent ar vuhe, sellit ha gwelit hag-en ez eus ebarz ar bed eun anken par d'am hini ! » Biskoaz den, hep mar ebet, n'eo bet tremenet dre eur boan ken kri.

II

Abaoe pec'hed hon tad kentan Adam, an douar a zo deut da veza eun draouic'nn a zaerou : an den eo berr e vuhe hag ekeit ha ma chom er bed-man ; e ve gwasket dindan ar boan ; reuziou a bep sort a goue war gein an dud ; kaset ha digaset e vezont gant avel ar c'hastiz, evel an deliou sec'h gant eur barr-arne, e koulz an diskar-amzer. Adalek e gavel betek ar varv-skaon, e chomo etre ar morzol hag an anne ; e vara pemdeziek ne zêbro anezan nemet goude hen beza distrempet gant c'houezenn e dal ha daerou e zaoulagad ; labour ha trubuilh, dienez ha glac'har, klenved ha kanvou, kroaziou a bep ment, poaniou a gorf, a galon hag a spered, setu gant pe-tra eo steuet e vuhe penn-da-benn. Bras ha bihan, paour ha pinvidik, pep hini en deus e lod, pep hini en deus e groaz da zougen. Ar glemmadenn-man a zo deut war vuzellou Hon Salver epad e basion : « Gortozet am eus e teufe unan bennak da gemer perz em anken ha n'eus deut den ; unan bennak d'am frealzi, ha n'am eus ket kavet unan. »

Ni, da vihanan, n'omp ket hon unan-penn e-tal ar boan. Mari, hon Mamm, ne c'houlenn ket gwell eget kennerza ac'hanomp. Seul-gwasoc'h eo hon stad, seul frankoc'h a ze e tigo-ro he diouvrec'h da starda ac'hanomp war boull he c'halon.

Klevit anezi o lavaret d'imp warlerc'h he Mab : « Deuit davedon, c'houi holl a zo poaniet ha sammet, ha me ho frealzo. »

An neb n'eo ket bet er skol gant ar boan a vo diaes d'ezan konforti ar c'halonou enkrezet ; an hini, avat, a zo bet trêvet dindan bec'h ar groaz a gavo an tu da zizamma e vreudeur glac'haret. « Tremenet on dre hent ar boan, eme eur rouanez vrudct, ha setu perak am eus true ouz an dud kêz. »

Piou, gwelloc'h evit Mari, en deus desket petra eo gouzanv ? Peogwir eo ret da bep hini, dre gaer pe dre heg, plega da lezenn ar c'hastiz, deomp da glask sikour en he c'hichen : p'eo bolonte Doue e tougfemp hon c'hroaz bemde, warlerc'h e Vab, ar Werc'hez, a dra sur, ne lammo ket ar bec'h diwar hon choug, met hen skanvaat a reio.

Deski a reio d'imp penôs ar boan a zo eun dra ret, eun dra vat evidomp, rak ma ne vije ket eun dra vat, Jezuz n'cn dije ket kemeret ar groaz evit e lod ha n'en dije ket lavaret d'e ziskibien : « Evurus ar re 'zo paour ; evurus ar re a skuilh daerou ; evurus ar re o deus da c'houzanv ; evurus ar re a ve graet brezel d'cze, rak digollet kaer e vefont en rouantelez an nenvou ». Displega a reio d'imp komzou he servijer sant Bernard : « Poan hon eus, gwir eo, met ar boan a zigor e zaoulagad d'an den dallet gant ar bed hag ar blijadur ; ar boan a zistro ar pec'her war an hent mat ; ar boan a sikour an den da baea e zle d'an Otrou Doue ; ar boan a verra hon finijenn er purgator ; ar boan a sikour ac'hannomp da gaeraat hon c'hurunenn en nenv. Startoc'h a ze vo bet al labour, brasoc'h a ze ive a vo ar gopr ».

Abars dont da veza eur skeudenn gaer, ar c'hef dero a dle beza diskolpet gant kizell an artizant ; abars dont da veza lugernus, an aour eo ret tremen anezan dre an tan ; evit skedi er baradoz, ene ar c'hristen a ranko ive tremen dindan morzol ar boan ha beza netaet gant tan ar c'hastiz.

Digemeromp eta gant doujans, hep en em glemm, ar c'hroaziou a blijo gant Doue digas d'imp er bedman. Ha ma tigoue d'imp, gwech pe wech, kaout re bounner ar bec'h, troomp hon sellou warzu ar Werc'hez ; greomp eur bedenn galonek d'an Itron-Varia Drue, gwir frealzerez an dud glac'haret. Plas eur bugel trubuilhet hag ankeniet a zo e kichen e Vamm. Dorn all ebet ne zo ken gouest hag he hini da louzaoui gouliou ha da stanka daerou.

SKOUER

Setu aman penôs e kavas eul liver an tu da frealzi eur vamm mantret he c'halon gant ar glac'har. Kollet ganti he mab unik, diskaret gant ar maro e kreiz e yaouankiz, netra ne deue a-benn d'he diboania ha dare e oa da goueza en dizesper ; n'houle ken gwelet den, komz ouz den ; ne rae nemet gouela.

Al liver a sonjas ober eviti eun dôlenn gaer, keudennet warni an Itron-Varia-Drue, azezet ouz troad ar Groaz, ganti war he barlenn, korf maro he Mab Jezuz distronket ha goloet a wad. Achu gantan e labour, e skrivas e traou ar skeudenn ar c'homzouman : « He c'holl a zo bet brasoc'h evit ho hini. » O sellet ouz an dôlenn-se, ar paour kêz mamm a chomas eur pennadig flastret gant eur galonad anken ; met prestik eur bedenn a deuas war he muzellou hag, adaleg an de-se, ne voe ken klevet o klemm war he stad. Eur sell war Itron ar Seiz-Glac'har en devoa roet d'ezi eur galon neve. Evelti, e kreiz hon foaniou, troomp hon daoulagad warzu Rouanez ar Verzerien hag en em gavfomp konforter.

O Mamm ger, feunteun a garante, grit ma komprenin ho poaniou ha ma veskin ma daerou gant he re ! »

TRIVET DEVEZ WARNUGENT

Mari hag ar bec'herien

I. Mari he deus true ouz ar bec'herien.

II. Beza eo repu ar bec'herien.

I

Mari a gar pep hini ac'hanomp. Met etouez he holl bugale eus an douar, ar Werc'hez a gar dreist ar re-all ar re a zo muioc'h kablus ha muioc'h reuzeidik, ar bec'herien gêz. Eur vamm n'eo ket awalc'h d'ezi diwall he bugel ha harz anezan da goueza : ma tigoue d'ezan tapout-eul lamm, kerkent e vamm a red da adsevel anezan ha da dousaat d'ean e boan. Memez tra a ra ar Werc'hez d'an hini a goue er pec'hed. Ar pec'her, evitan da veza dizent, ne baouez ket, evit-se, da veza he bugel ; ha setu perak he deus true outan. Hon fec'hejou, evel just, a zo eviti eur galonad ; gouzout a ra eo ar pec'her eun torfetour, bourreo he Mab Jezuz ; met ankouaat a ra, koulz lavaret, ar boan graet d'ezi ha d'he Mab evit sonjal hepken en stad truezus ar pec'her dalc'het e ene etre skilfou an drouk-spered ; ne gavo peuc'h ebet ken he devo diframmet anezan diouz hent an ifern. N'eus forz pegen fall ha pegen drouk e c'hallfe beza eur bugel, diaes e vo d'e vamm dianzav ha dilezel anezan. Na pa vije gwall-gaset, ha milliget gant an holl, e vamm ne baouezo ket da gaout true outan.

Ouspenn ze, ma ne vije ket Mari leun a drugare e kenver ar bec'herien, ne vije ken gwir Vamm

d'Hon Salver : kalon Mari eo dleet d'ezi beza henvel ouz kalon Jezuz, he Mab. Ha pera en deus graet Jezuz evit ar bec'herien ? Evitê eo deut er bed-man : « N'on ket deut da glask an dud santel, met ar bec'herien.... N'eo ket an dud yac'h, met ar glanvourien o deus ezomm eus ar medesin..... Muioc'h a joa a ve er baradoz warlerc'h eur pec'her a ra pinijenn evit ne ve warlerc'h naontek ha pevar-ugent den just a zalc'h war an hent mat ».

Gant pebez madelez en deus pardonet da Vari-Madalen sod gant ar blijadur ; da Sant Per, nac'her e Vestr ; da Sant Thomas, diskredik ; d'e vourvien ha d'al laer-dehou, war ar C'halvar. E enebourien, zoken, ez ae droug ennê pa welent anezan oc'h ober stad ouz ar bec'herien hag a rebechê d'ezan beza o brasan mignon.

Mari he deus klevet pedenn Hon Salver war e groaz : « Ma Zad, pardonit d'eze, rak n'ouzont ket petra reont ». Ar c'homzou-ze a zo aet dôn e kalon ar Werc'hez ; e skol he Mab, he deus desket beza trugarezus ouz ar bec'herien, ha, dre-ze, n'eo ket evit harz da garout a greiz kalon, evel he Mab, ar paour kêz denved dianket.

Doue a zo troet da gaout true ha da bardoni ; lezel a ra an-heol da bara war an dud fur ha war ar bec'herien ; e garante hag e vadelez a zo dreist-muzul. Mari, kenkoulz-all, a zo truezus meurbet e kenver he bugale reuzeidik : he c'halon a zo distrempet gant an douster hag ar vadelez ; klask a ra didamall ha sovetaat kement hini a ya da goll. Hanvet eo bet gant an Iliz Mamm an drugare, hon douster hag hon esperans. Seul-gwasoc'h eo stad eur pec'her, seul teneroc'h e vo kalon ar Werc'hez evitan. « Mari, eme Sant Ephrem, eo ar planken hag a sikour d'en em sovetaat an hini en em goll war mor ar pec'hed ». — « Ar Werc'hez, eme Sant

Bernard, eo ar skeul vurzudus e pign drezi, d'ar baradoz, an eneou kouezet en maro ar pec'hed ». Aet eo betek lakaat da zistrei a varo da veo pec'herien paket gant an ankou, abalamour rei d'eze amzer d'ober pinienn eus o gwall-vuhe ha da dec'hout rak barnedigez an otrou Doue.

II

Doue a zo leun a vadelez evit e grouadurien, ha koulskoude, ma en deus eun dorn evit pardoni ha skuilh bennoz, beza en deus ive eun dorn all evit skei pa ve ret. Awechou, e renk chilaou mouez e justis ha kastiza ar bec'herien. Kaer ho po furchal e kalon ar Werc'hez, ne gavfet enni nemet madelez ha trugare. Biskoaz n'he deus savet eun dorn evit skei : ne oar nemet louzaoui ar gouliou ha stanka an daerou.

He zrugare a zo ledanoc'h evit ar mor. Bossuet a ro d'imp da gompren an dra-man. Ma ne vijemp ket pec'herien, emezan, biken Mari ne vije deut da veza ar pezh ac'h eo, en de hirie. D'ar bec'herien eo dleourez ar Werc'hez eus al lodenn vrasan eus he galloud hag he gloar. Paneved d'ar pec'hed, Jezuz n'en devoa ezomm ebet da ziskenn eus an nenv war an douar, ha Mari ne vije ket broman Mamm da Zoue ha Rouanez ar baradoz.

Evit gwir, ar pec'hed ne ra tamm plijadur ebet d'ezi, peogwir eo kiriek d'he foan ha da basion he Mab, met elec'h sonjal en droug hon eus graet dre hon gwall-vuhe, ne wel he daoulagad nemet ar stad truezus en em gavomp ennan ha ne glask nemet tenna ac'hanomp ac'hane. He micher eo lakaat ar peuc'h da ren a-neve etre Doue hag ar bec'herien.

Lenn a reomp ebarz ar Skritur-Sakr penôs, eun devez bennak, eun intanvez eus Thécua a deuas da

gaout ar roue David hag, e kreiz he daerou, a gontas d'ezan kement-man : « Beza 'm oa daou vab ; sevel a reas trouz etreze ; unan aneze a skoas gant e vreur hag a lazas anezan. Abaoe an de-se, 'z eus tabud e kêr hag an holl a fell d'eze e lakfen ar muntret etre daouarn ar varnerien evit ma vo graet d'ezan paea, gant e vuhe, gwad e vreur en deus skuilhet. Allaz ! Ha kavout a ra d'ec'h n'eo ket garo awalc'h evidon, paour kêz mamm, beza bet kollet eur bugel ? Daoust hag-en e vo ret d'in c'hoaz, war ar marc'had, kas egile d'ar maro ? O Roue, bezit truez ouz eur vamm glac'haret ha na loskait ket diframma eus adre he daouarn ar mab unik a van c'hoaz ganti ! » — « N'ho pezit ket a doan, mamm baour, eme ar Roue, teneraet e galon gant an drue : ne vo graet droug ebet d'ho pugel. Fellout a ra d'in e chomfe ganec'h evit ho tic'haoui eus ar boan en deus graet d'ec'h ».

Kemend-all a dremen bemde er Baradoz. Eur vamm a zo eno stouet d'an daoulin dirak trôn an aotrou Doue. Anzav a ra eo digouezet gant ar pec'her adstaga he Mab Jezuz ouz ar Groaz. Ar muntret a zo ive he Mab, he eil Mab, eur bugel he deus prometet war ar C'halvar karout ha sovetaet. Gant daerou en he daoulagad, e c'houlenn distaol evit an torfetour, ha Doue, teneraet dre bedenn ar Werc'hez, a ro e bardon d'ar pec'her.

Gwechall, en hon bro Breiz, e veze kavet aman hag ahont, ar peurvuian demdost d'an henchou-bras, eul lec'h santel, hanvet eur minihi. Pa digoueze d'eun torfetour bennak bezan enklasket gant e enebourien pe gant ar varnerien, e haste prim en em denn el lec'h-se hag a oa evitan eur repu. Keit ha ma chome eno kuzet, dindan toenn eur chapel pe e kichen be eur sant, den n'en devoa galloud da sevel warnan an dorn. Lezet e veze e peuc'h, ken en dije kavet unan bennak d'hen didamall pe d'hen difenn.

Mari a zo bet hanvet gant an Iliz repu ar bec'herien. N'eus forz pegen bras torfed hon dije graet, dindan he mantel e kavfomp bepred goudor. Adalek ma teu ar pec'her da gaout anezi gant fizians, ar Werc'hez a gemer anezan dindan he skoazell.

A-us d'ar bed-man, 'z eus evel eun emgann etre Doue o klask kastiza e vugale dizent ha Mari c'hoant ganti d'o sovetaat, ha bep tro, e chom ganti an trec'h. « O pegen mat eo an otrou Doue, eme Sant Bonavantur, pa en deus teurvezet rei d'imp eun difennourez ken galloudus! Ken nerzus eo he fedenn ken e rofe Doue distaol d'an diaoul e-unan, ma teufe d'en em erbedi gant izelegez ouz ar Werc'hez.

SKOUER

Eur mab unik, kollet gantañ e vrud vat, na rae nemet ober mez d'e dud. E vamm glac'haret a goache, gwellan ma c'helle, buhe fall an den yaouank ha, meur awech, e harzas teurel anezan e-maez eus an ti. Met eun devez, ar bugel digar a gomzas ken vil ha ken divergont, ma 'z eas droug en tad hag e-voe taolet er porz gant ar c'homzou-man : « Kependell diouzin ha teul pled na vije gwelet ken roudou da dreid war dreuziou an nor-man! » Ar pôtr, deut keün d'ezan ha n'ec'het, a glaske an tu da retorn d'ar gêr. Met penôs dont a-benn da sioulaat kounnar e dad? Epad an abarde, e rodeas endro d'an ti ha, pa deuas an noz, e tostaas didrous ouz ar gêr. Ar vamm poaniet hag ankeniet ne dec'he ket diwar hespered sonj he bugel. Arôk mont da gousket, e tigoras, e-kuz, ar prenestr, evit klask gouzout petra oa deut ar pôtr da vezan. Heman a oa o c'hedal an taol : « O ma mamm, emezan, bezit true ouzin! » — « Paour kêz bugel, » eme ar vamm, deus aman etre ma diouvrec'h! » Ha dre ar prenestr,

en em vriatajont. Eur pennadik goude, ar pôtr yaouank, krapet betek ar prenestr war bouez diouvrec'h e vamm, a reas eul lamm war leur an ti. An tad, kounnaret, a savas o zorn evit skei. Ar bugel en em strinkas war e zaoulin, epad ma lavare ar vamm d'he den : « Ma mignon, difennet tevoa d'az mab dont aman dre an nor ; sentet en deus ouzit, rak dre ar prenestr eo deut en ti, ha me ma-unan am eus sikouret anezan ».

O pec'herien, c'houi hag hoc'h eus aon na vije serret ouzoc'h dorjou ar baradoz, deut da gaout ar Werc'hez ha hi a zigorero d'ec'h prenestr ar binijern, hag an drugare.

Santez Mari, Mamm a drugare, hon dousder hag hon esperans, pedit evidomp, pec'herien!

PEVARE DEVEZ WARNUGENT

Mari ha Sakramant an Aoter

- I. Mari he deus roet d'imp danve ar Sakramant.
- II. Deski a ra d'imp beza devot d'ar Sakramant.

I

Jezuz n'en deuz graet netra hep sikour e vamm : elec'h m'eman Jezuz, en em gav ive ar Werc'hez. Ebarz burzud an Inkarnasion, en kraouik Bethleem, en ti Nazareth, war vene Kalvar, evel breman er Baradoz, e kavomp aneze, an eil e kichen egile. N'hall beza disparti ebet etreze.

Kaeran donezon en deus graet d'imp Hon Salver, arôk kwitaat ar bed-man, eo Sakramant an Aoter, elec'h en deus kuzet e gorf, e wad, e ene hag e zivinite, dindan spesou eun tamm bara. E garante hag e c'halloud o deus graet d'ezan kaout an tu da chom ganimp betek fin ar bed. Met pa deuas evitan ar c'houlz da sevel sakramant e garante, dre zoujans evit e Vamm, e c'houlennas diganti kemer lod en e labour. Ha setu penôs ec'h omp dleourien d'ar Werc'hez eus ar Sakramant meulet ra vezo.

Sant Sezêr a Arl a gont d'imp, en e skridou, penôs eur manac'h santel, o lavarout e oferenn, epad ma taouline, d'ar gourreou, dirak an Hosti-Sakr, a welas etre e zaouarn, elec'h ar bara, ar Werc'hez Vari, ganti etre he diouvrec'h ar Mabig Jezuz. Evel just, n'eus ket ebarz ar Sakramant daou gorf, korf Jezuz ha korf ar Werc'hez. Hon Salver a zo eno, e-unan-penn, Doue ha den, evel gwechall war an

douar, evel breman er baradoz, gant e gorf leun a vuhe. Ar pezh a gavomp kuzet dindan spesou eun tamm bara eo korf ha gwad Jezuz, ar memez korf hag ar memez gwad en deus kemeret gwechall e korf ha gwad glan ar Werc'hez Vari, e Vamm. Korf Jezuz er Sakramant a zo eta lod eus korf e Vamm : « Caro Christi, caro Mariae ». Korf Jezuz a zo korf Mari, eme an doktor Sant Aogustin ; » hag er stumm-se, e kredomp lavarout ec'h omp maget ouz an Daol-Santel gant korf ha gwad Jezuz ha Mari. « Ya, eme ar memez doktor, pa daoulinomp dirak korf sakr Hon Salver diskennet war an aoter, e taoulinomp, war-an-dro, dirak korf pur ar Werc'hez ».

Kement en deus kemeret Jezuz en kalon e Vamm a zo deut da veza e gig hag e wad hag a vo da viken danve e gorf presius ebarz an nenv hag e Sakramant an aoter.

Evel m'eo bet tennet Eva, hon mamm gentan, eus unan eus kostou Adam, evel-se Hon Salver en deus kemeret e gorf e kalon ar Werc'hez. Arôk dont da guza e gorf dindan spesou ar Sakramant, Mab Doue a zo chomet epad nao miz kuzet etre kosteziou e Vamm, ha Mari a zo bet kentan Tabernacl Hon Salver er bed-man.

Mari a zo henvel ouz ar wezenn a vuhe a oa bet plantet gant Doue e-unan e kreiz liorz dudius Baradoz an douar. Warni eo diwanet ; ganti eo bet maget ; diouti eo bet distaget ar frouezenn dispar, ar gwir frouezenn a vuhe, Hon Salver Jezuz-Krist, an Hini a dlee beza diwezatoc'h Viktim ar C'halvar ha bara an Aele e Sakramant an aoter.

Panevet he deus roet ar Werc'hez danve e gorf da Jezuz, penôs en dije gallet Mab Doue en em guza dindan spesou ar Sakramant ? Gallout a reomp eta lavarout, gant gwir, penôs Mari a zo bet, en eur

stumm, kiriek d'Hon Salver da veza bet savet Sakramant an Aoter, ha kana, a greiz kalon, dirak an Hosti-Sakr, war an dro gant an Iliz hon Mamm : « Ave, verum corpus, natum de Maria Virgine ». —« Me ho salud, korf ma Salver, ganet gant ar Werc'hez Vari! »

II

N'eo ket awalc'h, evit Mari, beza roet d'imp he Mab ebarz ar Sakramant, desket he deus d'imp ive penôs hen digemer ervat.

Kentan pask a zo bet graet war an douar a c'hoarvezas e kêr Nazareth, de an Annonasion. En de-se, dre c'halloud ar Spered-Santel, an Eil Ferson eus an Dreinded, Mab Doue, a ziskennas eus an nenv e korf glan ar Werc'hez Vari. An Aviell ne lavar ket d'imp petra a dremenas neuze en kalon Mamm Doue, ha koulskoude, n'eo ket diaes d'imp gouzout pegen krenv e oa he feiz, pegen bras he izelegez ha pegen tener he c'harante. Chilaouit anezi, kentoc'h, o kana ar « Magnificat » hag o trugarekaat an Otrou Doue eus ar burzud graet enni : « Ma ene a veul Doue ha ma spered a zo leun a levenez en Doue, ma Salver. Rak sellet en deus gant trugare ouz e servijerez dister ; traou bras en deus graet ennon an Hini a zo galloudus ha santel e hano ».

Goude ma voe pignet he Mab d'an nenv, Mari a gustumas komunia alies. Ar gristenien gentan, evel m'en devoa graet Jezuz hag e ziskibien ebarz ar Gamb-lid, de ar Yaou-Gamblid, a blijie d'ê en em dastum endro d'an Ebestel evit preja : goude pred veze konsakret ar bara hag ar gwinn ha pep hini a zigemere gant doujans Korf ha Gwad Hon Salver. Ar Werc'hez, deut da chom e ti an Abostol Sant Yann, a azeze eno ouz taol gant ar gristenien all.

Pebez levenez eviti pa reseve, eus adre daouarn ar beleg, ar bara deut da veza dre nerz ar c'homzou sakr, korf he Mab Jezuz! Neuze, he spered ganti evel beuzet en Doue, e chome da sonjal er bloaveziou o devoa tremenet an eil e kichen egile, en Nazareth, en amzer ma touge anezan bugel etre he diouvrec'h ; en nozvez Nedeleg, pa welas anezan, evit ar wech kentan, dirak he daoulagad. War he muzellou e teue komzou ar Skritur-Sakr : « An hini a garan ar muian a zo ganin ha me a zo gantan ».

Evit senti ouz Jezuz, evit ober plijadur d'ar Werc'hez, hag ive evit ober vad d'hon ene, tostaomp alies ouz an Daol-Santel! Mari a zo Mamm d'an holl dud ; karout a ra an holl gristenien, mat ha fall, met ar gwellan lec'h en he c'halon a vir d'ar re a blij d'eze komunia.

Goude beza resevet Bara an Aelê, e c'hellomp lavarout ken gwir ha Sant Paol : « Beo on, pe, kentoc'h, n'eo ket me a vev, met Jezuz a zo beo ennon! » Ar gomunion ne ra nemet starda ar garante etre Jezuz ha ni. An hini en deus gantan en e greiz Mab Doue, en deus muioch a zigare da lavarout d'ar Werc'hez : « Ma mamm », peogwir Jezuz, hag hen ne reont nemet unan hepken. « An hini, eme Hon Salver, a zebr ma c'horf hag a ev ma gwad a vev ennon ha me a vev ennan ». N'eus ken disparti, koulz lavaret, etre Jezuz hag an hini a zo o paouez komunia, ha setu perak ar Werc'hez a sell outan gant muioch a deneridigez, Elec'h an hini a chom hep tostaat ouz an Daol-Santel a bella diouz Jezuz hag ar Werc'hez hag a dro kein d'e eyurusted. « Daou rumm tud, eme Sant Fransez a Sal, eo ret d'eze komunia, an dud fur hag ar gristenien glouar ; ar re krenv evit mirout o nerz ; ar re dinerz, evit krenvaat ; ar re yac'h evit mirout o yec'hed hag ar re glanv evit gwellaat ».

Pa seblant d'imp n'omp ket din awalc'h da dostaat ouz Jezuz er Sakramant, pedomp ar Werc'hez d'hon sikour ha lavaromp d'ezi gant ar c'hantik :

Mari, gwir Vamm da Jezuz, Mari, ma Mamm
[dener,
Ma sikourit da resev ho Mab ha ma Salver :
Me nan on siouas, netra, netra nemet pec'hed,
Met ennoc'h e esperan, o ma Mamm benniget!

SKOUER

Sant Hyasent, brudet dre e ouiziegezh hag e santelezh, a savas eur manati da venec'h Sant Dominik, en Kiew. Epad ma oa er gêr-se, an Dartared a lakas ar sesiz warni hag a deuas a-benn d'he gonit : eur wech mestr, ne zellent ket petra d'ober. Laza raent an dud, laerez a rent n tie ha dêvi ar pezh a chome war o lerc'h.

Sant Hyasent a oa o lavaret an oferenn, pa deujod da zigemen d'ezan ar c'helou hag an dismantr a rae an Dartared er vro. Raktal e kemeras war e galon klozenn an kestiou santel hag en em lakas en hent gant e venec'h. Pa dremenas an nor-dal, e klevas eur vouez truezus hag a lavare : « Kas a rez ganit ar Mab hag e Vamm a loskaez war da lerc'h! »

Souezet bras, ar Sant a droas e benn hag a gomprenas e teue ar vouez-se eus skeudenn ar Werc'hez, diwallerez ar manati, eur skeudenn vein, teo ha pounner. Ha setu hen nec'het!

— Penôs, emezan, e c'hellin-me bale gant eur samm ken bras?

Ar skeudenn a boueze eiz pe nao-c'hant lur.

— Bez fizians, emezi, Jezuz a zo ganit am lako da veza ken skanv ma n'az pezo bec'h ebet ganin.

Ar Sant a grogas er skeudenn vein ha pa he dibradas, e welas ne oa ket pounneroc'h evit eur gorzenn. Bale a reas evelse, sammet diouz an daou du, etrezek ar Pologn, Treuzi 'reas an Dnieper, o kerzet war an dour evel m'en dije graet war ar c'haled.

Goude beza graet meur a gant leo gant e samm, ar Sant en em gavas e Krakovi : eno ar skeudenn vein a gemeras he fouez diagent.

Karomp Jezuz er Sakramant, ha karomp Mari, e Vamm! Dalc'homp start d'an diou devosion-man : gante e heuilfomp dinec'h ha dispount hent ar vuhe, en despet d'hon enebourien.

PEMPET DEVEZ WARNUGENT

Mari hag an Iliz

I. Mari he deus roet dorn da sevel an Iliz.

II. Mari a ro skoazell d'an Iliz.

I

Mamm hon encou eo an Iliz santel katolik. Evel n'eus nemet eur gwir Doue hag eur gwir relijion, n'eus ive nemet eur wir Iliz ha den ne c'hall beza salvet nemet enni hepken. An Iliz a ra diouzimp gwir vugale da Zoue ; dre he c'helennadurez, e ro d'imp ar gwir feiz ; dre he sakramanchou, e ro d'imp ar gwir vuhe : derc'hel a ra ac'hanomp en hent ar wirione hag ar santelez, war an douar, da c'hortoz digeri dirazomp dor ar baradoz.

Arôk kuitaat ar bed-man, Jezuz en deus savet e Iliz, evit kas da benn al labour boul'het gantan etouez an dud ; met ar wech-man, evel pep tro, ne reas netra hep sikour e Vamm, ar Werc'hez Vari.

An Iliz a zo bet galvet, gant gwirione, Tiegez ar gristenien, Familh gwir vugale Doue : Jezuz a zo Tad ha Roue en Iliz ha gantan Mari a zo Mamm ha Rouanez. Goude ma voe pignet he Mab d'an nenv, Mari, evit doare, ne vane ken ganti netra d'ober er bed-man, rak Jezuz a oa eviti pep mad, hag a greiz kalon e lavare evel Sant Paol : « Hast am eus da vervel evit beza gantan da viken ». Eun dra hepken a zalc'he anezi er bed-man : ar garg fiziet enni gant Hon Salver da sikour an Ebestel d'azeza an Iliz. D'al labour-se e welomp anezi o westla he c'halon, he nerz hag he buhe, betek he huanad diweza.

De Yaou-Bask, pa 'n em dennas an Ebestel e sâl-vras ar Senakl, d'en em bresta da zigemer ar Spered-Santel, Mari a deuas gante evit pedi ha, dre nerz he fedennou, e presas evit ar Spered-Glan ar mare da ziskenn war an douar. Ebarz kalon ar Werc'hez, e teuas da gentan, gant e holl donezonou, hag ac'hane en em ledas en kalon pep hini eus an Diskibien, da rei d'eze sklerijenn, nerz ha karante, evel p'en dije c'hoantaet ar Spered-Glan diskenn er bed-man hag en em rei d'an dud, warlerc'h Hon Salver, dre zaouarn Mari.

Adalek an de-se, ar Werc'hez, sakret gant ar Spered-Santel Mamm an holl gristenien ha Rouanez an Iliz, a dremenno he amzer o teurel evez ouz ar vugale fiziet enni gant he Mab. Piou, gwelloc'h eviti, a oa barrek d'ober skol d'an Ebestel ? Epad tri bloa, o devoa heuilhet Hon Salver ha bevet gantan ; klevet o devoa e brezegennou ; bet e oant test war e vuzudou..... Daoust da se, nag a dra a vane c'hoaz da zeski ! Da beb amzer, e teuent da glask ali digant ar Werc'hez. Mari a zisplege diraze ar pez na ouient ket. Seblantout a ra d'in gwelet ar gristenien gentan dastumet endro d'ezi, evel bugale endro d'o mamm, evit he chilaou o konta d'eze, dre ar munud, bloaveziou kentan Jezuz, e yaouankiz, e labour hag e vertuziou, e gomzou hag e c'hourc'hemennou. War he muzellou, o deus desket an Ebestel ar pez a lennomp hirie ebarz an Aviel. Epad ma veze Sant Per, Sant Yann hag an Ebestel all o prezek, Mari en em roe d'ar bedenn hag he mouez a save betek an nenv da c'houlenn bennoz Doue war o labour. Pedennou kalonek Mamm Doue, kalz gwelloc'h evit komzou ar brezegerien, a rae d'ar Judevien plega d'al lezenn gristen ha digemer ar vadeziant. Pet ha pet a zo bet laket, dre zikour ar Werc'hez, war hent ar silvidigez, ha gonezet d'ar gwir feiz ? Pa grog an enbourien da gounnari eneb d'ar gristenien, elec'h

krena, Mari a chom etouez he bugale evit o difenn. Sant Per ha Sant Yann a zo teulet er prison : dre he fedennou, Rouanez an Ebestel a deu a-benn da derri o chadennou, Kaset int adarre dirak al lez-varn ha kondaonet da veza skourjezet : he fedennou a dalve d'eze ar c'hras da c'houzanv gant joa o merzerenti. Sant Stephan a zo barnet d'ar maro gant pennou-bras ar Judevien ha lazet a daoliou mein : Mari a bed evitan hag ar merzer kentan a ro, a galon vat, e vuhe evit e enebourien. Chom a rei dispount e kichen an Iliz, epad ar waskadenn gentan, evel ma chomas kalonek ouz troad ar Groaz epad ma roe Jezuz e vuhe evit silvidigez an dud....

Ar gristenien a oa aketus da zont da glevout kennadurez a Ebestel ; d'en em voda da bedi ; da veuli Doue ha da gomunia, war an dro, gant ar gwrage santel o devoa heuilhet Hon Salver, an diskiben kentan ha Mamm Jezuz. Ar garante hag an doujans a rene etreze ; asamblez e vevent, paour ha pinvidik ; asamblez e kemerent o frejou ; n'o devoa holl nemet eur galon hag eun enc. Bemde ez ae war greski niver ar re gonezet d'ar gwir feiz gant skouer an Ebestel ha, dreist-holl gant buhe santel ha madalez Mamm Doue.

II

Eun devez bennak ma oa Santez Madalen a Pazzi o pedi, e welas en he spered eun daolenn souezus. Dirazi e oa eur mor doun dirollet gant eur barr-amzer, ha warnan bagou goloet gant an tarziou, kaset ha digaset gant an arme, war var da vont da goll.

En desped d'an avl foll ha d'ar rec'hel treitour, unan, koulskoude, a zalc'he da vont war arôk, sounn ha plen, heb aon rag ar gwagennou. Souezet bras ouz he gvelet douget ken brao war an dour, ar san-

tez a deulas pled e oa renet gant eun itron gaer meurbet ; houman, eur mouse'hoarz war he muzel-lou, gant eun dorn a gemenne d'ar mor ha, gant an dorn all, a zalc'he ar stur. Hag al lestr a yae eeun warzu ar porz, difazi ha seder.

A-benn eur pennadig, e teuas da intent ar pezh verke an dra-se : ar mor kounnaret eo ar brezel didrue graet bemde, gant an drouk-spered, da servijerien an Otrou Doue ; ar vag diflach eo an Iliz Santel, a zoug ar gristenien d'ar baradoz ; an Hini a dalc'h ar stur eo ar Werc'hez Vari, difennourez an Iliz ha Sikour ar gristenien.

Evitan da veza savet er baradoz, Jezuz n'en deus ket dilezet e Iliz. Arôk kuitaat e Ebestel, e lavaras d'eze : « N'ho lezin ket evel emzivadenn. Ma 'z oc'h kasaet gant ar bed, gouveet en deus bet kasoni ouzin-me da gentan : ar servijer n'eo ket uheloc'h evit e vestr. Ma o deus graet brezel din, e refont brezel d'ec'h c'houi ive. Trubuilh ho pezo er bed, met bezit leun a fizians, me a zo bet trec'h d'ar bed. Me a vo ganec'h bemde betek fin ar bed. »

Mari a c'hallfe lavaret kemend-all : a-viskoaz he deus difennet he bugale.

Adalek ar bloaveziou kentan, ar Judevien en em savas cneb d'ar gristenien. Mari a zigasas d'he bugale nerz da c'houzanv ha da stourm ouz o enebourien.

War o lerc'h, impalaered Rom a roas urz da veuzi ebarz ar gwad kement a ansavje evel Doue an Hini a oa bet staget ouz ar Groaz. Epad tri-c'hant vloaz, ar vourrevien a glasgas, dre gaer ha dre heg, distrei ar gristenien diouz ar gwir relijion hag ober d'eze daoulina dirak skeudennou an doueou faoz. Eur milion hanter a dud, d'an nebutan, eus a bep bro, a beb oad hag a bep stad, a voe gwelloc'h gante koll o buhe evit nac'h o feiz. En desped d'ar

gasoni, d'ar c'hleze, d'an tan, d'ar poaniou ar muian kri ha d'ar maro, ar verzerien a chomas gante an trec'h : o gwad, mesket gant pedennou ar Werc'hez, a lakas da ziwan kristenien neve hag an Iliz, krenvoc'h evit biskoaz, a welas he brankou o 'n em astenn, a bep tu, evel ma ra eur wezenn yac'h goude eur barr-arne.

A-boan ma oa deut ar peuc'h da ren etouez an dud, ma chenchas an diaoul a stumm evit klask mouga ar wirione. Skigna a reas dre holl falz-kredennou eneb da Zoue, eneb d'ar feiz, eneb d'ar Werc'hez. Kerkent, Mari a zibabas du-man ha du-hont beleien, doktored, sperejou kaer hag a vrezellas gant o frezegennou helavar hag o fluennou lemm evit dispenn ar gevier ha difenn an Aviel. Setu perak an Iliz a lavar da Vamm Doue : « C'houi eo an Hini he deus mouget ar fals-kredennou ebarz ar bed holl! »

Diwezatoc'h, er c'hreizte eus ar Frans, kristenien dinatur, o veza nac'het o feiz hag en em roet da bep seurt fallagriez, a savas eneb d'an Iliz : gant devosion ar chapel-d, ar Werc'hez a deuas a-benn diouté.

Kerkoulz-all, an Turked, ar Protestanted, Pôtréd ar Revolution, holl mevelien an drouk-spered o deus kavet war o hent Rouanez an nenv evit harz aneze da zont a-benn eus o labour milliget. E-kreiz o enkreiz, hon zud koz o deus galvet Mari d'o sikour : ar Vamm dener-se he deus klevet hirvoudou he bugale hag astennet he dorn galloudus evit o difenn. Hag an Iliz santel, leun a anaoudegez-vat, a lavar d'ez : « O Gwerc'hez santel, binniget oc'h gant an Otrou, rak drezoc'h en deus kaset da netra hon enebourien ».

En hon amzer-ni ive, an Iliz a zo gwall-gaset. An drouk-spered en deus dastumet endro d'ezan eleiz

a dud en pep bro, tud desket, tud a zanve, tud fallakr, gwasoc'h evit ar paganed an amzer goz. Ar re-se ne lazent nemet ar c'horf, e lec'h ar re-man a ro ar maro d'an ene. Ober a reont kement ha ma c'hellont evit diskar ar relijion gristen, dre o c'homzou, dre o skridou, dre o oberou. Disprizout ha goapaat a reont ar feiz ; sevel a reont lezennou eneb d'ez. Ar vro a zo evcl beuzet en eur mor a skridou milliget, leun a c'hevier eneb d'ar feiz, d'an dud a Iliz. Klask a raer, zoken, miret na vezo roet d'ar vugale eun deskadurez kristen.

Greomp evel ma o deus graet hon zadou koz : pedomp ar Werc'hez. Beza he deus hirie ar galloud he devoa gwechall. Diwallet he deus an Iliz enpad meur a stourmad, adalek ar penn kentan betek breman ; hon difenn hag hon c'hennerza a raio c'hoaz, rak galloudus eo evel eun arme renket evit an emgann.

SKOUER

Er c'houezekvet kantved, an Turked, goude beza diframmet digant ar gristenien Be Hon Salver, a fellas gante trec'hi war an holl rouanteleziou eus bro ar C'huz-Heol, ha plada an Iliz Katolik. Pi V a oa Pab en amzer-se. Skriva a reas da bennou-bras ar vro, da ziskleria stad truezus ar gristenien flas-tret dindan treid o enebourien, hag e pedas aneze da sikour an Iliz hag ar vro.

Savet e voe eun arme, hag en he fenn e voe laket Don Juan an Aotrich, eun den kalonek ha leun a feiz. An holl soudarded, bet holl o kovesaat hag o komunia, a voe roet d'eze peb a chapeled a-berz ar Pab.

D'ar seizvet a viz here 1571, an diou arme en em gavas tal-ouz-tal, e pleg-môr Lepant. Peder eur bennak e padas an emgann. E keit-se, ar bobl kris-

ten a oa daoulinet dirak ôteriou ar Werc'hez hag ar Pab ne baoueze ket da lavaret ar « Rozera » evit kaout sikour digant Rouanez an nenv.

An Otrou Doué hag an Itron-Varia a chilaouas o bugale. An Turked a voe trec'het, kollet gante tremen tregont mil a dud, al lodenn vrasan eus o listri hag o bannielou. Doue, dre eur mirakl, a roas da anaout d'ar Pab an de hag an eur ma trec'has ar Groaz santel war enebourien an Iliz. Pi V a zisklerias raktal d'ar bobl e oa ar gonid gant ar gristenien hag a reas kana an « Te Deum ». Evit trugarekaat ar Werc'hez, e lakas en he Litaniou ar c'homzou-man : « Auxilium christianorum, ora pro nobis! » — « Sikour ar gristenien, pedit evidomp ».

Dindan ho skoazell en em dennomp, Mamm santel da Zoue. E kreiz hon ezommou, na zisprizit ket hon fedennou met hon diwallit a bep riskl, Gwerc'hez gloriüs ha benniget!

C'HOUEC'HVET DEVEZ WARNUGENT

Maro ar Werc'hez

I. Mari he deus bet eur maro santel.

II. Beza eo Patronez ar maro mat.

I

Goude ma voe pignet he Mab d'ar baradoz, Mari a chomas c'hoaz war an douar ugent vloa bennak. Petra bennak ma rae an Ebestel kalz a stad outi ha ma tiskouezent d'ezi ar brasan doujans, ar Werc'hez a gave gwall hir an amzer er bed-man. « Elec'h m'eman ho tenzor, eme an Aviel, eno ive eman ho kalon ». Mari n'he devoa pinvidigez ebet nemet he Mab Jezuz savet er baradoz ; setu perak he spered a oa troet noz-de warzu ar bed all, o c'hortoz an eur da vont da gaout an Hini a gare dreist pep tra. Alies e veze klevet o hirvoudi evel ar Roue David : « Evel m'en deus mall ar c'haro da eva dour ar feunteun, evelse ma ene en deus sec'hed d'ec'h, o ma Doue! Pegoulz e vezin eta dirak ma Doue? Piuu a roio d'in dioueskel evel re eur goulm ma c'hellin nijal da gaout Doue? Ma daerou a zo ma magadurez, noz-de, epad ma lavarer d'in hep paouez : Pelec'h eman da Zoue? ».

Evit kaout berroc'h an amzer, e blije d'ezi mont da welet al lec'hiou ma oa tremenet enne gwechall he Mab Jezuz : kraouig Bethleem, elec'h ma oa ganet ; an Templ, elec'h m'en devoa prezeget ; liorz an Olived, elec'h m'en devoa c'houezet an dour hag ar gwad ; ti Pons-Pilat, elec'h ma oa bet skourjezet

ha kurunet a spern ; ar mene Kalvar, elec'h ma voe laket d'ar maro ; ar Be, elec'h ma oa bet sebeliet ; mene an Olived, elec'h ma oa pignet d'an nenv. Kement-se, koulskoude, ne deue ket da vouga ar c'hoant kuzet en he c'halon, hag ar maro, nec'het dirak he santelez dispar, ne grede ket tostaat outi.

Hep mar ebet, na pa ne vije ken nemet abalamour d'he c'harg a Vamm da Zoue, Mari ne oa ket ret d'ezi plega d'ar maro, evel an dud all. Ar maro di-drue, hag a laka an holl da grena gant ar spout, n'eo bet digaset da Adam ha d'e vugale nemet evel eur c'hastiz dlet d'ar pec'hed. Ar Werc'hez, konsevet hep pec'hed ha chomet dinamm hed he buhe, ne oa tamm ebet red d'ezi gouzanv ar binijenn-se, ha koulskoude, ne fellas ket d'ezi beza espernet gant an Ankou. N'eo ket eta ar c'hlenved en deus diskaret anezi, met kentoc'h he c'harante evit Doue.

Buhe an Itron-Varia war an douar a zo bet cur burzud a santelez. He c'harante evit Doue a zo bet bras meurbet, kalz brasoc'h evit karante an holl Sent hag an holl Aele war an dro ; ar garante-se a yeas war gresk a ze da ze, hag e teuas eur mare ma n'helle ken eur c'horf marvel he derc'hel en e greiz. Neuze, heb an disteran poan, ene Mari en em zistagas diouz he c'horf, evel eur frouezenn dare en em zistag he-unan diouz ar wezenn. Marvel eo bet didrous ha sioul, dre nerz he c'harante.

II

Eul lezenn a zo bet douget gant an Otrou Doue ha, herve al lezenn-se, pep den a dle mervel. Dre zor tenval ar maro e vo ret d'imp tremen : pec'hed hon Tad kentan, ebarz Baradoz an douar, en deus tennet ar maro d'e heul.

An den ne deu war an douar nemet evit mervel ; met n'ouzomp na pegoulz na penôs e kuitafomp ar

bed-man ha, diouz ar stad m'en em gavo neuze hon ene, e vefomp da viken pe evurus er baradoz, pe daonet en ifern. An devez brasan eus buhe an den n'eo ket an hini en deus e digaset er bed-man, met an hini a gaso anezan d'ar bed all. Setu perak ar Sent a grene gant ar spout o sonjal er maro hag er beurbadelez a deu war e lerc'h. Poueza a raent en o spered ar gentel-man tennet eus an Aviel : « Ar vouc'hal a zo ouz troad ar wezenn : koueza a reio war an tu ma pleg hag eur wech diskaret, e chomo el lec'h ma vo kouezet ».

Mar fell d'imp kaout eur maro mat, heuilhomp ali ar Spered-Santel : « Sonjit alies, emezan, en ho finveziou diwezan, ha biken pec'hed ne refet ». Ha neuze, renomp eur vuhe vat rak, peurvuian, pep hini a varv evel m'en deus bevet : buhe vat a zigas maro mat ; buhe fall a denn war he lerc'h maro fall.

Peilaomp diouz ar pec'hed ; greomp brezel d'an techou fall ; chomomp bepred er stad a c'hras ha bevomp bemde e giz ma vije an de hirie an diwezan eus hon buhe, rak ar maro a deuo da ziskar ac'hanomp pa sonjomp an nebeutan : « Beilhit ha pedit, eme Hon Salver, rak n'ouveet nag an eur nag an amzer ma teuo Mab an Den da c'houlenn diganech renti kont eus ho puhe ».

Daoust pegen treitour eo ar maro, eur c'hristen mat ne dle ket spouta dirazan, dreist-holl ma eo gwir servijer ar Werc'hez. « Abaoe an de, eme sant Alfons a Ligori, m'he deus bet an eur-vat ha, war an dro, ar glac'har da veza ouz troad ar Groaz epad ma roe Jezuz e huanad diwezan, ar Werc'hez he deus bet digant Doue ar garg da skoazia war e dremenvan kement hini a zo galvet da vont d'ar baradoz. » An Iliz he deus hanvet Mari Patronez ar maro mat. Kemenn a ra d'imp lavaret Litanioù ar

Werc'hez, evit goulenn diganti gras eur maro mat. Ouz an « Ave Maria » he deus staget ar c'homzouman : « Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien, breman hag en eur eus hon maro ». Er mare-se eus hon buhe, dreist-holl, hon devo ezomm da veza sikouret ; met bezomp leun a fizians en madelez ha galloud ar Werc'hez. Mar eo Mamm da Zoue, beza eo ive hon Mamm ; ha gwir vugel ar Werc'hez, herve ar brasan Doktored eus an Iliz, ne vo biken kollet. Gwelct e vefe kentoc'h an nenv hag an douar o koueza en o foull evit ne deufe Mari da zilezel hep sikour an hini en deus he fedet hag he servijet epad e vuhe.

Goude beza goulennet diganti sikour ac'hanoc'h e par ar maro, bet sur n'ho ankouao ket ; beza vo e kichen ho kwele evit ho konforti, ho nerza, ho tifenn eneb d'an drouk-spered ha digemer hoc'h ene. « Epad o buhe, a lavaras ar Werc'hez da santez Jertrud, e skuilhan war ma servijerien an holl c'hrasou o deus ezomm ha pa digoue d'eze kuitaat ar bed-man, e teuan me ma-unan en o c'hichen ha, gant eur sell, ec'h argasan diwar o zro sperejou an ifern. Ne loskaan nepred da vont da goll an hini en deus enoret ac'hanon. »

Pedomp alies ar Werc'hez evit ar glanvourien a zo war o zremenvan. Wardro pevar-ugent mil den a zo galvet bemde da vont dirak lez-varn an Otrou Doue. Pet ha pet, siouaz, a zo en stad a bec'hed marvel. Goulennomp civitê, digant Doue hag e Vamm, gras ar maro mat. E giz-se hon devo d'hon zro ar gwellan digemer er bed-all.

SKOUER

Hon Tad Santel ar Pab Pi X en deus laket war roll ar Sent eur beleg eus kêr Barselon, Jozef Oriol. Heman, goude beza tremenet e vuhe o pedi, o pre-

zeg Pasion Hon Salver ha Seiz Glac'har ar Werc'nez, o c'hounit da Zoue kalz a bec'herien, hag oc'h ober wardro an dud klanv, a voe skoet gant eur c'hienved bras, d'an oad a zaou vloa ha hanter-kant. Hepdale, e c'houlennas ma vije roet d'ezan e sakramanchou diwezan. Adalek neuze, e ene en em gavas evel beuzet en Doue ha ne rae ken van ebet ouz traou ar bed-man.

A-benn eur pennadig, koulskoude, e tistroas warzu ar beleg chomet en e gichen hag e pedas anezan da gana ar bedenn a blije d'ezan dreist d'ar re all, ar « Stabat Mater »..... Heman a chomas souezet pa glevas kemend-all, met, evit ober plijadur d'ar c'hlanvour kêz, e krogas kerkent gant ar c'han. E keit-se, ar c'hlanvour a starde e Grusifi war e galon : e zremm a oa laouen hag e ene a seblante en em distaga diouz e gorf evit mont d'en em deurel war galon an Otrou Doue. Pan arruas ar poz diwezan : « Pa varvo ma c'horf, grit ma 'n em gavo ma ene e gloar ar Baradoz », eur mousc'hoarz a baras war e vuzellou hag e rentas en peuc'h e huanad diwezan.

Kaerat maro! Ra digouezo d'imp mervel evelse!

« Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien, breman hag en eur eus hon maro! »

SEIZVET DEVEZ WARNUGENT

Mari Rouanez ar Purgator

I. Petra eo ar Purgator ?

II. Madelez ar Werc'hez e kenver eneoù ar Purgator.

I

An ene, pa gwita ar bed-man a gav dirazan tri hent.

Da gentan, hent ar Baradoz evit an hini a zo dinamm ha glan evel de e vadeziant. Nebeut, siouaz, a gemer an hent-man, rak tremen er bed-man, hep kas ganimp eur boultrenn bennak, a zo eun dra diaes meurbet, ha koulskoude, ar Spered-Santel a lavar d'imp penôs, en rouantelez an nenvou ne ve digemeret netra kailharet.

D'an eil, hent an ifern, evit an hini en em gav en stad a bec'hed marvel, ha heman n'en deus da c'hedal nemet malloz ha poaniou euzus epad ar beurbadelez. Pet a tigoue d'eze kemer an hent-man? Doue hepken hen goar!

D'an trede, hent ar purgator, evit an hini a ya eus ar bed-man gant pec'hejou veniel, hep beza graet trawalc'h a binijenn evit peurbaea da justis an Otrou Doue ar boan stag ouz e bec'hejou tremenet.

Dre an hent-man e renk tremen an darn-vuian eus an dud : dre eno, sur awalc'h, e vo ret d'imp tremen ive, rak, anez beza sent, n'aer ket war eeun d'ar baradoz. Ar sonj eus ar purgator, elec'h hon spouta, a dleje, kentoc'h, lakaat fizians en hon c'halonou ha dougen ac'hanomp da veuli trugare an Otrou Doue, rak paneved d'ar purgator, penôs e rafe al lodenn vrasan eus ar gristenien evit tapout mont da rouantelez an nenv? Doue, e gwirione, a zo bet evidomp an Tad ar gwellan, pa 'n eus teurvezet ober eus ar Purgator eul lec'h ma c'hallomp ennan diboultra, gwalc'hi ha kempenn hon eneoù, peurbaea hon dle d'e Justis, arôk mont e kichen ar Sent, e bro ar gwir evurusted.

Ha petra o deus an eneoù da c'houzanv er purgator? Poaniou kri meurbet, brasoc'h evit holl boaniou ar bed-man! Beuzet int en eur mor a dan ; dalc'het int pell diouz an Otrou Doue ; glac'haret bras int o veza kollet o amzer war an douar. Deut eo evite breman an noz, pa n'hall ket an den ober ken an disteran tra evit e silvidigez. O stad a zo gwasoc'h evit hini ar paour kêz prizonier dalc'het gant chadennou en eur prizoun tenval pe ar bugel dalc'het pell diouz e vamm. Henvel int ouz klanvour an Aviel a c'hortoze bemde ma teuje unan bennak da ziskenn anezan en dour ar feunteun vurzudus ha ne deue den d'hen sikour. Hirvoudi a reont warlerc'h an devez binniget ma vo gwenn awalc'h o iskili da nijal e kerc'hen o Zad a zo en nenv.

Silaouit klemmou an eneoù paour : « Bezit trueouzimp, c'houi, da vihanan, hag a zo hon mignoned, rak dorn justis an Otrou Doue a zo deut da boueza warnomp.... Ma ene en deus sec'hed d'an Doue beo : pegoulz en em gavin dirak Doue?... Siouaz! Nag e pad pell evidon an harlu! Breudeur, kerent ha mignoned, en han' Doue, hón sikourit! »

Eun dever a drue eo evidomp sikour aneze, rak n'hellont netra evit berraat o finijenn. Eun dever a garante eo pedi evite : en o zouez en em gav, marteze, eun tad, eur vamm, eur breur, eur c'hoar, eur bugel meurbet karet : epad ma oant er bed-man, e voemp mat evite : perak ankouaat aneze er bed-all? Eun dever a justis, zoken, eo evidomp gwellaat o stad : lod aneze n'emaent eno nemet abalamour hon eus douget aneze d'ar pec'hed dre ar skouer fall.

Ha petra d'ober evit diboania ineou ar purgator? Etre hon daouarn eman holl meritou Hon Salver, ar Werc'hez hag an holl Sent, peadra da baea o die. Kinnigomp da Zoue hon labour, hon foaniou a gorf hag a spered, hon finijennou, hon oberou mat, evit o frealzi. Greomp evite ar gomunion santel ; kevomp an oferenn dre garante evite, ha ma c'hellomp, bezomp aketus da lakaat evite servijou hag oferennou. N'espernomp netra evit o sikour : greomp evite ar pezh a garfemp a vefe graet evidomp-ni hon unan, rak hon zro a deuo prestik. Ma pedomp evit an Anaon, e vo pedet evidomp goude hon maro. Ma tigoromp dor ar baradoz d'hon breudeur, ar re-man hon sikouro, d'o zro, hag er bed-man hag er purgator.

II

Re alies, marteze, e tigoue d'imp ober skouarn vouzar ouz hon zud varo. Mari a zo muioc'h trugarezus e kenver an Anaon. N'eo ket awalc'h eviti difenn he bugale a-hed o buhe hag e par ar maro ; betek er Purgator e heuilh aneze, evit digas d'eze skoazell ha frealzidigez, hag o zenna ac'hane ar c'hentan ma c'hall ; ha setu perak eo bet hanvet gant an Iliz « Skoazellerez eneou ar Purgator »...

Ar re-man a zo karet gant Mari, o veza m'int he bugale. Ma eo Rouanez an nenv hag an douar, beza

eo ive, war ar memez tro, Rouanez ar Purgator. « Rouantelez ar Werc'hez, eme sant Bernardin, a dap betek ar Purgator, war an eneou damantus. » Ha ma eo Rouanez, beza eo, dreist-holl, Mamm, hag ar Vamm ar gwellaan.

Adalek m'eo bet choazet gant Jezuz evit beza Mamm an holl dud, he deus kemeret ar garg da zifenn kement hini a zo bet roet d'ezi evit bugel, kerkoulz an anaon evel ar re-all : he madelez a zisken en o zouez kerkoulz evel er bed-man. Setu perak e lavare da santez Brijitta : « Me eo Mamm an drugare ha n'eus poan ebet er Purgator ha na vije ket pareet ganin ».

Hanvet eo Dor ar Baradoz, o veza m'eo karget, gant an Otrou Doue, da zigeri dor ar Purgator, da denna ac'hane he bugale ha da zibrenna evite dor an nenv.

Evite da veza e kreiz ar c'hasti, an eneou-man a zo eneou santel : breudeur int d'ar Sent ; miret o deus doujans ha karante Doue ; n'o deus ket kollet ar meritou o doa gonezet epad ma oant war an douar ; galvet int da vont, eun de, da balez an Dreinded ; o hano a zo dija war roll ar Sent : setu perak Mari he deus evite ar vrasan karante ; hast he deus ma vo torret o chadennoù ha laket war o fenn kurunenn an nenv.

An Tadou Santel a lavar d'imp eo he brasan plijadur diskenn eus an nenv d'ar Purgator ; bale e kreiz an tan evit mouga e nerz ; konforti he bugale ha tenna aneze eus ar boan. Gant goueliou bras Ne-deleg, Pask, Hanter-Eost hag an Holl Sent, dreist-holl, e teu da denna ac'hane eun niver bras a eneou evit kas aneze, war he lerc'h, da vro ar Sent hag an Aele.

Seul kaletoc'h eo pinienn an eneou, seul brasoc'h ive eo madelez ar Werc'hez en o c'henver. Pehini eo

ar vamm a welfe he bugel kouezet e kreiz eun tantad tan ha na redfe kerkent d'hen tenna ac'hane? Mari eo an teneran eus an holl mammou! Penôs e c'hellfe chom disonj ha didrue dirak he bugale o leski e flamm ar Purgator? N'he deus peuc'h ebet ken e vezont holl dastumet endro d'ezi er baradoz. Digas a ra sonj d'ar gristenien a zo war an douar da bedi evit an Anaon. Ha hi he-unan a bed kalonek evit an eneou paour ; meska a ra he daerou gant gwad Jezuz evit berraat o foan ha rei d'eze pare. Sikouromp anezi en he labour ha greomp aluzen d'hon zud varo.

En tu-hont da se, ma fell d'imp diverraaat ar c'hastiz a zo miret evidomp er bed-all, bezomp devot d'ar Werc'hez er bed-man : berroc'h ha skanvoc'h e vo evidomp ar binijenn ouz toull dor ar baradoz.

An dra-se a zo bet diskuilhet ganti. D'hon Tad Santel ar Pab Yann XXII, he deus disklêriet e tennje eus tan ar Purgator, d'ar sadorn kentan goude o maro, he bugale bet fidel da zougen en o c'herc'hen ar skapuler ha da bedi anezi gant devotion.

SKOUER

Sant Per Damian, hag a veve en XI^e kantved, a gont d'imp an darvoud-man. E kêr Rom, emezan, a oa ar c'hiz, bep bloa, etouez ar gristenien, da vont, gant peb a c'houlou elum, d'ober tro an ilizou d'an abarde-noz derc'hent gouel Hanter-Eost. Eur wech bennak, a genver gant an de-se, e tigouezas gant eur plac'h yaouank, deut da zaoulina en iliz an « Ara Cœli », gwelet reiz mat, o pedi en he c'hichen, eun itron, he maeronez, maro er bloa-se. Souezet bras o welet kemend-all, e klaskas kaout skle-

rijenn war an dra-se ha setu hi d'en em denn e kichen an nor-dal. Pa deuas an itron ermaez, e krogas en he dorn hag e c'houlennas diganti : « Na petra 'ta, n'eo ket c'houi eo ma maeronez Marozi, ec'h eus dalc'het ac'hanon war ar fons-badeziant? — Eo, me eo ho maeronez! — Met penôs en em gavet c'houi aman, goude ma 'z eus tost d'eur bloa abaoe m'eo bet kaset ho korf d'ar vèred? — Betek hen, ec'h on chomet er Purgator, e kreiz an tan, da baea evit ar pec'hejou a lorc'h graet em yaouankiz ; met hirie ar Werc'hez a zo deut da gerc'hat ac'hanon, ha kalz a re-all, hag arc'hoaz, de he Gouel ar c'haeran, ec'h efomp ganti d'ar baradoz. Evelse eman kount bep bloa, ha hirie zo bet tennet a boan kement a eneou evel a dud a zo o chom e kêr Rom. »

O veza ne seblante ket he filhorez kredi he c'homzou : « Klevit mat kement-man, emezi : a-benn eur bloa aman, de evit de, e vefet maro. Ha ma ne deu ket da wir ar pezh a lavaran d'ec'h hirie, kredit ervat am o bet graet goab ac'hanoc'h! »

Ar plac'h yaouank a dremenas he bloavezh oc'h ober ar vad hag o 'n em lakaat e stad da vont dirak Doue. Derc'hent gouel Hanter-Eost, e kouezas klanv hag a-benn an de warlerc'h e oa maro, evel ma oa bet lavaret d'ezi.

*C'houi eo bepred gwir fianz ar paour-kêz :
Rak-se, aman, ni ped ho madelez ;
Ni bed ho Mab, Salver an eneou,
Da rei d'hon zud levenez an nenvou!*

EIZVET DEVEZ WARNUGENT

Mari Rouanez ar Baradoz

- I. Mari a zo bet savet korf hag ene d'ar Baradoz.
- II. Mari a zo evidomp dor an Nenv.

I

Eur burzud bras a zigasas ar Werc'hez er bed-man : eur burzud kaeroc'h c'hoaz a zougas anezi d'ar bed all.

Evit ar Sent, ar maro a zo henvel ouz eur c'houisk : evit ar Werc'hez, ar maro a zo bet evel eun hun hag an hun-se ne badas ket pell.

Ene an Itron-Varia a yeas war eün d'ar baradoz en eur guitaat an douar ; met a-benn tri devez, he c'horf a savas ive eus ar be, leun a c'hloar. Breinadur ar be a zo pae ar pec'hed. Mari n'he doa nag ar pec'hed orijinel, na pec'hejou all ; n'helle ket c'hoarvezout ganti evel gant an dud-all. Eur galon hag he devoa roet eur berad eus he gwad da galon Jezuz ; eur c'horf hag en devoa maget Mab Doue en em c'hraet den hag hen douget epad nao miz, ne dlee ket chom da vreina en douar : re santel e oa evit dont da veza magadurez ar prenved, evel korf ar pec'her. Evel he Mab, ar Werc'hez a dlee trec'hi war ar maro : Jezuz a zo pignet korf hag ene d'ar baradoz ; an enor graet d'ar roue a zo dleet d'ar

rouanez. Mari, unanet gant Jezuz er bed-man, a gerzo d'ar bed-all war roudou he Mab...

Eur vouez a deuas da gana e kichen he ar Werc'hez : « Setu fin d'ar goanv ha d'ar glao ; savit, ma mignonez, deut da zigemer ho kurunenn ». O klevet ar c'homzou-man, Mari a zihun hag a sav eus he be leun a vuhe, kaer evel al loar, skedus evel an heol, galloudus evel eun arme renket evit ar stourmad.

O welet kement-se, an Aele, souezet bras, a c'houlenne an eil digant egile : « Piou eo houman a deu eus an douar, splann evel ar goulou-de, kann evel eur goulmig o sevel diwar ribl an dour, henvel ouz ar vogedenn a c'houez vat a sav eus ar mirr hag an ezans ? »

Hag ar batriached, ar brofeted a respont d'eze : « Houman eo gloar Jeruzalem, levenez Israël, enor hon fobl. Houman eo Mamm Doue ».

Eun digemer dispar a voe graet d'ezi. Mari a oa laouen meurbet ouz en em gaout gant sant Joakim, he zad, gant santez Anna, he mamm, gant sant Jozef, he fried. Jezuz e-unan a deu da benn hent d'e Vamm hag a gas anezi, war e lerc'h, e penn uhelan ar baradoz.

War an douar he deus bet poan ha glac'har. Setu tremenet he foaniou ; n'eman mui en kraou Bethleem na war mene Kalvar : evurus eo breman e kreiz ar gloar. Doue en devoa he c'harget a c'hra-sou ; o laket he deus da dalvout evit an nenv ha paeet mat eo eus he foan ; savet eo er renk uhelan etouez an holl grouadurien ; laket eo da azeza war eun tron kaer e kichen he Mab.

Eun enor a vank d'ezi c'hoaz ! Mamm ar Roue eo dleet d'ezi beza Rouanez gant he Mab. An tri Ferson eus an Dreinded santel a deu eta da lakaat war

he fenn eur gurunenn eus ar c'haeran en eur lavarret : « Setu aman Rouanez an Aele hag an dud ; Rouanez an nenv hag an douar ; ar bed holl a dle d'ezhi enor ha karante ! » Ha, war an dro, eo laket etre he daouarn tenzor an holl c'hrasou.

Bolz ar baradoz a dregern gant kân an Aele ha meulodi ar Sent.

Mari, laouen he c'halon, a unan he mouez gant o re, evit kana ar « Magnificat » ; : « Ma ene, emezi, a veul Doue ha ma spered a zo leun a levenez en Doue, ma Salver. Rak sellet en deus gant trugare ouz e servijerez dister : adalek breman e vezin galvet evurus gant an holl boblou ! »

O ! nag evurus e tcomp beza da gaout Jezuz da Roue ha Mari da Rouanez ! Gwerc'hez Vari, meuli a reomp ganec'h an Holl-C'halloudeg evit an enor en deus graet d'ec'h ; hen trugarekaat a reomp da veza ho roet d'imp da Vamm ha da Rouanez !

II

O kuitaat ar bed-man, Jezuz a lavaras d'e Ebestel : « Mont a ran da di ma Zad ; met ne loskaïn ket ac'hanoc'h emzivadeg ; mont a ran da brepari d'ec'h eur plas ! »

Mari, war e lerc'h, a c'hellfe lavaret kemend-all. Rak petra a ra breman, en nenv, kichen he Mab, nemet hon difenn hag hon sikour da vont ganti ? N'eo aet en hon raok nemet evit hon jacha war he lerc'h.

Dor baradoz an douar a oa bet serret ouz Adam hag Eva, ha Doue a lakas ouz toull an nor eun Ael, gant eur c'hleze tan, evit harz aneze da return war o c'hiz.

Abaoe m'eo savet Hon Salver d'an nenv, ha Mari war e lerc'h, dor ar baradoz a chom bepred digor da gement hini en deus bolonte vat ; hag ar Werc'hez a zo karget da rei d'imp digemer en rouantelez ar peuc'h hag ar gwir evurusted.

Holl ec'h omp galvet da vont d'ar baradoz : evit se ec'h omp bet krouet gant an Otrou Doue ; eno eman hon gwir vro !

Gwelet, karet, tanva Doue, setu aze evurusted brasan an nenv ! Hag e tu-hont, e vezer dizammet eus pep poan. Er baradoz, n'eus na maro, na kanv, na klemm, na glac'har. Tanva a refomp eno, kichen an Otrou Doue, ar blijadur d'en em gaout asambles da viken ha da veva e kreiz an evurusted gant ar Sent hag an Aele ! Pebez dudi evidomp !

Met an hent da vont di a zo rust ha diaes meurbet. Start eo evit ar c'hristen derc'hel gant e zevel, trec'hi ar skoueriou fall, stourm ouz an drouk-spe-red, ha trei kein d'an techou fall.

Mar fell d'imp kerzet kalonek, troomp alies hon sellou warzu an nenv ha sonjomp er Werc'hez a zo du-hont ouz hon gortoz : beza eo, war an dro, hon Mamm, Rouanez an nenvou ha Dor ar Baradoz. Lakomp enni hon fizians : difenn a reio ac'hanomp ouz peb droug.

« Me, emezi, eo Mamm an Esperans ! An neb a gavo ac'hanon a gavo ar vuhe peurbadus hag a deüio a-benn da gaout digant Doue gras e zilvidigez ! »

An eil warlerc'h egile, an Tadou Santel a embann eo ar Werc'hez hon Advokadez holl-c'halloudek, bepred chilaouet gant Doue ; ar c'han burzudus a zigas d'imp an holl c'hrasou ; tenzorerez ha Mestrez holl vadou ar baradoz ; ar Steredenn splann a ziskouez d'imp hent ar silvidigez ; ar Vag

karget da zastum ar gristenien ha da zougen aneze a-dreuz mor kounnaret ar bed-man betek Porz an evurusted peurbadus. Hag an Iliz Santel a hanv Mari Dor an nenv, « Janua cœli ». Pa digoue eur gouel bennak en enor d'ar Werc'hez, e klevet anezi o kana :

*Ni ho salud, Steredenn vor,
Mamm da Zoue, leun a enor,
Gwerc'hez bepred dor an nenvou
Selaouit ouz hon pedennou.*

Skoomp eta war Dor ar Baradoz. N'aer ket en eur palez hep komz ouz ar borzerez. Porzerez an nenv eo ar Werc'hez : laket eo bet gant an Otrou Doue war dreuzou ar Baradoz evit digas fizians da gement hini a dle mont di.

« Goude beza kemeret kemend-all a boan war an douar evit hon silvidigez, eme Person Santel Ars, ar Werc'hez Vari ne gav ket d'ezi he deus graet trawalc'h c'hoaz, ha ne gemero amzer da ziskwiza nemet goude ar Varn diwezan pa vo arru er Baradoz an diwezan eus he bugale. »

SKOUER

En buhe ar Brour Leon, unan eus kentan diski-bien sant Fransez Assiz, e lennomp penôs ar manac'h-man, devot bras d'ar Werc'hez, e tigouezas d'ezan kaout eun hunvre burzudus. Epad ma oa kousket, e welas dirakan, diou skeul hir a save eus an douar betek an oabl. Unan aneze a oa ru evel ar gwad : a-us d'ezi, e oa Hon Salver gant e Groaz. Eben a oa gwenn-kann : war an treuz uhelan e oa azezet ar Werc'hez Vari.

War an douar e oa tud a beb oad hag a glaske sevel dre ar skeul ru, met a-boan o dije savet eur

bazenn bennak ma kouezent e traou. Adstaga a raent gant kalon ha, hep tro, e vezent diskaret : den ne dape mont betek ar penn. En diwez, e voe klevet eur vouez o lavarout : « Perak ne gemerit ket ar skeul wenn? » An dud kêz a sentas hag a savas, hep poan, betek ar penn. Ar Werc'hez a vouse'hoarze oute hag a astenne d'eze e dorn evit o sikour da dapout ar bazenn diwezan.

Kement-se a ro da c'houzout d'imp ne goller n-tra o kaout fizians en madelez hag en trugare ar Werc'hez.

Gwerc'hez santel, eus lein an nenv, eus a greiz ar gloar, grit eur sell a drue ouz ho pugale ken trubuilhet er bed-man ha roit d'imp ar c'hras da vont ganec'h d'ar baradoz!

NAVET DEVEZ WARNUGENT

Mari hag hon bro Frans

- I. Petra he deus graet hon Bro evit enori ar Werc'hez?
- II. Petra he deus graet Mari evit skoazia hon Bro?

I

Etouez an holl boblou eus an douar, Doue en deus dibabet unan ha graet dioutan e vugel muian karet. Hon Bro a zo bet hanvet, abaoe pell amzer, Merc'h henan hon Mamm Santel an Iliz, abalamour, a-viskoaz, hon tadou koz a zo bet gwir soudarded Jezuz-Krist ha difennourien kalonek gwiriou an Otrou Doue.

Beza eo, war an dro, Merc'h henan an Itron-Varia, rak e lec'h ebet n'eo bet muioc'h enoret Mamm Doue evit war douar Frans. Ne oa ket deut c'hoaz ar Werc'hez er bed-man, ha dija, e kreiz koajou don bro Chartr, he skeudenn a oa enoret gant ar C'halianed divadez hag o beleien an Drouized, dindan hano ar Werc'hez a dle genel « Virgini parituræ ». An devosion e kenver Mamm Doue, prezeget d'hon tadou koz gant diskibien an Ebestel, war an dro gant ar relijion gristen, he deus boutet abred gwiriennou don en o c'hreiz. Kentan chapel gwestlet d'ar Werc'hez war hon douar Frans a zo bet savet gant Zachée, ar Publikan pinvidik bet konvertiset

gant Hon Salver e kêr Jeriko. Sant Pothin, diskibiñ sant Yann an Avieler, a zigasas gantan, da Lyon, eur skeudenn livet warni poltred Mamm Doue ha, nebeut amzer goude, en em skignas tro-war-dro an devosion d'an Itron-Varia Fourvières.

Ar varc'heien, an dud a vrezel a yae d'an emgann en eur gana himnou ha kantikou, en eur bedi Mari da rei d'eze an trec'h ha, pa digoueze d'eze retorn d'ar gêr yac'h ha divac'hagn, e lakent sevel ilizou ha chapellou dindan hano ar Werc'hez he devoa o diwallet eus pep gwall-darvoud.

Al labourerien hag ar vicherourien, kerkoulz hag an noblans, a vage karante e kenver o Mamm vat. Digante eo deut d'imp ar gustumans da zougen ha da lavaret ar chapel, da son teir gwech an de kloc'h an « Anjelus » ha da lida goueliou ar Werc'hez. Ar beajour kollet gantan e hent en em erbede ouz an Itron Varia-Sklerder, pe ouz an Itron-Varia Beaj-Vad. Ar martolod, gwall-gaset gant ar barriou-amzer, a c'houlenne skoazell digant an Itron-Varia-Gward. Ar bec'herien ankeniet a deue da ouela ouz treid an Itron-Varia-Gras pe an Itron-Varia-Drugare ; ar glanvourien hag an dud glac'haret a deue da zaoulina dirak skeudenn an Itron-Varia-Drue ; an holl dud reuzeudik hag ezommek a c'halve, gant fizians, an Itron Varia-Wir-Sikour.

Goude ma voe tremenet spount bras an dekvet kantved, pa welas an dud ne oa ket deut, evel ma sonje gante, de diwezan ar bed, kerkent, dre holl, koulz lavaret, e krogjod da sevel ilizou kaer meurbet evit trugarekaat hag enori ar Werc'hez. Herve menoz an Eskibien pe ar brinsed, an holl, beleien ha menec'h, noblans ha kouerien, marc'heien ha gwraze, pinvidien ha peorien, a zirede da rei o aluzen, da sikour digas ar vein hag ar c'hoad, ha pres-tik e kreiz ar bedenn hag ar c'hantikou, e veze gwe-

Iet o sevel warzu an nenv. mogeriou dantelezet ha touriou uhel ha kempenn : ar bobl a skrive evelse, gant mein flour ha kizellet, he devosion birvidik e kenver he Rouanez. Er stumm-se, eo bet savet war douar Frans ar re gaeran eus hon Ilizou-meur.

E keit-se ha goude, betek an de hirie, pet ha pet manati, pet ha pet breuriez, pet ha pet Ober mad n'eus ket bet diwanet en hon Bro, dindan hano ar Werc'hez?

Unan eus hon rouane, Loeiz XIII, en deus laket e rouantelez a-bez dindan skoazell Mamm Doue, gant ar promesse ma vo lidet kaer, bep bloa, gouel Hanter-Eost ha graet en he enor eur prosesion en pep parrouz, ar pezh hon eus dalc'het d'ober abaoe ; en de-se, Mari a zo meulet gant an holl evel Rouanez Frans.

Pep sort barriou-amzer a zo bet tremenet a-us d'hon Bro garet ; met en despet d'ar brezel graet d'hon feiz gant an drouk-spered hag e vevelien, Mari a zo hepred Rouanez Frans hag a wel he bugale ken aketus ha biskoaz da renti d'ezi gloar ha karante.

II

Mari n'eo ket manet warlerc'h e kenver he bugale. Adalek ar penn kentan, he deus troet he selou warzu hon Bro, he bugel muian-karet. Setu perak, ar c'hentan etouez an holl rouanteleziou, ar Frans a resevas sklerijenn ar feiz ha dour santel ar Vadeziant ; hag abaoe an de-se, dorn madelezus ar Werc'hez a zo deut da ziwall he Merc'h henan, kement gwech ma zo bet eviti eur riskl bennak. Na pegen kaer eo istor ar Frans ! En petore bro e kavfer, evel aman, kemend-all a rouane brudet evel Charlemagn, sant Loeiz, Loeiz XIV, Napoleon ; prinsezed fur ha santel, evel santez Jenovefa, san-

tez Klotild, Gwenn a Gastill ; — hrezellourien kalonek ha dispount evel Roland, Bayard, Gwesklen, santez Jann d'Ark, Konde ha Turen ; — tud a fe evel sant Bernard, sant Fransez a Zal, sant Visant a Baol, Person santel Ars, santez Tereza ar Mabig Jezuz ?... Holl int bet dibabet gant ar Werc'hez evel eun testeni anat eus he c'harante evit hon Bro... Hep mar ebet, avel an ifern en deus klasket, meur a wech, hada e fals-kredennou etouez hon tud koz, met biskoaz n'eo bet dallet o spered gant ar gevier : gant sikour an Itron-Varia, o deus trec'het an diaoul hag e gonsorted : pep tro, o deus kavet an tu da vouga kreansou an dud dife. Mari he deus sikouret hon rouane hag hon eskibien da stourm ouz ar Varbared a glaske dismantr kement kêr a tôlent troad enni ; hi adarre he deus roet dorn da Charl-Martel ha d'e zoudarded da blada, war dachenn Poitiers, ar Vusulmaned o klask beuzi ar vro er gwad hag en tân.

Epad an drizekvet kantved, heretiked diwar-dro Albi, er c'hreiste eus ar Frans, a savas eur relijion neve : ar re-man, hen gwaz ha dispac'herien, a glaske moug ar gwir feiz, diskar an ilizou hag an aoteriou, laza ar veleien hag ar gristenien. An holl a spounte diraze ha den ne oa evit dont a-benn aneze. Ar Werc'hez a zisklerias da sant Dominik devosion ar Rozêra. E brezegennou hag e viraklou, harpet war ar chapeled, a reas d'ezan gonit milierou ha milierou a heretiked d'ar gwir feiz.

D'ar bemzekvet kantved, e oa eur brezel hir etre Bro-Sôz ha Bro-C'hall. Ar Sôzon o devoa laket da vat o c'hrabanou war hon Bro. Ar Frans a oa rivinet, hualet, dare da vervel. Met Doue hag ar Werc'hez ne oant ket a-du gant ar Sôzon hugunoded. En eun taol, dre eur burzud dispar, setu chenchet penn d'ar vaz. Digaset o deus santez Jann d'Ark da rei lamm d'ar Sôzon hag, en hano Jezuz ha Mari,

ar plac'h yaouank kalonek a voutas ermaez hon enebourien mezus.

Eneb d'ar Protestanted, d'ar Jansenisted ha d'ar Filozofed dife, zo bet savet, dindan skoazell ar Werc'hez, skrivagnerien ha prezegerien diouz an dibab evit difenn ha harpa ar gwir feiz.

Ma he dije dleet mervel, Bro Frans a vije bet beuzet en gwad he bugale, e kerz an Dispac'h bras : Mari, en dro-man c'hoaz, a harzas outi da vont da goll hag a adlakas anezi sounn en he sav.

Epad ar c'hantved diwezan, dreist-holl, pegen mat eo bet Mamm Doue evit hon Bro! Pemp gwech dioustu he deus en em ziskouezet d'he bugale : en Pariz, evit digas d'imp ar Vedalenn vurzudus ; — er Salett, evit prezek d'imp ar binijenn ; — en Lourd, evit deska d'imp dever ar bedenn ; — en Pontmain, evit digemenn ar peuc'h ; — en Pellevoisin, evit hon dougen da gaout fizians en Kalon Jezuz.....

Ar pezh a rae d'eur beleg eus an Itali lavarout gant kalz a spered . « Hen gouzout a ran, eur chans kaer eo d'imp kaout aman ti ar Werc'hez, digaset en Loretta gant an Aele ; met ret eo lavarout ar wirione, Mari n'en em blij ket kaer er gêr, pa ve kavet ken alies o vale war douar Frans! »

En gwirione, Bro Frans a zo rouantelez Mari : « Regnum Galliae, regnum Mariae! » Gwelloc'h c'hoaz, e lavarinn, warlerc'h Hon Tad Santel ar Pab Beneat XIV : « Regnum Galliae nunquam peribit », rouantelez ar Frans ne vo biken kollet, rak biken ne vo dilezet gant ar Werc'hez.

SKOUER

En 1855, e oa savet brezel etre ar Fransijen hag ar Rused. Eur bloa oa, e pade ar seziz laket gante

war gêr Sebastopol, hag hon soudarded n'o devoa ket gallet kaout an trec'h.

Ar jeneral Pellissier, o konta war skoazell ar Werc'hez, a lakas en e benn ober eur c'hrog de ouel Ginivelez Mari, an eizvet a viz gwengolo. Darn eus e ofiserien a gavas da lavaret ne blijfe ket, marteze, an dra-se d'hon mignoned, ar Sôzon, dre ma cant protestanted, enebourien d'ar Werc'hez.

Pellissier ne reas van ebet eus se hag a zalc'has d'e c'her.

D'an de merket, abred kaer diouz ar beure, e ruz an emgann ha kerkent hon soudarded en em daol war gastel Malakoff. Mac-Mahon a bign ar c'hentan war lein ar voger. Huchal a raer d'ean diskenn, betegout na vije brevet gant eun tenn-poultr bet kuzet ouz troad an tour. « N'eus forz, emezan, aman ec'h on, hag aman e chomin ». Hag e sankas drapo Frans war gern ar c'hastel.

Mari a oa gantan ; Mari he devoa douget anezan d'an nec'h ; setu perak ne sponte ket dirak ar riskl. Prestik goude, an enebourien a souzas. Ar c'hano-liou manet war o lerc'h a voe dastumet ha digaset da gêr Le Puy, en kalon hon Bro, evit beza dispenet ha teuzet en tan.... Dre anaoudegez vat e kenver ar Werc'hez, zo bet moulet gante eur skeudenn gaer, roet d'ezi gant ar bobl an hano a Itron Varia Frans.

Gwerc'hez santel, hon esperans hag hon skoazell, hon diwallit eus ar gevier, an dizurz ha fallagriez hon enebourien ; bezit da viken-Rouanez hon Bro garet.

TREGONTVET DEVEZ

Pirc'hirinajou en enor d'ar Werc'hez

I. Breiz eo bro ar pardonioù.

II. Penôs darempredi ar pardonioù.

I

Bez ez eus du-man ha du-hont, ebarz ar bed, feunteunioù brudet, pleustret gant klanvourien a deu di da glask ar pare eus o c'hlenvejou. Bez ez eus, kerkoulz all, dindan bolz an nenv, lec'hiou santel darempredet, a rumm da rumm, gant ar gristenien a gav ennê grasou dispar evit ar c'horf hag evit an ene.

Doue, perc'hen an holl vadou, a skuilh e c'hrasou war e vugale er stumm ma kar. Hen e-unan en deus dibabet kornadou douar, lec'hiou anavezet dreist d'ar re all, elec'h ma plij d'ezan diskouez, dirak an holl, galloud ha madelez e Vamm, ar Werc'hez Vari.

Piou a c'hellfe niveri ar chapelloù, an ilizou, ar pardonioù bet savet dre holl, gant ar gristenien, en enor d'ar Werc'hez?

A-viskoaz, ar Vretoned a zo bet devot d'o Itron, ha Mari n'eo ket manet warlerc'h e kenver he bugale. E Breiz-Izel, e kaver meur a dachenn bet taolet troad warni gant Mamm Doue, pe kavet enni eur skeudenn vurzudus ; pe merket gant eur burzud bennak, hag a zo deut abaoe da veza eul lec'h san-

tel evit he bugale. Pet ha pet chapel, koantoc'h an eil evit eben, savet en enor da Vari, a gavomp a bep tu, war gern ar meneioù, war ribl ar mor glas hag e gwasked an traouiennou don ! Ar Werc'hez a ziskouez e plij d'ezi gwelet he servijerien bodet el lec'hiou santel choazet ganti, peogwir e talc'h da skuilh warneze madelezoù ha grasou a-leiz.

Hon tadou koz a oa gante ar c'hiz d'ober eur pirc'hirinaj hir ha skwizus a hanvent Tro-Breiz. Tremmen a raent, an eil warlerc'h egile, dre ar penitioù pe ar manatioù bet savet gant kentan misionerien hon bro, Sant Malo, Sant Brieg, Sant Tual, Sant Paol, Sant Samson, Sant Korantin ha Sant Patern ha, goude beza daoulinet, gant devosion, dirak o relegou, e plije d'eze ober eur pleg evit mont da bedi dirak skeudenn ar Werc'hez, e Rumengol, er Folgoat, e Gwengamp, e Rostren.

Diniver e oa gwechall, e Breiz-Izel, an ilizou savet en enor da Vamm Doue : ne oa ket eur gêriadenn, koulz lavaret, hep he chapell. Epad ar bloa, e choement digor da zigemer ar gristenien deut, eus abell awechou, da ranna gant ar Werc'hez o joa hag o anken ; met pa digoueze de ar pardon, ar birc'hirined a zirede a bep tu, a strolladou, ar chapel en o dorn hag ar bedenn war o muzelloù, d'en em bedi ouz o Rouanez ha da c'houlenn diganti o mennad.

Peurvuian, goude beza baleet epad an noz, dindan sklerijenn ar stered, e arruent, war droad ha war yun, awechou diskabel ha diarc'hen, pe en korf o roched, da zaoulinan war ar vein yen kleuzet gant boutou ar bardonerien ; ar bardonerien deut eno, a rumm da rumm, da drugarekaat ar Werc'hez ha da c'houlenn diganti grasou neve. Hed ar beurevez, an Iliz a veze leun-chouk a dud a beb oad hag a bep stad deut di da bedi, da gomunian ha da heuilh an ofisou.

Ha d'an abarde, goude ar gouspero kanet war an ton bras, ar prosesion a yae ermaez, dindan bannou sk dus an heol. Eur mor a dud a gerze warlerc'h ar c'hroaziou, ar bannielou, skeudenn ar Werc'hez douget war diouskoa ar plac'hed yaouank gwisket en gwenn, o kana, a-bouez-penn, ar c'hantikou hag ar gwerziou koz, epad ma tregerne ar mêziou gant mouez ar c'hleier war vrall, ha ma save warzu an nenv flammou an tantadou lann.

Pebez trid-kalon gwelet ken lies a vil den unanet o pedi, o kana, o veuli an Hini a zo, war an dro, Mamm Doue hag o Mamm! Al levenez a bare war bep tal; kalon an holl a oa evel beuzet en eur mor a evurusted ha pep hini a reterne d'ar gêr o tanva en e greiz evel eur blaz eus douster ar baradoz.

II

Bez ez eus tud sot gant ar gêr hag a gav da lâret : « Perak mont ken pell en pirc'hirinaj? Evit petra kemer kemend-all a boan hag ober dispignou ken bras evit redek da bardona d'ar penn-all d'ar Franz, d'ar Salett, da Rokamadour pe da Lourd? Daoust hag-en ne vije ket ken madelezus ha ken galloudus ar Werc'hez aman evel du-hont? »

A dra sur, n'eus nemet en Itron-Varia, Mamm Doue ha Mamm an dud, Rouanez an nenv hag an douar. Roet d'ezi an hano a garfet, hanvet-i Itron Varia Wir-Sikour, Itron Varia Drue, Itron Varia Sklerder, pe Itron Varia Lourd, ar memez hini eo a bedet bep tro, ar Werc'hez glorius Vari. Met ma kaver dre holl devosion da Vari, bez ez eus, koulskoude, plasou bet dibabet ganti, ilizou elec'h ma plij d'ezi, dreist d'ar re-all, beza pedet hag enoret gant

he bugale; chapelou elec'h he deus kustumet rei muioc'h a c'hrasou.

Ar c'hiz da vont da bardona ouz treid ar Werc'hez a zo unan eus ar re gosan bet heuilhet gant ar gristenien : beza eo eun devosion kavet mat gant an Iliz Santel ha binniget ganti. Hirie, muioc'h marteze evit biskoaz, eo pleustret ar pirc'hirinajou. Siouaz, mar zo muioc'h a dud o redek ar pardonioù, se ne ra ket eo startoc'h ar feiz, rak kalz a ya di evit bale, evit tremen an amzer, gant c'hoant da welet treou neve, ha n'eo ket gant eur gwir devosion. Ar re-se a vije kalz gwelloc'h d'eze chom er gêr.

Eur pardon, ma eo eun dudi evit an daoulagad, a dle beza, araok pep tra, eun akt a feiz hag a relijion. Evit ar gwir gristen, eur pirc'hirinaj a zo evel eur skeudenn eus buhe an den war an douar : kas ra d'imp da intent penôs, arôk gallout diskwizan en env, e kichen Doue, ar Werc'hez hag ar Sent, eo ret, da gentan, heuilh, war o lerc'h hent ar bedenn, an doujans hag ar binijenn. Hon Tadou koz a bleustre ar pardonioù gant kalz a feiz; mont a raent e pirc'hirinaj, nann evit klask plijadur, met evit nerza o spered kristen. Evelte, deomp d'ar pardonioù, nann evit deverraat an amzer, met evit pedi, evit krenvaat hon c'harante, evit deski hent ar santelez.

Kustumomp ober, bep bloa, eur pirc'hirinaj bennek, aman pe du-hont, demdost d'ar gêr : en pep korn eus hon bro Breiz-Izel ez eus ilizou ha chapelou gwestlet d'ar Werc'hez, elec'h m'eo techet Mamm Doue da ziskouez muioc'h a garante hag a vadelez d'he bugale. Ar gouloioù renket dirak an aoter; an taolennou marbr stag ouz ar voger; an aluzenou a goue er c'hef, ar pedennou a deu, hep paouez, war ar muzellou a lavar, gwelloc'h evit ar c'homzou, ar fizians o deus he bugale en kalon o Mamm eus an nenv. Eno e welfomp n'eo ket maro ar feiz e Breiz-Izel; eno ne seller nemet ouz Doue hag e Vamm;

eno e welfomp tud pinvidik stouet d'an douar ,mesk ha mesk gant al labourerion, ar vicherourien hag ar vartoloded. Deomp evelte, leun a fizians, d'en em erbedi ouz hon Mamm ha da c'houlenn diganti hon mennad. N'ankouaomp ket, dreist-holl, penôs ar gwellan stumm da deneraat he c'halon ha da veza chilaouet ganti eo ober eur govizion vat ha tostaat ouz an Daol-Santel. Pa vo Jezuz ganimp en hon c'hreiz, penôs e kredo Mari ober ouzimp skouarn vouzar?

Kacran pirc'hirinaj en enor d'ar Werc'hez eo hini Itron Varia Lourd!... N'eus hini a rafe muioc'h a blijadur da Vari, na muioc'h a vad d'eur c'hristen. Du-hont, kement a weler a zo eur sklerijenn evit ar spered ; kement a glever a zo eun dudi evit ar skouarn ; ha kement a santer a zo eun douster evit ar galon. It eta da Lourd! Ne gollfet nag hoc'h amzer, nag hoc'h arc'hant, nag ho poan. Ar Werc'hez he unan he deus goulennet ma c'h afer di en bosesion : o senti outi, e tennfet warnoc'h he gwellan bennoz.

SKOUER

En XVII^e kantved, en deus bevet war douar ar Franz eun den Doue, skouer an holl birc'hirined. Beza a oa an hini kosan eus a bemzek a vugale : de e vadeziant, e voe roet d'ezan an hano a Veneat-Jozef.... A-vihanik e oa devot, sentus ouz e gerent ; biskoaz ne reas an disteran poan d'e dud.

Goude beza studiet al latin, d'an oad a naontek vloa e klaskas mont da vanac'h ; met dre holl e kavas dirazan dor serret.

Adalek neuze, Beneat a gemeras eur vicher iskis : lakaat a reas en e benn beza eur manac'h-ba-

leer. Mont a reio war droad dre an henchou dizro : pa gavo lec'hiou santelaet gant devosion ar gristenien, e reio eno eun diskwiz ; druilhou a vo war e gein : eur chapeled en e zorn ; eun all endro d'e c'houg ; eur grusifi en e gerc'hen. Na glao, na yenien, nag erc'h na tommder, netra ne viro outan da vont endro. Peurliesan, e kousko ermêz ; ne vevo nemet gant an aluzenou a vezo roet d'ezan ; ne c'houlenno netra ha ne viro netra evit an de warlerc'h. Alies e vo goapaet, argaset a daoliou mein gant ar vugale ; teulet e vo er prison evel eun torfetour. Ne vezo kammed evurusoc'h evit pa digouezo gantan beza gwall-gaset gant an dud.

Treuzi a reio an Itali, ar Franz hag ar Spagn evit enori Sant Fransez, en kêr Assis ; pedi Sant Mikêl, war mene Gargan ; daoulina war ve Sant Nikolas, e kêr Bari ; sevel war vene Kassin da welet peniti Sant Beneat ; mont da welet an Aotrou Sant Jakez e Kompostel.

Pemp gwech e vo gwelet o vont da bardona da Loretta, en ti ar Werc'hez.... Daoust ma klask beva pell diouz an dud, an holl a deu d'hen anavezout ha d'hen karet : « Beneat, emeze, n'eo ket eun den eo, met eun Ael ».

Eun devez, ar merc'her arôk sul Fask, ar 16 a viz ebrel 1783, wardro eun eur goude kreizte ; goude beza graet eur bedenn hir ha kalonek dirak skeudenn Itron Varia ar Meneziou, Beneat o tont ermêz, a gouezas hanter-varo war dreujou an iliz, hag eur pennadig goude, e rentas e ene d'e Grouer, d'an oad a bemp bloa ha tregont, goude trizek vloa a binijenn. Kerkent ma voe klevet, ne voe e kêr Rom nemet eur youc'hadenn : « Maro eo ar Sant! »

Epad pevar devez, e gorf a chomas war ar varv-skaon ha gantan eur c'houez dispar. Dre urz an Tad Santel ar Pab, e voe graet d'ezan eun interamant

kaeroc'h evit hini eur roue hag e voe laket dindan ar men elec'h ma oa kustum da chom daoulinet adalek anjelus ar beure betek hini kreiste.....

Gwerc'hez santel, hentchit ac'hanomp ebarz an draouienn a zaerou a hanver ar vuhe-man ha, pa vo achu ganimp amzer hon firchirinaj er bed-man, diskouezit d'imp dremm Jezuz, ho Mab binniget! Evelse bezet graet.

AN DEVEZ DIWEZAN

Mari hent ar silvidigez

Ar beajour, pa dosta ouz ar gêr, a blij d'ezan ad-tremen en e spered an hent en deve graet. Evel-tan, er mare ma 'z omp o vont d'achui ar miz-man, greomp c'hoaz eur sell war buhe ar Werc'hez.

Gwelet a reomp anezi choazet a beb amzer gant Doue evit bezan Mamm Salver ar bed. Hed-da-hed gant an hent, Mari a resev grasou dispar, met e keit-se, ar Werc'hez ne baouez ket da renti d'he Chrouer karante evit karante ha d'ober impli vat eus an holl donêzonou roet de'zi. Setu perak, goude beza digemeret anezi en e rouantelez, Doue a laka etre he daouarn holl vadou ar baradoz, ha breman, netra ken ne ziskenno eus an nenv hep tremen dre zaouarn Mari.

Mari a zo bet war hanter gant he Mab ebarz labour hon silvidigez hag abaoe, den n'a d'ar baradoz nemet gant sikour an Hini a zo galvet Dor an nenv. Mar fell d'imp eta arruout er pâl, chomomp stag ouz Mari, dre chadenn eur gwir garante.

Eun devez bennak, estranjourien, c'hoant' gantê da gomz ouz Jezuz, a deuas da gaout unan eus an Ebestel d'hen pedi d'o c'has betek ar Mestr. Evit tapout sevel betek Hon Salver, n'hallfemp ket ke-

mer gwelloc'h rener evit ar Werc'hez, e Vamm hag hon mamm. Beza devot da Vari a zo kaout dija eun troad war dreujou ar baradoz.

An Iliz-Veur savet war vene Montmartr, en enor da Galon Jezuz, a ziskouez d'imp pegen gwir eo an dra-man... Ouz troad ar mene-se, e kreiz kêr Bariz, e kaver eun iliz all gwestlet da Itron Varia an Trec'h, repu ar bec'herien, Kement-se a ro d'imp da gompren eo stag an diou devosion-man an eil ouz eben hag eo dre galon ar Werc'hez hon eus da dre-men da gentan evit sevel betek kalon he Mab : « Per Matrem ad Cor Fillii ». — « Dre zaouarn ar Werc'hez e pigner da gaout kalon he Mab ». Enori ar Werc'hez a zo kemer hent ar silvidigez, gonit eur plas en kalon he Mab er bed-man ha meritout azeza, eun devez, en o c'hichen er baradoz.

Lakomp eta Mari da ren war hon ene, hon c'halon hag hon oberou. N'eo ket eur wech an amzer hepken eo mat d'imp en em erbedi ouz mamm Doue; kustumomp beva unanet ganti e pep tra : e kreiz ar boan, deomp en he c'hichen da glask nerz ha konfort ; pa deu an dentasion war hon zro, krogomp en he dorn madelezus ; pa 'n em gavomp dirak eun dêver diaesoc'h, goulennomp diganti sikour ha skoazell ; pa ne ouiomp ken war betore tu mont, klas-komp ali diganti. Adalek ma 'z omp dihun, diouz ar beure, roomp d'ezi hon c'halon ; epad an de, kerzomp dindan he lagad ; rannomp ganti kement poan ha kement plijadur a deu d'imp a-berz Doue pe a-berz ar grouadurien ; greomp pep tra evit plijout d'hon Mamm eus an nenv.

Daoust ha pegen dister ha pegen divalo e vije hon oberou, adalek ma tremenont dre zaouarn ar Werc'hez, evit beza kinniget da Zoue, e teuont da veza talvoudusoc'h evit an arc'hant hag an aour.

Talomp pled ive da gerzet war he roudou ha da heuilh an hent he deus pleustret er bed-man. Warlerc'h Jezuz, e lavar d'imp : « Roet am eus d'ec'h ar skouer evit ma refet evel m'am eus graet me manun ». Eur bugel bet savet mat gant eur vamm fur ha santel a dle lakaat e boan da glask beza henvel outi e pep tra. Hogen, Mari he deus tremenet dre lec'h ma tremenomp bemde. Deskomp ganti pedi, senti, labourat, gouzanv hag ober, e pep tra, bolonte an Otrou Doue.

Kemer Mari evel skouer ha Mamm eo, evit ar c'hristen, kemer an tu da blijout meurbet da Jezuz ha da veza gwir vugel da Zoue. Rak, adalek an de m'eo deut da veza Mamm d'Hon Salver, ar Werc'hez hag he Mab ne reont ken nemet unan : n'hallont ken beva an eil heb egile. Ober eun disparti etre Jezuz ha Mari a vije dispenn an urz savet gant Doue ha koll hent ar silvidigez.

Labour hon silvidigez a zo bet graet gant Jezuz ha Mari, ha setu perak breman, er baradoz, netra ne ve graet gant Hon Salver nemet gant sikour ar Werc'hez ; gras ebet ne ziskenn eus an nenv war an douar hep tremen dre zaouarn Mari : chomomp eta dorn-ouz-dorn ganti, evit beza tostoc'h da Jezuz. N'eus ket eun dra hag a rafe muioc'h a blijadur da Zoue. « An Otrou Doue, evel ma lavar d'imp an den santel Grignon a Vontfort, a fell d'ezan e vije breman e vamm muioc'h anavezet, karet hag enoret evit n'eo bet biskoaz ».

SKOUER

E miz genver 1903, e voe digemeret en Hospital Montargis eun den yaouank a c'houezek vloa, klanv

e skevent. Epad tri miz, ar beleg a deuas bemde da welet anezan, met ar c'hlanvour ne brizas ket ranna eur ger : pep gwech, e troe e benn ouz ar voger, mut evel eur pesk.....

Eun devez bennak, e pedas al leanez a rae war e dro da zigas d'ezan eul levr katekiz. Houman, souezet, a c'houlennas digantan perak e c'hoantae kaout al levr-se : « Fe 'vat, emezan, kovez a fell d'in ha c'hoant am ije d'ober an treou evel m'eo dleet ».

Penôs e oa deut, en eun taol, da zistrei ouz Doue ? Setu aman petra a gontas d'ar beleg : « Ma zad, emezan, graet am eus ma fask kentan, breman 'zo pevar bloa bennak. Evit gwir, ne ris van ebet ouz an dra-se ; sonj am eus e oa bet gwisket d'in, en de-se, dilhad kaer, ha netra ken..... D'an abarde, holl vugale pask, evel m'eman ar c'hiz, en em westlas d'ar Werc'hez ; d'ar mare-se, e sellis ouz skeudenn Mari hag e lavaris d'ezi : « Gwerc'hez santel, marvat ne vin biken nemet eur gwall-vugel, met n'eus forz, en em rei a ran d'ec'h a greiz kalon, ha goulenn a ran diganec'h ma diwall korf hag ene ».... Betek hen, n'am eus ket talvezet kalz tra, ha koulskoude, ar Werc'hez n'he deus ket ma dilezet, peogwir, dre ar c'hlenved, he deus ma digaset aman evit kovesaat, retorn e peuc'h gant Doue ha mervel en e garante ».

Beva a reas c'hoaz eun toullad devezioù ; di-c'haoua a reas eus e wellan evit e vuhe dremenet, hag a varvas evel eur sant....

Gwerc'hez santel, Mamm da Zoue, me ho kemer hirie evit ma Mamm, ma Fatronez, ma Rouanez. Toui a ran e karin ac'hanoc'h epad ma buhe penn-da-benn : 'n em c'homzou ha 'n em oberou, ne vo biken netra d'ober poan d'ec'h : ne loskain biken ar

re a zo dindanon da lavarout pe d'ober an disterantra eneb d'an enor a zo dleet d'ec'h. Ho pedi a ran d'am digemer hirie evit ho pugel, d'am diwall epad ma buhe ha d'am difenn e pred ar maro, evit ma varvin en karante Jezuz. Evelse bezet graet.



KANTIK da Rouanez Breiz-Izel


WAR DON : « *O Marie conçue sans péché* ».

DISKAN

*O Mari, konsevet hep pec'hed,
Pedit, pedit, pedit evit Breiz-Izel ;
O Mari, konsevet hep pec'hed,
Pedit, pedit evit Breiz-Izel.*

*Evit hon bro gêz,
Mamm meurbet karet,
E teuomp d'ober eur bedenn
Dre ho madelez,
Gwerc'hez vinniget,
Diwallit Breiziz da viken.*

*Rak panevet d'ec'h,
Mamm ar Vretoned,
Ar fall n'hellfe den hen trec'hi.
Digasit ar peuc'h
D'ho tukaj gwasket
Gant an arne prest d'hen beuzi.*



*Hon esperans ni
En ho madelez
A zo bepred krenv ha gwirion ;
Na loskit mui,
'N ho rouantelez,
Tad ar gaou da sevel e dron.*

*O Mamm da Zoue
Ha Mamm Breiz-Izel,
Chilaouit mouez ar Vretoned :
Epad hon buhe,
Ha betek mervel,
D'ec'h e chomfomp fidel bepred.*

*Neuze eun devez
Peurachu an hent,
E kreiz ar gloar, al levenez,
Ebarz ho palez,
E kichen ar Sent,
Digemerit bugale Breiz!*



IMPRIMATUR

Brioci, die 28a Augusti 1930.

Eug. LE BELLEC.

Vic. gén.

TAOLENN

Evit digeri miz Mari	7
Devez kentan	13
Eil devez	17
Trede devez	22
Pevare devez	27
Pempet devez	32
C'houec'hvet devez	37
Seizvet devez	42
Eizvet devez	47
Navet devez	53
Dekvet devez	58
Unnekvet devez	63
Daouzekvet devez	69
Trizekvet devez	75
Pevarzek devez	81
Pemzekvet devez	87
C'houezekvet devez	93
Seitekvet devez	99
Triouec'hvet devez	104
Naontekvet devez	109
Ugentved devez	114
Kentan devez warnugent	119

Eilvet devez warnugent	125
Trivet devez warnugent	130
Pevare devez warnugent	136
Pempet devez warnugent	142
C'houec'hvet devez warnugent	149
Seizvet devez warnugent	154
Eizvet devez warnugent	160
Navet devez warnugent	166
Tregontvet devez	172
An devez diwezan	179
Kantik da Rouanez Breiz-Izel	185



707